

J.-M. LE GALL

CHALONI

Miz Mari

Gant

Santez Thérèze ar Mabig Jesus

PREMIÈRE ÉDITION

Me a fell d'in tremen va
baradoz oc'h ober vad var
an douar.

Komzou Santez Thérèze.

LIBRAIRIE RIOU QUERNÉ
10, place Thiers, MONTROULEZ

MIZ MARI

GANT

SANTEZ THÉRÈZE AR MABIG JESUS

J.-M. LE GALL

CHALONI

Miz Mari

Gant

Santez Thérèze ar Mabig Jesus



Me a fell d'in tremen va
baradoz oc'h ober vad var
an douar.

Komzou Santez Thérèze



Cette reproduction est faite
avec l'autorisation de
l'Office Central de Listeux.

LIBRAIRIE RIOU QUERNÉ
10, place Thiers, MONTROULEZ

Nihil obstat :

J. F. LE SANN,
Can. cens.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 15 octobre 1931.

| P. JONCOUR,
Vic. gen.

Evit digeri Miz Mari

Gant an hini e deuz bet digant Doue roz ar baradoz eo e tremenimp ar miz-man, miz ar bokedou.

Santez Thérèze ar Mabig Jesus a vezo ganeomp bep abardaëz; Hi eo a reno hag a sklerijenno ac'hanomp dre he c'henteliou plean ha sklear, he c'henteliou a feiz hag a fizianz e Doue. Ganthi e pedimp guelloc'h rak lakad a rai en hor c'halon he c'harantez evit Jesus hag he Vamm zantel.

Araok skriva, he-unan, histor he buez, leor burzuduz anavezet e kement korn a zo er bed katolik, Therezik (rak an hano-ze a gare), a zaouline atao dirak skeuden Rouanez an env evit he fed da gregi en he dorn, gant aoun da skriva netra da zisplijout d'ezhi.

O tigeri ar miz-man, hag a zo, e guirionez, miz hor Mamm zantel, e pedomp ive Mari da rén hon dorn ha da veza ganeomp e kichen Santez Thérèze ar Mabig Jesus, evit ma c'hello ar pezh a skrivomp el leor-man, ober eur vad benag d'an eneo.

« Doue en euz great ac'hanon eün ha pleañ, a lavare Thérèze, ha bemdez e kavan bravoc'h ha talvoudusoc'h ar vertuziou a ra d'eomp beza henvel deuz ar vugale. Bemdez e sonjan gant kalz a blijadur, e buez ar Verc'hez santel e Nazareth, evit heulia ar memez hent ganthi, eun hent ha ne'z euz ennhan netra dreist, mes ar berfection great gant ar vertuziou ordinal ha kuzet. »

Bemdez epad ar miz-man, e lakaimp dirag hon daoulagad unan benag deuz vertuziou bian ha kuzet fleuren ar C'harmel, rak he buez a zo bet pleañ meurbed, ne gavimp ennhi netra vraz da zaoulagad an dud, nag ar c'hroaziou, ar pinijennou a ra d'an dud chomm souezet. Santez Thérèze, hag a vezo bemdez hano anezhi, a zo eun hent pleañ great gant ar fizianz ha gant karantez Doue epad eun nebeut bloaveziou.

Ha koulskoude, hi he-unan a lavare : « Doue a raio evidon-me burzudou en tu all d'ar pezh a c'houlennan. »

O velet, a spered, an amzer da zont, e kane ar c'hantik a anaoudegez vad, ar « Magnificat » ha lavaret a rea, ennhi he-unan : « Abalamour ma 'z oun bian, em euz plijet d'an Hini a zo dreist pep tra. » Bian dre an humilite, ne glask atao nemed beza bia-

noc'h c'hoaz, evel ma c'houlenn an aviel.

Ar c'hoant-se da veza henvel deuz ar vugale, a galon hag a spered, n'eo mui kalz anavezet en hon amzer; kalz a zo hag a glask eur berfection diez, dre henchou dianavezet; ankounac'had a reont en doa, eun devez, hor Zalver, kemeret eur bugel bian da lakad e kreiz an Ebestel en eur lavaret : « Ma n'oc'h ket henvel deuz ar bugel bian-man, ne deot ket da rouantelez an Env. »

O Sonjal e kementse, eur beleg savet huel en Iliz katolik, a skrive evelhen : « Ni hag a zo hanvet doktored Israël, ni a roe d'an dud eun deskadurez huel ha n'o doa ket ar gristenien amzer da zonzjal ennhi. » Roit d'eomp emezho, boued da zrebi ha dillad da viska d'hor bugale, ha neuze on devezo amzer da zonzjal ervad er pezh a livirit; pe c'hoaz : « grit d'eomp eur c'hatekiz izel ha sklear ha neuze e talc'himp sonjguelloc'h er pezh a zeskit d'eomp. » Ha Doue en euz selaouet an dud-se : kemeret en deuz eur bugel, Thérèze, ha lakeat anezhi e kreiz he Ebestel; hag ar bugel-ze e deuz desket d'ezho guirionezou eaz, izel ha ken sklear ma o deuz ranket an doktored anzañ ne ouient ket hag ez int en em lakeat da zeski d'an dud ar pezh e doa desket ar bugel-ze d'ezho.

En hon amzer e karer enebi, ha Doue en euz roet eur zantez hag a zo en em lakeat oll, a bez, etre daouarn Doue. En hon amzer ar c'halonou a zo kaledet ha Doue en euz roet d'eomp eur zantez leun a deneredigez; an dud a zo dallet gant an ourgouil ha Doue en euz diskouezet eur zantez a humilité. »

Ha c'houi, hor c'hoarig vian karet, kasit ac'hanomp dre hent ar re a zo bugale a galon hag a spered; ha daoust ma 'z eo an hent-se kontrol da ourgouil ar bed, diskouezit d'eomp ez eo an hent sura hag an eüna evit mont d'ar baradoz.

Guerc'hez santel, Mamm da Zoue, c'houi a zo prinvidig aouallac'h ha leun a vadelez ha ne gavot ket diez guelet ac'hanomp o tremen ar miz-man gant Santez Thérèze ar Mabig Jesus e deuz kement karet ho Mab, daoust ma 'z eo ar miz-man konsakret d'eoc'h dre ar bed oll.

★ ★ ★

E CEPRANO (ITALI)

EUR PLAC'HIG TRI BLOAZ A ZO PAREET

E bro ebet, marvad, ne'z euz muioc'h a garantez hag a zeposion evit Santez Thérèze ar

Mabig Jesus eget ne 'z euz en Itali, hag abalamour da ze ar zantez a skuill kement a c'hrasou var ar vro-ze e doa kavet ken kaër guechall.

Agatina i Pannicia a oa eur plac'hig koant ha jentil. Tri bloaz e doa ha da viz du 1912 ez oa o vont da vervel gant ar c'hlenved peultrin deuz an daou du. — Anezhi he unan ez oa en em lakeat, evel eun ealiek, dindan skoazel santez vian Lisieux ken karet en he famill. Epad he c'hlenved e ranke kaout atao ganthi imaj ar zantez, ha pa ranket ober he guele e starde an imaj-se var he c'halon. — Ar medisün a lavare ne bareche ket. Pa vije galvet, ar bugel a zigore kouls goude he daoulagad en eur lavaret : « Petite Thérèse a bareo ac'hanon ». — Eun nosvez goude eur waskaden skrijuz, ar bugel a lez he fenn da goueza var ar pluëk; he daoulagad a zo serret ha ién eo dija.

He zad beuzet en he c'hlaç'har a gemer an imaj hag a lavar : « Va c'hoar Thérèze, ma talc'hez anezhi d'in, me a baeo ac'hanout daoust ma 'z oun paour. » Hag e laka an imaj da douch bizaj he verc'hig, epad ma oa an oll o ouela. — Abenn eun hanter heur an tad a c'halv anezhi dre he hano en eur lakad dirazhi poltret Santez Thérèze. — Ar Verc'hig a zigor he daoulagad hag a lavar : Petite Thérèse e deuz pareet ac'hanon. Ia, papa, guelet am euz

petite Thérèse, *oh! nag hi a zo kaër ha guen, hi e deuz va fareet.* » *O komz evelse, he daoulagad a zo leun a levenez. Pare oa, e guirionez, hag a c'houdevech e lavare atao : oh, Petite Thérèse, nag hi a zo koant ha mad.*

Santez Mari,
petit evidomp,
Santez Thérèse ar Mabig Jesus
pedit evidomp.

Kenta devez

Pa 'z eo guir on deuz an eur-vad, er bloaz-man, da ober hor miz Mari gant Santez Thérèse ar Mabig Jesus, guerc'hez iaoank Liesieux, e velimp, o sellet piz en he buez, petra eo bet adalek he ginivelez beteg he maro. — Lakeat eo bet gant an Iliz, n'euz ket pell, var an aoteriou, e renk ar zent hag an oll gristenien, koulz lavaret, a c'houlen he bennoz hag he skaozel.

Hor pedennou, dister ha ién aliez, a vezo guelloc'h selaouet gant Jesus ha Mari pa vezint kinniget d'ezho gant Santez Thérèse. « Doue, emezhi, a rai atao va bolontez en env abalamour me n'am euz morse great va bolontez var an douar. »

E kear Alençon, e Normandi, eun abardaëz gouanv, pa oa ar vro goloet gant eur vantel gaër a erc'h, e teuaz var an douar eun ealik bian kaër meurbed. He daoulagad glaz evel an oabl a verke dija petra vije glanded ha purete he ene. — D'an eil a viz

genver ez oa; hag an aotrou hag an itron Martin a zigemeraz an tenzor-ze gant ar brasa levenez. — Bet o doa dija nao bugel; pevar anezho, bianik c'hoaz, a oa eat gant Doue. Ar re a jomme oa Marie, Pauline, Léonie ha Céline. Evit gortoz ar paëron, ar vadiziant ne oa great nemed daou devez goude, d'ar bevar a viz genver. Ar vaëronez a oue Marie ar c'hoar gosa hag an hini a dlie beza fleuren ar C'harmel a oue hanvet Marie Françoise Thérèse.

Al levenez a oa braz er famill mes ne badaz ket pell; an dristidigez a deuaz abred hag en eun taol. — Nebeut sizuniou goude he ginivelez, Thérèse a gouezaz klanv ha goal glanv zoken, beteg lakad e spered an oll e ranket goulen eur mirakl digant Doue :

An Itron Martin, daoulinet dirat skeuden Sant Joseph, a bedaz ker kalonek pried glan ar Verc'hez Vari ha gant kement a zaëlou, ma rankaz tad mager Jesus selaou he fedennou. — Pa zistroaz ar vamm da gaout he bugel e velaz anezhi o tigeri he daoulagad en eur vouc'hoarzin. Jesus a oa falvezet d'ezhan lezel var an douar an hini a dlie kaout kement a garantez evithan.

Thérèse a dremenaz eur bloaz e ti he magez e bourk Sémallé, tost da Alençon, ha pa

zistroaz d'ar gear e oue adare kalz a joa er famill. — Bale a rea he-unan dija ha richan nat evel eul labousik : Maman, maman, a lavare dalc'h mad. He mamm a oa tout evithi hag atao e vije d'he heul, en ti, er jardin hag e pep leac'h.

Pa deuaz en oad da gompren eun dra benag, e kavaz var barlen he mamm, ar c'henteliou kenta a lakeaz en he c'halon ar garantez evit Mari, rouanez ar guerc'hez. — Ne oa ket bet diez deski d'ar bugel juntra he daouarn bian ha rei he c'halon da Zoue gant eur bedennik verr hag ar beden-ze n'eo bet biskoaz ankounac'heat ganthi.

An Aotrou Martin en devoa evit he « rouanez vian » evel ma lavare, eur pleg a garantez. Hi a oa evel eur bar heol en ti. Kement a galon vad e doa ha ken karantezuz ma santet en dro d'ezhi evel c'houez vad al lili hag ar roz.

Thérèse e doa eurc'harakter vif koulsgoude mes morse ne vije guelet, evel ar vugale all peurvuia, o klask ober he fenn fall. Aoual-lac'h oa d'ar gerent pe d'he c'hoarezed kosoc'h lavaret eur vech hebken d'ezhi : « An dra-man n'eo ket mad »; pe c'hoaz : « Kementse a raffé poan d'an Aotrou Doue » ha raktal e sente.

Ar sakrifisoù bian a blijed d'ezhi, zoken evit traou ha n'e oaint ket difennet, ha Céline hag hi, eun tamik divezatoc'h a glaske gouzout pehini anezho a c'hounec'h ar muia a veritou da ginnig da Jesus pa vije deut an noz.— He devosion koulskoude ne vouge ket al laouenedigez a velet atao ganthi. — Karet a rea kalz ar meziou, ar bokedou hag al laboused ha ken seder e vije atao ma oa eur blijadur he guelec'h.

Nebeut amzer goude klenved Thérèse, he zad a ieaz e pelerinaj da Itron Varia Chartres, ha da viz here ez eaz da Lourdes gant pelerinaj an eskopti. — An anaoudegez vad a zo eun dever, ha tad Thérèse n'hen ankounac'ha ket, rak Mari leun a c'hras ha sant Joseph o doa bet digant Doue ar pare evit ar fleuren vian nevez ganet.

Trugarekeomp anezho ive ha goulennomp digant ar Verc'hez Vari ober d'eomp kompren ar vuez a c'hlanded hag a humilite on deuz da heulia epad ar miz-man.

Santez Thérèse ar Mabig Jesus, petit evidomp ar Verc'hez Vari hag ho tiou, goulennit digant Jesus sellet ouzimp gant karantez ha mousc'hoarzin ive d'ar vugaligou a zigas Doue d'ar famillou, ha deskit d'ar gerent ho

deveriou a gristen, ma c'hellint ive lakad ho bugale abred var an hent mad, var hent ar baradoz.

★ ★ ★

PAREDIGEZ EUR BUGEL NAO MIZ

Setu aman petra en euz skrivet da Lisieux tad eur bugel deuz Tourcoing (Nord).

Va mab, eiz miz a vrec'h, a zigouezaz d'ezhan ober eur gignaden en he vrec'h. Ne oa netra, da genta; abenn an devez varlec'h, koulskoude, he vrec'h penn-da-benn a oa koenvet. Ar medisn, galvet dioc'htu a lavaraz ez oa re zivezat hag evit savetei he vuez d'ar bugel, e ranket troc'ha he vrec'h. Pa ne falveze ket d'eomp rei hon aotre, hen a roaz louzou. — E leac'h vad e rejont drouk, skoaz ar bugel, he gein, he c'houzoug ha beteg he zivesker a deuaz da goenvi hag an derzien a skuize ar bugel,

Red ez oa, eme ar vedisined lakad deuz goad ar vamm e goazied ar bugel. Great a oue, siouaz heb guellaen ebet. Red vije ober adare. Va fried, re zempl, ne falvezaz ket d'ezhi ha kompren a reaz neuze ne doa netra da c'hedal a berz ar vedisined.

Adalek ar penn kentade uz ar c'hlenved ni a

bede Santez Thérèse ar Mabig Jesus. — Epad pemp sizun e reaz skouarn-vouzard. Neuze on deuz komanset eun naved, ha lavaret a reamp ar pedennou hon divreac'h e kroaz. — An eisved devez, ar bugel hag a gawe d'eomp a oa en he heur diveza, a laoskaz teir guech eur griaden vian evel ma ra ar vugale deuz he oad pa velont eun dra gaër benag. Va fried a lavaraz d'in : « Deuz da velet, me a gav d'in e man o tremen. — Ar bugel a zigoraz neuze he zaoulagad, ar pezh n'en doa ket great c'huec'h sizun a oa, hag a zellaz deuz he vamm. — Houtman o pokat d'ezhan a zantaz c'houez-vad ar roz, ha me a reaz ar memez tra. Raktal e teuz da zont d'eomp e Santez Thérèse. Meur a hini all a zantaz evelomp hag an ti a oa leun a c'houez-vad, roz Santez Thérèse, a dra zur. — An derzien kouls goude a oa krenv atao.

En devez varlerc'h vintin, da beder heur, ar sœurez a oa gant ar bugel a deuz da lavaret d'eomp : (rak ni on doa ranket mont da repos). « Ho pugel a zo pare, da hanter-noz, an derzien a zo kouezet en eun taol. Va zud keaz, eur mirakl a zo o paouez beza great en ho ti. Trugarekait Santez Thérèse ha deuit da velet an hini bian. » — Hor bugel a c'hoarazaz d'eomp evel ma rearaok he glenved, ha ni a skuille daëlou a joa hag a anaoudegez-vad. — Ar medisin a jommaz

souezet hag a lavaraz : « N'eo ket me am euz pareet ho pugel, aman ez euz eur mirakl.

SINET : MARIN TOCH, TAD AR BUGEL

Sakrist iliz I. V. an Elez e Tourcoing.

Santez Mari,
pedit evidomp
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Eil devez

Dec'h diveza on euz komzet deuz amzer genta Thérèse ar Mabig Jesus. Araok mont pelloc'h en he buez burzuduz ez eo red ive komz divar benn he famill hag he c'herent en amzer goz.

Deuz kear Athis e teu ar ouen deuz he famill, tu he zad. Athis a zo eur gearik koant hag a zo enni var dro 2500 den.

Adalek ar c'huezekved kanvet ez eo anavezet eno famill Martin, etouez al labourerien douar. — Er bloaz 1692 eo bet badezet eno Jean Martin, tad eur famill hag a bado er barrez-se beteg 1777.

Goudeze, kerent Pierre Martin tad koz Thérèse a c'hañ da jomm da gear Alençon. Heman oa ofiser hag er bloaz 1823 e velomp anezhan (capitaine) e Bourdel. Er gear-ze e teuaz er bed eur mab d'ezhan hanvel Louis Martin, tad ar zantez. — Arc'heskop Bourdel a reaz ar vadiziant hag a lavaraz d'ar gerent : « Bezit euruz, rak ar bugel-man a vezo eun

den zantel ». Komz a reaz evel p'en divije anavezet an amzer da zont, hag, e guirionez, an heritaj karëa en doa ar bugel-ze da gaout oa ar feiz birvidig a roaz d'ezhan he famill gristen.

Eun deskadurez krenv, ha dreist pep tra eun deskadurez kristen a rai d'ezhan treuzi danjerou ar vuez-man heb mont morse divar an hent mad. — Beza ofiser a vije plijet d'ezhan, mes distrei a reaz divar an hent-se evit heulia eur vuez didrousoc'h. E Roazon, kendirvi d'he dad o doa savet eur fabrik horolachou. C'hoantad a reaz mont ive var ar vicher-ze hag e chommaz eno eun nebeut bloaveziou.

He vamm, kristenez vad, e doa eun tam aoun o velet anezhan evelse en eur gear vraz, hag a skrive d'ezhan aliez ar c'homzou-man : « Bezit humbl atao, va mab karet ». — Ne doa ket a ezom da gaout aoun; Louis a oa eur paotr iaouank fur ha ne oa ket tost d'ezhan beza desevet gant kenteliou fall ar bed. — Var dro ugent vloaz e santaz en he galon ar c'hoant da vont da guzat he vuez en eur gouent benag evit beva ha mervel e servij Doue.

Mes Doue en doa great evithan eun hent all. — Beteg he bemp bloaz ha tregont e

chommaz gant he gerent, daoust ma sonje c'hoaz aliez pegen eüruz e vije bet er gouent.

Providanz Doue a ra pep traevit ar guella. — Eur plac'h iaouank deuz an Normandi, Zélie Guérin, merc'h eur famill deuz ar guella kristenien a oa er vro, a c'hoantee servicha ar se glanv en hospital (Hotel Dieu) e kear Alençon. Goude beza kaozeet aliez gant ar superiozez, houman a lavarez d'ezhi eun devez : « Va merc'hig ne gredan ket e ve aze bolontez Doue ».

Eun devez ma tremene Zélie var pont Saint-Leonard, en em gavaz gant eun den iaouank ker modest ha ken deread, ma ne c'hellaz ket chomm heb sonjal ennan gant plijadur. Ne anaveze ket anezhan, mes eun dra benag a lavare d'ezhi en he c'halon, mouez Doue marvad : « Hennez eo am euz prepart evidout ».

Ar gomz-se a deuaz da veza guir.

Hirio on deuz komzet deuz famill Thérèze evit diskouez penaoz e teu Doue da vleina ac'hanomp gant an dourn var an hent a fell d'ezhan. — Eur vezen vad ne c'hell rei nemed frouez mad, a lavar en Aviel. Doue a ra pep tra evit he c'hloar, hag hon eürusted a deu atao da heul ar zentidigez. Karomp eta lavaret

aliez : « Va Doue, ho polontez bezet great ha n'eo ket va hini-me ».

Zélie Guérin a assantaz kemeret Louis Martin evit pried. Ma n'e divije ket, e vije bet eur berlezen nebeutoc'he kurunen ar zent a zo e kichen Jesus er baradoz, ha var an douar n'or bije ket bet eun *avocat* ker galloudeg var galon Jesus evit kaout diganthen ar pez on deuz ezom.

O Mari, mamm Jesus, ni ive a zo ho pugale ha ni a fell d'eomp e ve hor buez ken henvel deuz hoc'h hini ma ranko an oll lavaret, o velet ac'hanomp, o klevet hor c'homzou ha dirag hon oberou : « Setu aze, e guirionez bugale Mari ». Grit ma karimp ac'hanoc'h evel ma karit ac'hanomp; neuze hor buez a vezo pur ha ni a vezo eüruz.

★ ★ ★

Aotrou Personeur barrez deuz departamantan Nord, a skriv da gouent Lisieux : « Breman ez euz eun nebeut bloaveziou, eur mestr skol deuz ar barrez-man a oa klanv hezaou vugel. Lakad a reaz ho foltret unan a bep tu da skeuden Santez Thérèze ar Mabig Jesus ha dirazhi euz rozen he zroad en eur podig. — An daou vugel a

varvaz, mes ar rozen a oue lezet er memez leac'h. Ne oa ket goenvet, ha delien ebet anezhi ne oa kouezet. Meur a veleg ha re all o deuz he guele. Me a zo er barrez-man tri bloaz a zo hag hirio ar rozen a zo ker fresk ha ken kaër hag en devez kenta ma em euz he guele. — Ar mestr-skol kristen a gred ez eo kementse eur merk e man he vugale vian karet, er baradoz gant Santez Thérèse ar Mabilig Jesus.

Santez Mari,
pedit evidomp,
Santez Thérèse ar Mabilig Jesus,
petit evidomp.

Trede devez

« N'eo ket eun dra vian ha dister ober miz Mari er gear, a skrive eun devez Marie d'he-c'hoar Pauline. Maman a c'houlenn re, mu-ioc'h a c'houlenn eget ar verc'hez Varihe-unan. Goulenn a ra skourou spenn guengant ho bleun da zavel beteg an eac'h hag ar mogerioù goloet a c'hlasvez ».

Thérèse a jomm sebezet o velet kement a draou kaër. Bep mintin e teu da lavaret he fedennou en eur dridal gant ar joa. — Ma c'houfez pegenn fin ha pegenn difun eo hor c'hoar vian! Mantret e chomman ganthi. An oll en ti a zo atao o pokat d'ezhi ».

Al levezenn santel-ze a ia da veza tenvaleat ha mouget gant klenved ha maro ar vamm garet.

Epad ouспен c'huezek vloaz, heb eur glemmaden hag heb ehana da ober he labour a vamm a famill, na dilezel hini deuz he deverioù a zevosion, an Itron Martin a zouge eur c'hlenved hag a wasee bemdez. Ar vedi-

sined a ranke anzaou ne c'hellent netra evit he farea.

Ar bemzek a viz Even, an Aotrou Martin gant Marie, Pauline ha Léonie a ieaz da Lourdes gant pelerinaj Angers. — Respont ar Verc'hez a oa bet ar memez respont ma rea ive da Vernadett : « Me a roio d'eoc'h an eurusted, n'eo ket er bed man, mes er bed all ».

Ar c'hlenved koulskoude a ie var wasad atao, hag ar pezh a ranne kalon ar vamm ne oa ket c'hoaz mervel, mes lezel Céline ha Thérèse heb ho mamm.

An devez glac'haruz a zigouezaz d'an eiz var-n-ugent a viz eost 1877. Ne doa nemed c'huoc'h vloaz ha daou-ugent. — Goude eur vuez a labour hag a boaniou a bep seurt e c'hellet kaout fizianz ez oa evit kaout peoc'h ar baradoz.

An Aotrou Martin, beuzet en he c'hlaç'har, a gemeraz he «rouanez vian» etre he zivreaç'h hag a gasaz anezhi dirak he mamm maro. « Sell, emezhan, pok evit ar vech diveza d'as mammik karet ». Hag heb lavaret ger, Thérèse a lakeaz he muzellou var dal ién he mammik.

Thérèse ker laouen ha ken c'hoarzerez, a oa deut da veza evel unan all en he flas dirak ar maro. Ne ouele ket, kompren a rea ha marvad e teuzaz da zonzj d'ezhi deuz ar pezh e

doa lavaret d'he mamm eur bloaz araok en eur boket d'ezhi gant kalz a deneredigez : « Oh! va mammik karet me a garfe e varfez ». — An oll a jommaz souezet o klevet ar c'homzou-ze, hag ar bugel a lavaraz, an daëlou en he daou lagad : « Ia, evit ma'z i d'ar baradoz, pa'z eo guir e leverez e ranker mervel abenn mont di ».

« Bugale baour, a lavaraz plac'h an ti, o tistrei deuz ar vered, n'oc'h euz mamm ebet kén » —. Ar plac'h-man e devoa bet atao ar brasa soursi deuz ar baotrezed hag ive eur garantez tener evitho.

Ha kerkent Céline oc'h en em deuler etre divreaç'h he c'hoar Marie a lavaraz : « Te breman a vezo va mammik d'in-me ». Ha me, eme Thérèse evit ne vezo ket Pauline jalouz, me a gemer anezhi, da vamm d'in ».

Goude eur groaz ken pounner, douget gant kement a nerz kalon, an Aotrou Martin, daoust pegen diez e kave, a ieaz kuit deuz Alençon evit mont da Lisieux el leac'h ma oa he vreur kaër o chomm. C'hoant en doa da lakad he vugale etre daouarn ho zintin.

E famill an Aotrou Guérin ez oaint pevar : an tad, ar vamm ha diou verc'h : Jeanne eun tamik kosoc'h eget Céline ha Marie, daou vloaz kosoc'h eget Thérèse.

Eno, tost d'he c'herent, e vevo breman hor zantez vian hag e kresko er furnez hag er zantelez; re vian eo c'hoaz evit mont d'ar skol er gouent.

Breman e maint en ti hanvet Buissonnets, distro enn nebeut deuz kear, eun ti sioul gant eur jardin vrao. « An oll draou-ze a blije kalz d'in, a lavare Thérèze, me a garie kalz ar fleur ha va flijadur a oa ober aoteriou bian en eur c'hornig deuz ar jardin. Pa vijent great me a rede da gaout papa, hag hen, evit ober plijadur d'in, a lavare ne oa netra kaëroc'h. Penaoz lavaret an oll merkou a garantez a roe va zad karet d'he rouanez vian? ».

Pehini ac'hanomp n'euz ket da ouela var maro unan benag deuz he dud. Neuze on deuz santet hor c'halon o waska ac'hanomp. — Evidomp-ni, kristenien, ni a oar ne'z eo ar maro nemed eun disparti evit eur pennad amzer hag hor glac'har a zo skanveat o sonjal e kavimp divezatoc'h, e Doue, ar re on deuz kollet.

O Mari, c'houi hag oc'h euz kemeret ganeoc'h mamm santez Thérèze, o pet truez ouzomp-ni ive en heur hor maro, evit hor c'hass ganeoc'h da gaout ar re a zo eat araozomp d'ar baradoz.



ROSETTE, DANVADEZ SANTEZ THÉRÈZE

E Lisieux ez oar o sevel eun iliz deuz ar re gaëra en enor da Zantez Thérèze, ha setu aman eul lizer da superiozez ar C'harmel skrivet gant eur plac'h iaouank deuz Breiz-Izel.

« Va mamm, me a zo bet atao karet ha diouallet gant Santez Thérèze, me a zo he c'holladen, hi eo va mestrez ha me he servicherez. Kredi a ran ober plijadur d'eoc'h o kass va (photographie). Guelet a reot va denved e dro d'in ha var va barlen eun danvadez vian hanvet Rosette. Hou-man eo a zavan evit profit an iliz kaër oar o sevel da Rozen Lisieux. Rosette a gresk buan; ma kleffec'h he mouez dous ha trist, ho kalon a ve tenereat. Dalc'het e vezo beteg ma vezo braz ha neuze e vezo guerzet evit Santez Thérèze, da zikour sevel he iliz. Gouzout a ran pegement e deuz karet guechall eun oanik bian, hag abalamour da ze em euz sonjet rei Rosette d'ezhi. — A. L. Eun nebeut miziou goude, an dimezel A. L. deut da Lisieux e pelearinaj, a zigase an 300 lur e doa guerzet Rosette.

Santez Mari,
pedit evidomp
Santez Thérèze ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Pevare devez

Thérèse e deuz skrivet ar chomzou-man : « Me a glaske plijout da Jesus e kement tra a rean; ha va brasa soursi a oa : dioual atao da ofansi anezhan ».

Unan benag en doa lavaret da Thérèse e ranne ar Mabig Jesus he vara gant ar paour. Abalamour da zé e devoa kalz a garantez evit an nesa. — Eur blijadur vraz a oa evithi mont da zigeri an or pa skoe eur paour benag ha pa vije lezet da vont e karie rei aluzen. Neuze e rea atao eur c'hoarzaden leun a respect hag a garantez evit ar paour. — Eun devez e kavaz e toul an or, eur vamm, he bugel ganthi var he breac'h. Thérèse a deu da gaout he c'hoar. « Oh, Pauline, emezhi, eur baourez a zo aze, livet fall eo, hag ar bugel a zo var he breac'h, a zo klanv marvad », hag he daoulagad a lavare d'he c'hoar : « Eun dra benag muioc'h a dleffemp rei d'ezhi ». Ouspen an tam bara, e oue roet d'ezhi eur pezh arc'hant. Ha pa zistroaz e lavaraz da

Bauline : « Ar baourez e deuz lavaret d'in : Doue d'ho pennigo, va dimezel vian ». ha Thérèse a oa an dour en he daoulagad.

Atao e kave an tu da ober vad en dro d'ezhi, ha pa'zea da bourmen gant he zad e devoa leac'h d'hen ober aliez. — Eun devez e kavaz en eur c'hroaz-hent, eur paour koz hag en doa poan o vale gant he flac'hou. Thérèse a ia d'he gaout da ginnig d'ezhan eur pezh arc'hant roet d'ezhi gant he zad. Ar paour, tenereat he galon o velet ar bugel, a ijaz he benn evit diskouez n'en doa ket ezom. Thérèse poaniet a zistro da gaout he zad. Bet e doa eur goastel hag e lavare ennhi he-unan : Marteze e kemero hou-man pa n'euz ket ezom a arc'hant. Ar paour a oa eat kuit hag ar verc'hig a rankaz distrei adare en eur ouela.

Ma e devoa Thérèse eur galon aour, e klaske, deuz he guella, miret deuz ar re all da bec'hi. — Eun devez, ar plac'h a lavaraz, a espres evit farsal, eur gaou dister benag dirazhi. Ha Thérèse d'ezhi : « Gouzout mad a rit'Victoire, kementse a ra poan d'an Aotrou Doue ».

Er Buissonnets, ar pep brasa deuz an amzer a dremene o studia. Pauline eo a rea skol; ha da noz, echu al labour, e vije great katekiz ha roet ar c'huzuillou mad evit an

ene. — Epad ar pedenou diouz an noz, lavaret atao e komin, ez oa aouallac'h sellet deuz ar bugel evit gouzout penaoz e ped ar zent, ha pa vije eat Thérèse d'he guele ne vanke morse da c'houlenn digant he c'hoar Pauline : « Bet oun jentil hirio? Doue hag hen a zo kontant ouzin? An Elez hag hi a nij endro d'in? — Ar memez respont a gleve atao : « Ia ». Ma vije lavaret « nann » Thérèse e divije tremenet an noz o ouela.

Thérèse hag he diou gininterv a garie beza ho-unan ha great o doa evit se, eur c'hoari nevez bugale : C'hoari beza an unan. Pep-hini en em denne en eur c'horn benag deuz ar jardin; Unan a bede, unan all a laboure an douar, a roe dour d'ar fleur pe a c'houenne; red oa ive lavaret da Jesus e kariant anezhan.

Tud ar bed a gred, meur a vech, e ranker, abenn beza eur zant pe eur zantez, ober traou dreist, traou burzuduz. Nann, n'eo ket guir. Doue ne c'houlenn diganeomp nemed an traou a c'heller ober hag a zo diouzomp, deveriou hor stad ha kement tra dister a zigouez bemdez, ha pa ve poaniuz avechou, kementse a blij d'ezhan.

Ma karfemp Doue evel Thérèse, ne gafemp netra diez evit ober plijadur d'ezhan. Klevit petra skrive divezatoc'h d'he c'hoar :

« Pa zantan e vez ién va devosion, pa ne c'hellan ket pedi na pratika ar vertuz evel ma karfen, e klaskan traou eaz evit ober plijadur de Jesus : ober eur c'hoaraden, lavaret eur ger agarantez pa garfen rei peoc'h pe diskouez va himor fall. N'eo ket diez ha kementse a ra vad d'ar galon. »

Ia, Doue pa'zeo karantez, a c'houlenn hor c'harantez; penaoz ober poan d'ar re a garer?

Ha beza on deuz-ni, evel Santez Thérèse, eur galon ha ne glask nemed ober vad ha plijadur d'arreall ha kalz a garantez evit hon nesa. Ha karet a reomp-ni ar beorien evelthi, evit ober vad d'ezho evel da Jesus-Christ he-unan? Ha plijadur on deuz-ni oc'h ober vad en dro d'eomp?

E leac'h koll hon amzer gant traou vean, pa'z euz amzer da goll, ha karet a reomp-ni rei eur pennad benag da Zoue ha d'ar Verc'hez Vari? Ha pa 'z it da bourmen ha karet a rit-hu mont d'an ilizou da lavaret eur beden evit santelad ho plijadur?

Gant Santez Thérèse, goulennomp digant ar Verc'hez Vari sikour ac'hanomp da veza guelloc'h ha da gaout muioc'h a garantez evit hon nesa.

O Guerc'hez Santel, mamm da Jesus, roit

d'eomp muioc'h a garantez evit ho Mab; grit ma karimp an nesa eveldomp hon-unan, grit mac'h anavezimp guelloc'h ac'hanoc'h evit ho karet muioc'h ha guelloc'h ho servicha.

★ ★ ★

SAINT-GERVAIS EN BELIN (Sarthe).

LIZER SKRIVET DA SUPERIOREZ AR C'HARMEL
(LISIEUX) AN UGENT A VIZ EOST 1919

Mamm enorus, breman ez euz dek vloaz e tigouezaz d'in ober eur gignaden var va dorn deo. Me oa netra, a gave d'in. A nebeudou koulskoude e teuz da wasad, dounnad a rea ha renta. Epad pell amzer ez oun bet etre daouarn ar medisin, netra na rea vad hag hano oa da drouc'ha va dorn, eur c'hancer oa.

Eur fizianz vraz am boa e Santez Thérèse ar Mabig Jesus, hag en em glevet a riz gant va fried evit mont e pelerinaj da Lisieux da c'houlen beza pareet, prest oan koulskoude da blega da volonteze Doue. — Digouezet e Lisieux dirak arched kaër ar zantez ar boan em dorn a ehanaz. — Na c'hellen ket kredi ez oa eur mirakl ha ne liviriz ger. Distro d'ar gear, va fried a lavaraz d'in : « Ne glemmez kén gant ar boan? — « Nann, n'em euz poan ebet. » Neuze

va dorn a oue dispaket ha souezet ha laouen e veljomp ez oa kleizennet ar gouli. Eun devez pe daou goude ne velet mui merk ebet, pare mad ez oan. — Diez ve lavaret peger braz oa hon eürusted. Va bugale o doa guelet gant kalz a anken pegement e kreske ar gouli, ha breman ec'h unanomp, a greiz kalon, hon anaoudegez vad evit trugarekad Santez Thérèse. — Ho pedi a reomp eta, ma her c'havit mad da lakad al lizer-man e journal Lisieux evit beza eun testi deuz hon anaoudegez vad. (Henri Landau).

Santez Mari,
pedit evidomp,
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Pemped devez

Ar plac'hig Thérèse e deuz c'huec'h vloaz breman. Desket e deuz e teu Jesus d'en em rei d'eomp dre ar Sakramanchou.

Birvi a ra he c'halon gant ar c'hoant da reseo bara an Elez, an Hosti konsakret, a vele aliez gant kement a blijadur er sakramant alaouret var an aoter.

Siouaz n'e doa ket c'hoaz an oad a ranket kaout evit kommunia; gouzout a rea e c'heller en em brepari dre sakramant ar Binijen. — Mes petra c'helle lavaret d'ar beleg eur bugel ker glan ker pur ha hi. — Mont a ra da c'houlen kuzuil digant he c'hoar Mari. « Ar beleg er gador kovez, a lavar hou-man d'ezhi, a zalc'h plas Jesus-Christ. D'an Aotrou Doue he-unan eo ez ez da gaozeal. »

Ar beleg a glevaz he c'hovesion genta, an aotrou Ducelier, a jommaz marvad sebezet dirag eur bugel ken eün ha ken leal. — Goude beza diskleriet guella ma c'helle ar pezh a zonje a oa pec'hed, e selaouaz mad,

en he za, rak re vian oa var he daoulin, evit sevel beteg ar beleg, aliou ar c'hovesour. Lavaret a rea d'ezhi poania da heulia vertuziou an Itron Varia. — Thérèse a zantaz, en devez-se, muioc'h c'hoaz a garantez evit ar Verc'hez Santel.

Bep gouel a zigoueze, ar bugel devot a ie da govez, evit, emezhi, lakad he ene da veza atao kaëroc'h.

Ker braz oa he c'harantez evit Jesus, ma kredaz, eun devez araok gouel Nedelec, lavaret d'he c'hoar Mari : « Oh! ma karfez lezel a c'hanon da vont ganez! Setu aman penaoz ec'helfen reseo Jesus : Me a iaffe etouez ar re all, en da gichen, ha pa'z oun ker bian, den ebet ne daolfe evez ouzin. »

Hor zantez karet e deuz breman eiz vloaz. Deut eo ar mare d'he lakad e pansion. — Ar c'henteliou e doa bet digant he c'hoar Pauline, a oa bet ken talvouduz, ma c'hellaz mont en eur c'hlass bugale kalz kossoc'h egethi.

E miz heré 1881 e tigouezaz Thérèse e kouent al leanezed Visitandines, a oa eun tamik er meaz deuz kear Lisieux, eur pennad mad deuz ar Buissonnets, ti he c'herent. — Ar skol a oa krenv, ar vugale savet mad ha dreist oll e kemeret kalz a zoursi deuz an deskadurez kristen.

Ar verc'hig a vije en em gavet divroet en ti zantel-zê, ma ne vije ket bet ar vestrezed evel mammou evithi ha ma ne divije ket gallet mont d'ar gear bep abardaëz.

Spered Thérèze, digor ken abred, hag he devosion ken eaz da velet d'an oll, a reaz d'al leanezed kaout kalz a garantez evithi. — Auallac'h oa evit ober d'ar vugale all beza jalouz; ne vankent ket da eskin anzehi pa gavent tro. Mes hi, atao dous ha mad, a leze da dremen ar vrezel vian-ze a ra peurvuia ar vugale an eil d'eben.

Ne garie ket kalz plijadur ar vugale pa reant re a drouz; atao e vije he spered gant al labour, ar c'henteliou. He flijadur d'ezhi a oa teurel deliou roz dirag skeuden ar Verc'hez ha lakad bokedou pa vije o pedi. Atao koulsgoude e rea vad d'he c'hamaradezed dre he dousder hag he madelez; hag ar vugale fura a oa evel chachet da vont ganthi.

Setu aman petra e deuz skrivet divar he fenn unan deuz ar vestrezed : « Eur vous-c'hoaz dous ha koant a vije peurvuia var he bizaj pa ne ouele ket, rak buan oa da ouela; eun doare karantezuz e doa, eun devosion dener. Buan oa da zenti ha ne garie ket an drouz a rea he c'hamaradezed en ho c'hoariou

hag eun tamik ez oa lent. » Setu aze petra oa Thérèze er skol.

En abardaëz-man, pedomp ar verc'hez Vari da freskad hon ene evit zonjal avechou en devez eüruz ha pur ma'z omp bet o kovez er vech kenta. — Guelomp ive, gant eun taol lagad, petra eo bet hor buez tremenet; ha mar deuz eun dra benag o tenvalad hor c'houstianz, hastomp buan mont da c'houlen pardon evit beza pur a nevez.

Evel Thérèze ive, ra on devezo eur c'hoant vraz da dostad deuz an daol zantel. Maga ar c'horf a zo necesser, arabat lezel an ene da vervel gant an naoun.

O Mari, pa oc'h euz lavaret : « Fiat voluntas tua, ez oc'h deut da veza Mamm da Jesus, ha dre eur c'hras ha n'eo bet roet nemed d'eoc'h, ho Mab Jesus, evel ma kreder, a jomme atao ganeoc'h dre ar gommunion. — Roit d'eomp ive ar c'hoant da gommunia aliez evit ma chommo hor c'halon ker pur hag en hor bugaleach kenta ha ma chommo atao, beteg an heur da veza digemeret etre ho tivreac'h er baradoz.

★ ★ ★

EUR VAMM IAOUANK PAREET EN ENN TAOL
DEUZ AN DROUK SKEVEN

Vikel vraz arc'heskop Smyrne en Turquie. a skriva da gouent Lisieux ar bevar var-nugent a viz genver 1920.

« Euruz ouñ da rei d'eoc'h d'anaout ar pezh a skriva d'in superioez hospital ar gear-man. Talvouduz eo atao diskleria galloud ha madelez al leanez santel; ha kement a verk al lizer-man eo ar virionez memeuz. — Dellepiane. Vikel vraz.

Setu aman lizer ar Superioez.

Gant kalz a joa hag a anaoudegez-vad e teuan da ziskleria d'ann oll pareanz eur vamm iaouank bet er skol ganen : an Itron Edmée Reggio; pareet eo bet en eun doare burzuduz dre c'halloud al leanez karet Thérèse ar Mabig Jesus.

Edmée Reggio a deue d'an hospital an naonteg a viz meurs 1928. Eun derzien vraz a waske anezhi hag ar paz n'en doa ehan ebet. En devez varlerc'h e teuz daou vedisin, hag ho daou o deuz kavet ar memez tra : drouk skeven deuz an daou du. Difenn a rejont lezel ar vugale da dostad. — Ar glanvourez paour a ioa goal gaset noz ha deiz. Heb dale ive e krenchaz goad, ar maro a ioa tost.

Rannet va c'halon o velet kement a boan, e teuz em zonzj kass d'ar glanvourez eun tam deuz relegou Santez Thérèse hag e liviriz d'ezhi : « Lakit ar relegou-ze var ho kalon hag en em erbedit d'ar Zantez vian ker karet; ni a ia da ober eun naved; bezit sur ne zaleot ket da veza pare.

Hor fizianz a oa diazezet mad. — En devez valerc'h, an dersien hag a verke peurvuia 40^o a oa kouezet. Ar medisin goude beza sellet piz a lavaraz : « Eur mirakl eo, pare eo ha pare mad. »

Piou a c'help'e lavaret hor levenez hag eürusted an hini a oa klanv. Guela a rea ha pokat d'he bugale evel m'e divije c'hoant d'ho drebi; siarda a rea ar relegou var he c'halon; An nerz a deuz buan hag ar seiz a viz ebrel an itron Reggio a zistroaz d'ar gear, he c'halon leun a anaoudegez vad. Meuleudi da Zoue ha ra vezo Santez vian Lisieux anavezet ha karet dre ar bed oll.

Santez Mari,
pedit evidomp.
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

C'huec'hvet devez

Hor Zantez vian a glevaz eun devez, heb beza klasket, eur pennad kaoz, e kuz, etre he c'hoarezed Pauline ha Marie. — Hano oa gantho deuz an disparti, deuz ar C'harmel, deuz an eürusted a gaver o veva er gouent. — Ar verc'hig digor frank he diousskouarn, a lezaz a gostez an deverion a oa oc'h ober hag a dosteaz evit klevet guelloc'h.

Kouent ar C'harmel... petra verke ar c'homzou-ze evit Thérèse?

Ober a reaz goulennou hag he c'hoarezed a zisplegaz d'ezhi petra oa ar vuez en eur gouent kloz : eur vuez rust ha pinijennuz, e leac'h ma ranker distaga deuz pep tra ha dilezel ar volontez zoken. Mes lavaret a rejont ive peger mad, pegen dous oa beva evelse unanet gant Jesus ha pegen paeet oa an eneo dibabet gant Doue da vont evelse da veva ganthan.

Thérèse, el leor hanvet « Histor eun ene » skrivet ganthi he-unan, a lavar : « Penaoz

lavaret an anken a oa em c'halon? En eun taol e veliz ar vuez evel m'e man gant ar boan hag an disparti; ha va daëlou a ioa c'huero. Ne anavezen ket neuze ar joa a zo er sakrifisou. »

En devez-se eo e klevaz Thérèse mouez Doue hag eur sklerijen deuz an env a reaz d'ezhi anaout he « vocation ». — O Pauline, lavaret e poa d'in e pije va gortozet ha kemeret ac'hanon pa vijen deut da veza braz. — Kass ac'hanon ganed.

Pauline a lavaraz kenavo d'ar bed evit mont da gouent ar C'harmel an eil a viz here 1882.

Yec'hed Thérèse na c'hellaz ket herzel deuz he foan-spered.

Chommet oa he unan gant Céline hag abenn eun nebeut sizuniou e krogaz enni eur c'hlenved estranj. — Krena a rea evel eur bern deliou ha laoskal kriadennoù hag a sponte ar re a oa en dro d'ezhi.

An aotrou Martin, galvet raktal deuz Paris, a gavaz he « rouanez vian » ker fall ma kredaz ez oa o vont da vervel. Thérèse a oa evel p'e divije kollet he skiant-vad. — Ne ehane da grial : « Aoun am euz, aoun am euz. » He bizaj ken dous peurvuia, a verke ar spount hag an anken. — « Ar medisin, a lavaraz an

doktor Metta, na c'hell netra a eneb ar seurt klenvejou ».

Ar zantez a roio d'anaout divezatoc'h, petra oa kaoz d'ar c'hlenved-se ken iskiz. « An drouk-spered, emezhi, a rea kement a boan ganthan guelelet va c'hoar o vont d'ar gouent, ma falvezaz d'ezhan en em venji varnon-me, evit ar gaou a rache va famill outhan divezatoc'h; ne ouie ket ez oa Rouanez an Env o kemeret soursi deuz he fleuren vian, hag ez oa tost ar mare ma tlie ar bar amzer poaniuz, koueza. »

Tostad a rea an devez ma tlie Pauline kemeret an habit. Ne gomzet ket a gement-se dirak Thérèse gant aoun da greski he c'hlenved, o sonjal ne c'helje ket mont d'ar gouel kaër. — Doue, koulskoude a roaz d'ezhi ar gonsolation-ze. Mont a c'hellaz, guelelet a reaz he « mammik » evel ma lavare; azeza a reaz var he barlen, pokat d'ezhi gant teneredigez, kuzat dindan he (voile) ha reseo ar pokou karantezuz a roe d'ezhi pried iaouank Jesus.

An eursted-se ne badaz ket pell, hag en devez varlerc'h he c'hlenved, goasoc'h eget biskoaz a venne diskar da vad ar verc'hig paour.

Red eo kaout eur mirakl evit savetei va (rouanez vian) a lavare an Aotrou Martin.

He oll fizianz a lakea e galloud ar verc'hez Vari, ker madelezuz evit ar re a zo er boan. — Goulen a ra, dioc'htu, eun navet oferennou en iliz Itron Vari ar Viktoriou, e Paris.

Penaoz ne vije ket gounezet kalon dinam ar Verc'hez gant kement a bedennou entanet a reat bemdez.

Eur mintinvez, e kreiz an naved, Thérèse a oa ker fall ma ne anaveze ket he c'hoarezed, beuzet en ho daëlou, etal he gwele. Mari a zonjaz : « An taol-man eo ar fin, hon elik bian ken karet a ia d'ar baradoz ». — Mont a ra, en eur ouela, da zaoulina dirag keuden ar Verc'hez a oa e kambr Thérèse; Léonie ha Céline a reaz evelthi. Ho feden a oa kalonek. — Er memez amzer, ar glanvourez, ken tost d'ar maro, a hanter zigoraz he daoulagad hag he daouarn juntret varzu skeuden ar Verc'hez e pede anezhi da gaout truez outhi. Ho feiz hag ho feden a zigoraz dor an env.

Kerkent, o burzud, bizaj Thérèse a verkaz ar joa hag el levenez. Guelelet a rea ar Verc'hez o tont varzu ennhu hag o vousec'hoarzin d'ezhi. — Itron varia ar Viktoriou e devoa trec'het, eur vech c'hoaz, an dronk spered, o rei ar vuez d'ar fleuren vian hanter diskaret ganthan.

An oll n'int ket galvet da vont d'ar C'har-

mel, da veva er zantelez, en union ker start gant hor zalver; kement-man eo loden an eneou dibabet. — Doue eo a rén buez pep hini hag a oar peur gervel an ene er stad a vuez a blij d'ezhan. Mouez ar bed a fazi aliez, mouez Doue na c'hell ket fazia.

Er boan, en anken hag er c'hlenved deomp da gaout ar Verc'hez Santel, rak morse n'oc'h euz klevet lavaret e deffe dilezet nikun deuz ar re laka ho fizianz enni.

O Mari, roit d'eomp dre bedennou Santez Thérèze ar Mabig Jesus, ar grasou on deuz ezom, diskouezit d'eomp hon hent. Hent ar vuez a zo tenval aliez, roit d'eomp sklerijen hag e mare ar c'hlenved hag ar maro, o pet ar vadelez da vousec'hoarzin d'eomp ha d'hon digemeret etre ho tivreac'h.

★ ★ ★

SANTEZ THÉRÈZE NE ANKOUENZ KET
AR RE A ZO VAR HO ZREMEUVAN.

*Unan a skriv divar benn maro he c'hoar. —
« Va c'hoar baour a zo maro dissadorn diveza;
he angoni a zo bet dous meurbed. D'ar merc'her
araok e doa lavaret d'in : « Bet am euz eun uvre,*

*ha Santez Thérèze e deuz lavaret d'in e varvin
abenn pevar devez. Petra c'heuz lavaret d'ezhi?
Me, laouen kaër, em euz lavaret : O va c'hoar
vian karet, penaoz diskouez d'eoc'h va anaoude-
gez vad evit ho madelez?. — Håg hi leun
a zouder a respontaz : « Kemer pasianted
beteg ar fin ». — Va c'hoar geaz e deuz sentet
ha beteg he maro e deuz gouzanvet agalon vad. —
Ar re a ioa var he zro a oa gounezet ho c'halon
o velet he feiz hag he c'harantez evit Doue. D'ar
bevare devez ez eo maro evel m'e doa roet d'ezhi
da c'houzout he mignonez deuz ar baradez. —
He uvre en doa roet d'ezhi ha d'in-me kalz a
gonsolasion. — Lavaret a c'heller eta ne fell
ket d'ar zantez ken karet dilezel en ho zremenvan
ar re o deuz fizianz enni.*

Santez Mari,
pedit evidomp.
Santez Thérèze ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Seizved devez

Ar plac'hig Thérèse a zo iac'h breman. Red eo mont dioc'htu da gass ar c'helou mad d'ar C'harmel. Marie a oue karget da vont.

Evit krènvad an hini a zo bet pareet dre virakl, an Aotrou Martin a zelaouaz gant joa ar beden a rea d'ezhan anaoudegezou koz en doa en Alençon, da vont da dremen eun devez benag var ar meaz. Mont a reaz gant Thérèse.

An amzer a oa kaër hag an digemer karantezuz great da Thérèse a reaz d'ezhi abred, kaout a nevez al laouenedigez e doa araok, koulsgoude, etouez an dud ma oa breman o veva gantho ha ne glaskent nemed ober d'ezhi eur blijadur nevez benag, Thérèse n'en em gave ket en he eaz. An dud-man, mad a dra zur, a oa eun tamik tud ar bed ha daoust, ma klaskent e pep doare, plijout d'ezhi hag ober he bolontez, ar sonjou seriuz e doa Thérèse a drec'he atao; he spered a oa gant Doue ha traou plijaduruz ar bed ne c'hounezent netra var he c'halon.

Divezatoc'h e skribo evelhen divar benn an amzer ze tremenet en Alençon : « Siouaz, tud ar bed nag hi ar oar meska plijadur an douar gant servij Doue! ne zonzont morse er maro ».

Ma e doa kavet brao, da genta, an amzer-ze, e sonje ive pegen goullo eo an oll draou-ze, hag e santaz, pa oa distro d'ar Buissonnetz, muioc'h a c'hoant c'hoaz da veva gant ar (mignon) a jomme atao pa ne ra an traou all nemed tremen.

Breman, pa n'e man mui Pauline er gear, Marie eo a zalc'ho he flas hag a vezo mam-mik Thérèse. — He c'huzulioù leun a furnez, he skuerioù he aliou mad a zikouro Thérèse da zavel hueloc'h atao er vertuzioù. — Bemdez e reant eur pennad kaoz benag, kalon ha kalon. Marie a lakea Thérèse var he barlen hag e komzent evelse divar benn Jesus, ar Verc'hez Vari, Sakramant an aoter, karantez Jesus, a fell d'ezhan disken beteg beza magadurez an ene.

Abaoue meur a vloaz Thérèse a huanade hag a c'houleme mont da gommunia. — Pa lavaret d'ezhi e roet guechall d'ar vugale vian ar bruzunadur a jomme varlerc'h kommunia ar re vraz, e vije souezet. « Perag, emezhi, ner ket evelse breman ive? — Mes al lezen oa

e ranket kaout eunneg vloaz e bloavez ar pask kenta.

Hon Tad Santel ar Pap Pi degvet en euz chenchet al lezen goz, ha breman ar vugale a c'hell hag a dle kommunia pa o deuz ho rezoun, gant ma vezint kavet mad ha pa'z int desket auallac'h evit gouzout petra reont.—Thérèze ganet an eil-a viz genver, a vanke daou devez d'ezhi. Ne garie ket an daou devez-se, a vire outhi da reseo bara an Elez.

Eun devez oa eat da bourmen gant he c'hoar pa zigouezaz var ho hent Aotrou-n-Eskop Bayeux gant he vikel vraz. Thérèze a oa o vont beteg enghan, d'ar red, da c'houlen diganthan kounje da gommunia araok an amzer merket. He c'hoar e devoue poan o terc'hel anezhi en he c'hichen.

Marie a gomze aliez d'he c'hoar vian divar benn ar gommunion, ar c'hras kaëra a ro Doue, pa'z eo guir en em ro he-unan; ha evit he zikour da zantelad he deveziou, Pauline, deuz ar C'harmel a roaz d'ezhi eur (c'harne bian) great ganthi evit merka bendez ar sakrifisou hag an aktou a garantez a rache. Abenn tri miz ez oa merket varnezhan 818 sakrifis ha 2774 akt a garantez evit Doue.

Kompren a rea ar sakrifisou. « A veac'h em

euz eunnek vloaz, emezhi, ha dija em euz kollet va mamm; Pauline a zo eat d'ar gouent hag ar re all ne zaleint ket da vont ive. Ar vuez a zo eta eun uvre, eur pennad gortoz eviten em brepari da vont dirag Doue. Ne fell ket d'in koll va amzer gant c'hoariellou; Me a fell d'in e ve kaër va ene pa deuio va zro ».

Epad retret ar vugale, Thérèze a oa e pansion er gouent. Ar retred a dremenaz evel ma tremen peurvuia retred ar vugale ha Thérèze a lakea he oll aket da brepari an devez eüruz ma tlie hor Zalver disken er vech kenta e kalon ar verc'h ken karet hag e doa kement a vall d'hen reseo.

Daoust ha bouzar e chommomp-ni atao d'ar veuleudi a ro ar bed d'eomp? ha serri a reomp-ni hor c'halon d'ezho o sonjal ne'z int nemed traou vean ha ne reont nemed tremen?. — Pa e maomp gant hor breudeur, hor c'hoarezed, hor c'herent, ha komz a reomp-ni avechou a Zoue evit distrei hor spered deuz ar c'homzou vean? Ha prepari a reomp-ni atao hon ene evit digemeret mad Jesus er gommunion evel ma c'houlen diganeomp?

Guerc'hez Santel, roit d'eomp ar garantez birvidig e devoa Santez Thérèze evit ho Mab

Jesus pa lavare : « Mar deo ken dous ar c'hoant da garet Jesus, petra vezo pa vezimp d'ezhan da vad er baradoz? »



PAREDIGE EUR PLAC'H IAOUANK VAR
AN HENT DA VONT DA LEANEZ.

Lizer skrivet da Lisieux gant an aotrou Colle superior skolaj Thielt, er Belgique, an eiz à viz mae 1926.

« Dont a ran da rei d'eoc'h d'anaout eur c'hras kaër bet dre zikour Santez Thérèse ar Mabig Jesus. Setu aman petra a zo digouezet. Aman ez euz eur gouent (Sœurezed ar Basion). Eur (bostulantez) nevez a zo eruet, an demezel Ketty der Bie. Hومان a roe kalz a esperanz d'eomp. Siouaz, koueza reaz goal glanv. Kalz a a boan e devoa en he c'hov; ar medisin a lavare ez oa entanet traon he bouzellou, hag e rankchet marvad ober eun (operation). Kredi a rea ive ez oa krog ar gangrèn en he gar hag e rankchet he zroc'ha abred pe zivezad. Ar superiozez ne falveze ket d'ezhi ha lakad a reaz ober eun naved, er gouent, da Zantez Thérèse ar Mabig Jesus. An hini glanv ne vellee ket. Er mintin-man ez oar deut da c'houlén diganen lavaret an oferen evit arglanvourez, ha c'hoant a oa e

vijé pare araok nav heur, hag a dra zur e vezo, rak hirio e man deiz ar bloaz pask kenta Thérèse. — O vellet kement a fizianz, me am boa esperanz ive. Epad an oferen e oue lakeat an hini glanv var eur (matelas) e kreiz chœur ar seurezed, dirak ar Sakramant.

Epad ma oamp oll o trugarekad Doue goude ar gommunion, ar superiozez a deuz da lavaret d'in : « Kalz muioc'h a boan e deuz, para a rai, c'houi velo, hor Santez karet a zelaouo ac'hanomp. » Pa edon o vont er meaz deuz ar chapel, e klevis eur griaden ha kerkenet ar « Magnificat ». — Ar plac'h iaouank a drema-^{Chouanava} naz dre he c'horf frikerien poanvuz ha goudeze, poan ebet ken. Sevel a ra neuzé, pare eo.

Ar medisin a zo deut da 9 heur. Chomm a ra souezet? Pare eo emezan, ha sinet en euz eur certificat evit rei testi.

Ar memez hini a skriv eul lizer all an eiz a viz here : « Ar seurez iaouank a zo chommet iac'h mad. Deuz an Hollande eo; dissadorn diveza e deuz kemeret ar viskamant hag an hano « Thérèse ar Mabig Jesus ».

Santez Mari,
pedit evidomp,
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Eizved devez

« Nag hen a oa dous ar pok kenta a roe Doue d'am ene! Eur pok a garantez, e guirionez. Santout a rean ez oan karet ganthan ha me ive a lavare: Ia, me ho kar hag evit mad en em roan d'eoc'h. Jesus ne c'houlennaz netra diganen. Pell a oa, Hen ha me, on doa sellet an eil deuz egile ha lennet en hor c'halon. En devez-se, n' eo mui eur zell a oa, mes an union; ne oamp mui daou. Thérèze a oa eat da netra evel eur veraden dour e kreiz ar mor braz; Jesus a oa he-unan, ar Mestr, ar Roue ». Evelse e skrive Thérèze divezatoc'h.

Goulou-deiz a oa kaër an eiz a viz mae 1884. Thérèze a oa difun abred, azezet en he guele hag he c'halon o lammet. « Hirio e man an devez braz ». Sevel a reaz kentoc'h ha pa ieaz ar vugale all hag hi da viska ho dillad guen Thérèze a ioa dija kaër ha prest he ene evit mont da zigemeret Jesus.

Pa zigoueschont er c'hœur e kommansaz ar c'hantik : « O aoter zantel, e man an Elez

en dro d'ezhan ». Ha Thérèze a zantaz he c'halon o tridal gant kement a nerz ma n'e deuz morse ankounac'heat.

Beza ez euz c'houez-vad hag a goll he nerz pa vez lakeat en ear, dizolo. Beza ez euz ive sonjou e goeled ar galon ha ne c'heller ket o lavaret gant komzou an douar heb ober d'ezho koll ho c'houez dudiuz. — Ne c'heller ket eta lavaret petra dremenaz e kalon Thérèze pa resevaz Jesus evit ar vech kenta. — Lavaret e doa da Zoue : « Me a gar ac'hanoc'h, me n'em'ro d'eoc'h evit mad ».

Thérèze a roaz he c'halon, Jesus a roaz he hini, an diou galon ne oaint nemed unan; ar bugel zantel a oa eun tabernakl beo erit Jesus. — Gras Doue a oa ken kréne ha joa Thérèze ker birvidig ma ne rea nemed gouela.

Ar vugale all a lavare : Perag e ouel? Mar-teze ez eo abalamour n'e man ket aman he mamm garet nag he c'hoar Pauline kennebeat. — Ne gomprenent ket ez oa levenez ar baradoz diskennet en he c'halon, hag ar galon-ze re vian ha re leun a ranke diskarga dre an daëlou. He mamm a oa en env hag an env a oa ganthi; o reseo Jesus e reseve ive bizit he mamm.

Pauline d'an heur-ze a rea profesion er C'harmel hag aoa ive da Jesus da vad.

Etouez al levez dreist naturel a garge, en devez-se, kalon Thérèze, e ranker ive lakad ar vœu a reaz d'en em lakad oll etre divreac'h ar Verc'hez Vari. — Hi eo a lennaz an akt a « gonsécration » en hano ar re all, hag an devosion a velet ennhî a denerea kalon an oll; he zremm a oa sklerijennet en eun doare burzuduz.

Thérèze a ouie mad e rankche, goude kement a levez, distrei adare d'he buez kustum ha d'ar pardaëz e skrivaz var he (c'harne) ar c'homzou-man : « Ne gollin morse kouraj, bemdez e livirin ar (Souvenez-vous) d'ar Verc'hez, klask a rin diskar va ourgouil ».

Ha beza on deuz-ni, evit ar pask kenta, an istim a dleomp kaout? hirio, dreist pep tra, pa'z euz kement a dud re laosk en ho feiz. — Ha prepari a reomp-ni hor bugale d'an devez kaër-ze, ha komz a reomp-ni aliez divar he benn evit ober d'ezho kaout muioc'h a garantez evit Doue? — Ha sonj on deuz-ni deuz hor pask kenta, deuz ar pez ma oamp neuze ha deuz ar bromesaou or boa great? Ar zonz deuz an devez-se, daoust ne deu ket avechou da ober rebechou d'eomp? Ha komunïa a reomp-ni aliez evit senti deuz ho Zalver ker mad evidomp; marteze, eun didal-

voudegez mezuz a vir ouzomp da dostad deuz an daol zantel. Penaoz e trugarekaomp Jesus goude ar gommunion, ha peseurt frouez a dennomp-ni outhi?

O Mari, dalc'hit beo en hon ene ar menosiou kaër a oa ennhan devez hor pask kenta; en devez-se ez omp en em roet d'eoc'h; roit d'eomp ar c'hras da veza fidel atao d'eoc'h ha d'ho Mab Jesus.

★ ★ ★

An daouzek a viz gouere 1908, Antoinette Hebert a oue digemeret en hospital Granvilliers (Oise). — Eur « pleuresie » e doa en he c'hostez kleiz hag ar boan a gouezaz en he gar penn-dabenn. Heb dalc'he ne c'hellaz bale nemed var flac'hou ha goudeze ne c'hellaz mui sevel. Ouspenn, diou pe deir guech ar zizun e devoa eur gaouad poan ker skrijuz ma venne simpla. He gar, dre nerz ar boan, a oa, sounnet ha daoubleget; ar vedesined na c'hellent netra, pare ebet evithi, emezho. He stad a wasee atao. Abenn tri bloaz e doa kollet c'huec'h lur ha tregont, he gar a zo breman 15 centimètres berroc'h eget eben, he c'hroaz-lez a zo distreset ha koenvet, he zroqad a zo troet en diabarz ha dinerz.

Setu aze he stad er bloaz 1912. — Ar glanvourez paour a goll fizianz, hag ar sœur a vije var he zro, dre druvez outhi, a aliaz anezhi da c'houlén ar pare dre zikour Thérèse ar Mabig Jesus. Rei a rer d'ezhi he imaj hag eun tamik deuz ridoj guele Thérèse pa oa en he c'hlenved diveza. — An naved agommansaz ar bevarzek a viz Mae. — Eunneg miz a zo abaoue ne re netra aberz ar medisin. Teir guech bemdez e vije great d'ezhi eur bikaden morphine evit mouga he foaniou.

Ar seisved devez deuz an naved, vardro div heur, ha goude beza kousket mad, ar pezh ne rea morse, e klev eur vouez dous o lavaret. « Difunit, difunit. » Souezet eo hag e lavar ennhi he-unan: Me a zo oc'h uvreal. Klask a ra kouskat hag ar vouez a lavar adare: « difunit ». Sellet a ra, ne vel netra hag ar vouez dous a lavar c'hoaz: « Difunit ». — Breman e deuz aoun, rak ne vel den, mes klevet a ra he gar o strakal ha ne deuz poan ebet. Dizoloa a ra he gar, he zroad a zo deut buez ennhan.

Da deu ar sœur da seiz heur evit ar bikaden morphine, ne lavar ger d'ezhi, mes sonjal a ra e c'hell sevel. — Dont a ra deuz he guele, bale a ra. Neuze e c'halv ar sœur ha dirazhi e pouez var hegar. — Baleit, eme ar sœur, hag an hini a oa dec'h ken reuzeudig a vale hag a lamm

gant ar joa. — Ar re glanv all a jomm sebezet: (Antoinette a vale, pare eo, emezho). Petra zo erruet? « Petite sœur Thérèse e deuz pareet ac'hanon ».

Lod a ouele, lod a c'hoarze en eur ouela. Ia, pare oa. He zroad a zo eünet, askorn braz he lez a zo en he blas, he gar a zo astennet, hag abenn eun nebeut deveziou ne vank netra d'he iec'hed.

Santez Mari,
pedit evidomp,
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Naved devez

Epad malenne an Akt a gonsecreation, evel ma lavaremp dec'h, Thérèze a oa evel sklerijennet he bizaj. Marvad ez oa deut da zonzj d'ezhi deuz ar vouse'hoarzaden e devoa great d'ezhi skeuden ar Verc'hez en devez ma oa bet pareet ganthi, hag abalamour da ze ive e devoa komzet gant kement a nerz hag a zevosion o lenn ar gonsecreation d'ar Verc'hez.

Au devez-se, ken kaër evit Thérèze, na c'helle ket tremen heb eun eürusted all hag a ziskennaz ken doun en he c'halon.

He zad a gasaz anezhi da gouent Carmel da velet he mammik guisket e guen evelthi ha kurunet a roz.

An dristidigez hag ar c'haon o doa goasket he c'halon epad pell amzer pa oa eat Pauline d'ar gouent, a oa ankounac'heat breman pa vel he c'hoar, hag ar c'hoant da heulia ar vuez-se ne rea nemed kreski.

Er Buissonnets, d'ar pardaëz-se ez oa koan. Eno ez oa kerent ha mignoned famill an

Aotrou Martin. — N'eo ket diez gouzout a betra e komze an oll. Ar (rouanez vian) a oa var he zrôn. He doare ken dous ha ker modest, kaëreat c'hoaz abaoue ma oa Jesus deut da chomm ganthi, a lakea ar joa ive e kalon ar re all hag a rea d'ezho kaout kalz a respet evithi.

Devez he fask kenta a oa bet ker mad ken eüruz evit Thérèze, ha ken sklear e kleve mouez Jesus en he c'halon, ma e divije karet mont adare, en devez varlerc'h, da gemeret ar vagadurez santel a ro naoun d'an ene en euz resevet anezhi dija. — Eun devez benag a ranke gortoz. Da c'houel an Ascension e devoue an eur vad da gommunia evit an eil guec'h etre he zad hag he c'hoar hena. Goudeze e rankas gortoz adare eur gouel braz benag, rak an Iliz neuze ne lavare ket mont da gommunia ken aliez ha m'e deuz great abaoue.

Epad an amzer-ze, Thérèze, evel ma lavar, e doa naoun ar gommunion. — Ar Pap Santel Pi dekvat deuz an hano, eun nebeut bloaveziou goude, a raio eul lezen nevez, evit ne jommo ket keit da iun an eneo mad o deuz karantez evit Jesus. Alia a rai anezho da vont da gommunia aliez.

Eur pardaëz araok eun devez ma tlie mont

da gommunia, Marie a gomzaz da Thérèse divar benn ar boan hag ar soufransou evit displega d'ezhi da betra ez int mad er vuez-man. « Doue, emezhi, en euz great he hent da bep-hini ha n'eo ket lavaret e ve henez, hent ar boan, a ranki heulia ».

Goude beza bet o kommunia, Thérèse a zantaz en he c'halon, en eun taol-kount, eur garantez vraz evit ar Groaz- « Va ene, emezhi, a oa ken beuzet a gonsolasion, ma n'em euz biskoaz bet muioc'h epad va buez ». — Adalek neuze, Jesus a zibabe anezhi evit gouzanv assamblez ganthan en he garantez.

Evit dere'hel mad da vocation ar Groaz, Thérèse ker iaouank, a zonje ez oa dinerz hag abalamour da ze e lakeaz he oll zoursi d'en em brepari da zigemeret Sakramant ar Gonfirmation.

Selaouit petra lavar he c'hoar Céline. « Ar Gonfirmation a oa d'ar bevarzek a viz even. Sonj mad am euz penaoz ez oa Thérèse en deveziou araok. Hi ken dous ha ken trankil peurvuia, a oa leun a dan hag a zevosion. Goulen a ran diganthi perak an dra-ze? Thérèse a zisplegaz d'in penaoz e komprene ar vertuz en euz ar sakramant-se pa zeu ar Spered a garantez da gemeret ac'hanomp tout a bez. He c'homzou a oa entanet hag he bizaj

ive, ha biken ne ankounac'hañ penaoz ez oa ha penaoz e komze ».

Pa'z eo pur hon ene, an dra-ze a zo eaz da velet en hor c'homzou, en hon oberou hag en hor buez penn-da-benn.

Thérèse a vije eüruz meurbed pa vije bet o kommunia, hag an oll, en dro d'ezhi, a zante ar c'houez-vad a ro ar zantelez.

Ha ni, ha digemeret mad a reomp-ni ar poaniou a zigaz Doue avechou? ha karet a reomp-ni ar soufranson evel hor zalver? Sonjomp pegen talvouduz e c'hellomp beza evit hon ene.

O Mari, goulennit digant ho Mab Jesus rei d'eomp unan benag deuz ar vertuziou a rea da ene Thérèse beza ken kaër; neuze e kerzimp var he roudou en hent ar berfection, evit gellout plijout d'Aotrou Doue.

★ ★ ★

EUR MARO KAËR

Emily Coleman e doa c'huezeg vloaz, o vont da vervel ez oa en hospital Sant Yan e Londres. Kement e doa diskuezet a basianted hag a zousder epad he c'hlenved m'e doa great kalz

a vad d'ar re a anavezze anezhi. — Ar bemzek a viz Even, Emily a oa ker zempl ma oa lavaret d'he mamm e varvche abenn nebeut devezion. — Ar vamm baour glac'haret a ranke chomm gant he bugel bian er gear; karet e divije beza etal he merc'h beteg an heur diveza. E kreiz he glac'har e pedaz sœur Thérèse ar Mabig Jesus da zont da gichen an hini glanv evit rei d'ezhi nerz-kalon ha konsolasion beteg ar fin.

An unan var-n-ugent a viz even, Emily a oue laouen epad an deiz; d'ar pardaëz, ar sœurs a vije var he zro a ginnigaz d'ezhi sevel eun tamik he fenn-vele, evit ma vije easoc'h d'ezhi. — Oh nann, bennoz d'eoc'h, ma sœur, ne dal ket ar boan « me a zo o c'hortoz ». O c'hortoz petra? — Gortoz a ran ar (fleuren vian) a zo erru d'am c'herc'hat ». — Seder oa o kaozeal gant ar ar re glanv-all. En noz varlerc'h e lavaraz eur ger benag d'an hini a daole evez outhi. Da deir heur e lavaraz a vouez huel : « Oh, guelit nag a roz, dastumit anezho da rei d'ar glanvourien all. » — Peseurt roz? hag hi da respont : « Ne zantit ket ar c'houez? guelit, va guele a zo goloet. »

Nebeut goude e koll he anaoudegez, hag e varv etouez ar roz e peoc'h ha laouen evel eur bugel o vont da gouskat. — He mamm a ra poan ganthi abalamour n'e deuz ket gallet

kloza he daoulagad d'he merc'h karet. Pa glevaz petra oa digouezet e lavaraz : « N'em euz mui a geuz da veza chommet er gear pa z eo guir santez vian Lisieux a zo bet aman em leac'h; a dra zur, va feden a zo bet selaouet : Sœur Thérèse a zo deut da gerc'hat Emily. »

Santez Mari,
pedit evidomp.
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Dekved devez

Ar Spered Santel o tisken en ene Thérèse ar Mabig Jesus, a lakeaz ennan eun devosion krènvoc'h ha guelloc'h sklerijennet.

Goudeze e oue roet d'ezhi eun devez benag evit diskuiza ha Thérèse a grogas adare er studi guelloc'h eget biskoaz. — Ar bugel-ze ne oa mui eur bugel evit ar re a veve ganthi. Guelet a reont buan pegen abred ez oa digor he spered, pegen braz oa he furnez ha pegen eun oa he bolontez. — He flijadur ne oa mui plijadur bugale; he c'hamaradezed ne glas-kent ken eskin anezhi; breman e klaskont beza ganthi hag anet oa odoa karantez evithi. — Thérèse deuz he c'hostez a ziskoueze kalz a garantez hag evit ober vad d'ezho e kounte an historiou brao a anaveze.

Diou gamaradez e doa dreist ar re all. Unan anezho ne z'euz hano ebet anezhi e buez Thérèse hag eben a deuaz buan da iéna goude beza bet er gear o tremen eun nebeut miziou.

Kementse a roaz d'anaout d'ezhi pegen nebeut e pad karantez ar bed-man. « Kouls-goude, emezhi, Doue en euz roet d'in eur galon fidel, pa em euz karet eur vech e karan atao, ha me a zalc'h atao da bedi evithi hag he c'haret a ran c'hoaz. »

O sonjal en traou-ze deuz amzer he bugaleach e skrive divezatoc'h : « Pegement e tlean-me trugarekad Doue da veza great d'in kaout c'huer ar garantez a gaver er bed. Gant eur galon evel va hini e vije bet eaz troc'ha d'in va diouaskel ha n'am bije mui gallet nij ha kaout va repos. »

Er vakansou goude, evit diskuiza he nizez, an Aotrou Guérin a gasaz anezhi, gant he verc'hed da Deauville var bord ar mor en eun ti ha ne oa ket tost d'an iliz : Itron Varia ar viktoriou. — Bemnoz kouls-goude ez eant di da viz mari. Pa vije fall an amzer, pe pa ne vije ket kalz a c'hoant da vont, Thérèse a gaozee ker brao hag a boueze ker mad, ma pleget atao d'ezhi, hag evelse, Rouanez an Env ne vije ket dirannet deuz an enor dleet d'ezhi bemdez. Ha n'euz forz peseurt amzer a re Thérèse a ie atao bemdez d'an oferen en iliz konsakret d'ar Verc'hez.

Setu aman hag a verk d'eomp pegen striz oa Thérèse en he c'houstianz. — Eun devez

an Itron Guérin a roaz d'ezhi daou bennad ruban glaz da staga he bleo a oa ken kaër. — Thérèse a ziskouezaz dirak an oll pegen euruz ez oa. Mes dioc'htu e chomm da zonjal : « Hag hi a c'hell lakad anezho evit beza koantoc'h, marteze e vezo fougé ennhi. Skur-puil a deu d'ezhi, marteze ez eo eur pec'hed; mont ra da govez.

Peseurt kentelliou a gavimp-ni hirio, o lenn miz Mari? Ha sellet a reomp-ni piz abenn dibab hor mignoned, hor mignonezed? Ha klask a reomp-ni ober vad d'ezho dre hor skueriou hag hon aliou mad : teuler evez evit gouzout gant piou kaout darempred, klask santelad hor plijadur hag hor pourmenaden-nou. Ha pa zigouez da unan benag deuz ar re on doa diskouezet karantez d'ezho, trei kein d'eomp, ha nerz auallac'h on deuz evit pardoni d'ezho a greiz kalon? Guelloc'h ha tene-roc'h eo, evel Santez Thérèse lakad hor c'harantez e kalon Jesus, ar mignon-ze ne vank morse.

Ha ne 'z omp ni ket tentet gant diaoul ar vanite, o chomm re hir da zellet er melezour. Pa vez eur gouel benag er famill pe e leac'h all, n'on deuz-ni ket klasket beza guelet ha kavet bravoc'h eget ar re all, pe abalamour d'an dillad kaër pe d'ar braoïgou? Thérèse

a grede ober eur pec'hed o staga he bleo gant eur ruban glaz. Ha petra sonjal hirio deuz ar follenteziou hag ar gizioù mezuz a veler breman. — Karomp ar vodesti ma karomp ar burete evit plijout d'ar Verc'hez Vari ha da Santez Thérèse ar Mabig Jesus.

O Mari, mamm Doue, c'houi eo a c'halv ac'hanomp bep noz e harz hoc'h aoter evit ober ho miz karet a unangant Santez Thérèse e deuz bet ar joa dispar da velet ac'hanoc'h o vouse'hoarzin d'ezhi; grit ma teuimp atao d'ho kulet gant hor spered hag hor c'halon pur evit ho servicha hag ho karet muioc'h-mui bemdez.

★ ★ ★

KONVERSION EUR PASTOR PROTESTANT

An Aotrou Grand a oa pastor protestant e Edimbourg (Ecosse). Eun den desket oa hag helavar. — Eun devez e kavaz, heb beza klasket, leor buez sœur Thérèse skrivet ganthi he-unan. Lenn a reaz anezhan d'ar red, mes kaout a reaz ken kaër ar sonjou merket ennhan, ma lavare ez oa great gant unan benag desket braz var ar relijion hag anaoudegez an eneo. — Kaër en

doa, ne c'helle mui kass kuit ar zonz deuz Thérèze ha kredi a rea klevet anezhi o lavaret d'ezhan heb ehan : « Evelse eo e kar ar zent Jesus-Christ; selaouit ac'hanon hag heuillit va hent bian, rak an hent-se a zo sur ha ne'z euz sur nemethan. » Mad, eme an Aotrou Grant, klask a rin senti ouzoc'h, rak abaoue mac'h anavezan ac'hanoc'h, va c'halon a zo chenchet. Ar gatoliked a zaremprede ar pastor a bede Santez Lisieux heb gouzout d'ezhan; hen ive a bede anezhi hag eun devez, emezhan, e lavaraz d'in : « Perag goulen diganen pedi evidoc'h ma ne fell ket d'eoc'h anaout ha pedi ar Verc'hez Vari? » Va spered a oue en eun taol sklerijennet ha pedet am euz an Itron Varia.

Enebi am euz ranket c'hoaz kouls goude, ha pa vije ar starta ar vrezel em c'halon e kreden klevet ar vouez dous o lavaret d'in : « Deuit d'am heul, va hent a zo sur. » — Plega 'm euz ranket ha raktal em euz skrivet d'ar re o doa da velet varnon, evit lavaret d'ezho ne oann mui gant ar brotestanted.

Goude eun devez benag a studi ez oun bet digemeret etouez bugale ar pastor guirion, en Iliz katolik, ha va hano badiziant eo hano an hini e deuz va zaveteet : François Marie Thérèze. »

An Aotrou Grant en euz bevet pell amzer e

kristen katolik, ha maro eo e kear Alençon en ti ma 'z eo ganet ennhan Santez Thérèze ar Mabig Jesus.

Santez Mari,
pedit evidomp,
Santez Thérèze ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Eunnegved devez

Deuz Deauville, Thérèse a zistroaz d'ar Buissonnets hag eno e chommaz beteg ma tigoraz ar skol.

Epad an amzer-ze, an Aotrou Martin a reaz eur veach hirr a c'huec'h sizun, assamblez gant eur beleg deuz Lisieux, mignon d'ar famill. Epad ar veach-se e tremenjont dre galz a vroïou. Deuz a bep leac'h e teue lizerou da Lisieux, hag an tad a lavare d'he vugale : « An traou kaër a velan, ha kalz a zo anezho, ne c'hellont ket ober d'in ankounac'had ar Buissonnets. »

Epad he veach e resevaz eul lizer digant he vugale evit reketi d'ezhan eur gouel mad, hag hen a skrivaz d'ezho deuz kear Vienne ar 25 a viz east. « Me a gav d'in guelet ac'hannoc'h oll assamblez, em c'hichen er jardin ha klevet (va rouanez vian, gant he mouez dous ha karantezuz o reketi d'in eur gouel mad. Ar zonz-se a zo eat ken doun em c'halon, ma karjen beza breman e Lisieux evit pokat d'eoc'h oll assamblez. »

Pa oa tost an devez da zistrei d'ar gear an Aotrou Martin a skrive evelhen, e berr gomzou, divar benn he veach : « Ar pez a velanazo kaër meurbed, koulskoude ne deo nemed gened an douar hag hor c'halon ne vezo morse leun ma ne velomp ket ar gened infinit : Doue; heb dale e kavin ar joa da veza ganeoc'h er gear; ar joa-ze eo an tosta da hini ar baradoz. »

Breman e maomp er bloaz 1886. Thérèse e deuz aliez poan en he fenn ha ne c'hellaz chomm nemed eur miz benag er gouent. — Evit ma c'helje kass he studi da benn ha kaout er memez amzer eur vuez frankoc'h ha muioc'h a ear, hag ive evit ober d'ezhi mont eun nebeut etouez an dud, e oue goulennet digant eun itron deuz Lisieux rei d'ezhi kentelliou meur a vech ar sizun :

Setu hi breman en eun ti dishenvel braz deuz he hini, azezet dirak eun daol, en eur gambr hag a zo enghi kalz a arrebeuri ar c'hiz koz. — Er gambr se e teu kalz a itronezed, itronezed vad a dra zur, tud dibreder koulskoude ha n'o deuz da ober nemed mont da di ar re all ha kaozeal divar benn traou a netra. — Distrei a reont spered ar skolierez deuz he labour. Houman pleget he fenn var he leor, a glask deski, mes klevet a rea hag

entent mad kement tra a lavaret. « Piou eo eta ar verc'hig iaouank-se ker koant? » a lavare unan. Ebén ne doa ket aouallac'h a veuleudi evit he bleo melen ken kaër. — Thérèze a velaz abred ez oa danjer evit he humilite hag a c'houlennaz sikour digant he Mamm deuz an Env.

Er gouent ez oa eur vreuriez bugale Mari ha Thérèze a roaz he hano. Digemeret oue dioc'htu etouez ar merc'hed iaouank gwestlet da Vamm Jesus.

Thérèze e deuz skrivet evelhen : « Truez am euz deuz an eneoù a ia da goll; ken eaz eo en em goll var henchou flour ar bed. A dra zur, eun ene savet huel a gav c'huero aliez plijadur ar bed, hag ar galon a jomm goullgant ar veuleudi a glever avechou. Ma ne vijen ket bet savet varzu Doue adaleg va bugaleach kenta, m'am bije kavet ar bed foll da genta, petra vijen-me deut da veza? O va Mamm muia karet, gant pebeuz anaoudegezevad e tlean-me kana trugarez Doue evidon! »

Ar burete zantel a zo ker bresk ma ne c'heller morse teurel evez aouallac'h evit he dioual mad.

Diouallomp atao da zelaou gant plijadur ar pezh a c'hell rei d'eomp ourgouil pe vanite.

Eur zant braz a lavar ez eo plijadurezou

an douar evel ar sklerijen tromplus a ro an heol avechou e kreiz an désert ha n'eo mad nemed da zalla ar beachour ha da ober d'ezhan koll he hent.

O Mari, digemerit ac'hanomp dindan ho skoazel. — Pa zigouez, epad eun devez hanv, eur bar arne, pe glever ar gurun o krozal, ar ier bian a gerz da guzat dindan diouaskel ho mamm. — En ho kichen Mamm Jesus n'or bezo aoun ebet da gaout, dindan ho mantel a Verc'hez ni a vezo diouallet mad.

★ ★ ★

EUR PLAC'HIG IAOUANK PAREET
EN EUN TAOL KOUNT

Marie Lesigne, trizeg vloaz, o chomm e Créances (Manche), a oa seizet he izili daou viz var-n-ugent a oa; ne c'helle mont e meaz an ti nemed douget var gein he mamm. Houtan e doa great teir naved da sœur Thérèze ar Mabig Jesus evit goulenn ma vije pare he merc'h. Sonj e doa da vont ganthi da Lisieux an nao var-n-ugent a viz kerzu 1917. An erc'h hag ar frimm a viraz outhi da vont. — Ar vamm-ze e doa kement a feiz hag a ziskueze kaout kement

a fizianz ma reat goap outhi. — « Ia, ia, emezhi, grit goap, mont a rin var bez ar seurez vian-gant Marie, dougen a rin anezhi var va c'hein; va c'hredi a c'hellit, ne deui ket d'ar gear er stum-ze, dont a rai var he zroad. » — Kement a feiz a c'hounezaz an Aotrou Doue. En devez-se, zoken, Marie a oa o paouez pokat da imaj Thérèse, araok mont da gouskat, pa glevaz freaz eur vouez dous o lavaret d'ezhi : « Sao ha bale ». — Ar verc'hig a zellaz deuz he mamm en eur vousc'hoarzin : « Mamm, me a ia da vale ». Ar vamm a falvezaz d'ezhi miret outhi. Ne dalveze ket ar boan, Marie a oa dija en he c'hichen. — Ar vamm baour e doa poan o kredi ar pezh a vele. Kerzet a ra da lavaret d'an amezien; ken souezet int hag hi.

En devez varlerc'h, Marie a ieaz d'an oferen ha d'ar gousperou ha da velet he c'herent.

An unan ha tregont a viz kerzu ez eont ho diou da Lisieux, dre anaoudegez-vad ha mall o deuz da gountad'al leanezed ar pezh a oatremenet. En ho farrez ne oa ken kaoz hag an oll a jommaz mantret, o klevet an Aotrou person, da zul ar Rouaned, o lavaret, deuz ar gador : « Ar gest a vezo great gant Marie Lesigne pareet gant sœur Thérèse ar Mabig Jesus. Oll ec'h anavezit anezhi; gouzout a rit ez oa seizet he izili daou viz var-n-ugent so; guelet a reot

anezhi o vale evel pa ne vije bet biskoaz klanv. »

Marie Lesigne ne ankounac'heo biken he madoberourez. Hirio e man er gear o labourat gant he mam, ha bep bloaz ez a da drugarekad Santez Thérèse ar Mabig Jesus.

Santez Mari,
pedit evidomp,
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Daouzegved devez

Mari eo, breman, eur pennad mad a zo, an hini ma tigor Thérèse he c'halon d'ezhi ar muia, etrezho ne 'z euz netra kuzet, ha Marie a gred ez eo Thérèse krenv aouallac'h breman evit dougen eur groaz nevez, eun disparti nevez. Kement-man a dremen e miz even.

Abaoue meur a viz, Marie e doa lakeat doun en he zont mont da gouent ar C'harmel gant he c'hoar. — N'eo ket, a dra zur, ar fleuren vian eo en em lakai a dreuz en he hent pa 'z eo guir ne zontje he-unan nemed mont ive da veva er memez buez.

Da glevaz he mammik hena o tiskleria d'ezhi he vocation, Thérèse a jommaz mantret, heb lavaret ger; mes buan e tirollaz da ouela dourek.

Setu hi eta o vont da veza he unan, koulz lavaret, den mui da sklerijenna he c'hous-tianz. — Pa vank sikour d'ezhi aberz an dud, e sao he daoulagad varzu an env hag e

c'houlen skoazel digant pevar Elik ar famill a oa dija pignet d'ar baradoz. — Pedennou ar vugale vian, evit doare, a zo oll c'halloudeg var galon Doue rak Thérèse a zantaz kerkent evel gliz an env o tisken en he ene hag eur peoc'h leun a zouder.

Hor Zantez a oa bet klevet o klemm meur a vech abalamour ma ouele re vuan. Ken tener oa ma ranke lenva evit an distera tra : ober poandaunanbenag, heb gouzout d'ezhi zoken, chomm heb lavaret bennoz Doue pa oa leac'h d'her lavaret, kaout distractionou en he fedennou a oa oauallac'h evit he lakad da ouela, ha goudeze, emezhi, pa vije tremenet, me a ouele abalamour m'am boa gouelet.

Red ez oa kaout eur « mirakl bian » evit diskar ar pleg fall-ze. Great e oue da noz Nedeleg er bloaz 1886. — En noz benniget-se, a lavar Thérèse, ar Mabig Jesus a jenchaz an noz a oa em ene en eur sklerijen burzuduz. Deut da veza bian ha sempl dre garantez evidon, e ra d'in beza krenv ha kaout nerz-kalon. Breman e c'hellan mont araok. Feunteun va daëlou a oa dizec'het hag hiviziken ne ouelin mui, pe da viana ne ouelin ket buan. »

Ar Zantez e deuz kountet ker brao an traou-ze tremenet en he bugaleach ma 'z eo eur blijadur lenn anezho.

« O tigouezout er gear goude oferen ar pelgen, emezhi, me a ouie mad e kavchen er chiminal, va boutou leun a draou mad evel pa oan bian. — Kement-man a ziskouez ez oan c'hoaz eur bugelik evit va c'hoarezed. — Va zad he-unan a garie guelet pegen euruz en em gaven, plijadur en divije o klevet ac'hanon o krialgant joa dre ma tremene dre va daouarn an traou lakeat dre guz em boutou.

Deut oa ar mare koulskoude da zizoun ac'hanon deuz plijadur ar vugaleach. Va zad ker kustum da golladenna ac'hanon, a gave ive ez oa poent. O sevel em c'hampr e klevis anezhan o lavaret : « Evit eur plac'h vraz evel Thérèse, ar c'hoariou-ze a verk re ar vugaleach; evit ar vech diveza eo. »

Céline, abalamour mac'h anaveze mad pegen buan ez oan da ouela, a lavaraz d'in : « Gortoz eur pennad araok disken, gouela a raffez adare dirag tad, o velet ar braouigou ec'h euz da gaout. » — Mes Thérèse ne oa mui ar memez hini; Jesus en doa chenchet he c'halon. « Moustra a rean a eneb an daëlou ha buan e tiskenniz d'an traon. » En eur gemeret va boutou e tennen gant joa ar pezh a oa enno. Va zad a c'hoarze ha ne velet mui ez oa bet drouk ennan. Céline a oa souezet maro o velet ne ouelen ket. Guir oa, ha Thérèse a

gavaz evit atao an nerz-kalon e devoa kollet d'an oad a bevar bloaz hanter. »

Thérèse a oa douget da lezel he c'halon da denerad beteggouela. Daoust hag ar vugale, pa ouelont, o deuz atao ezom da ouela? Marteze ez eo, meur a vech, evit ma vezo taolet evez outho, evit ober d'ar re all kaout truez outho pa n' euz ket a leac'h.

Ha digemeret a reomp-ni gant nerz-kalon hag heb klemm ar poaniou, ar c'hroaziou a lez Doue da boueza varnomp? Ha gouzout a reomp-ni kemeret perz e poan ar re all ha kaout truez gant made lez deuz sempladurez an nesa.

O Mari, Mamm da Zoue, kreskit ennomp an donezon a nerz en euz ar Spered Santel roet d'eomp e Sakramant ar Gonfirmation. Roit d'eomp an nerz-kalon on deuz ezom da gaout pa zigouez eun dra benag vraz ha poaniuz en hor buez. Sikour ar gristenien, grit m'on devezo nerz atao da ober holontez Doue.

★ ★ ★

EUN ARTILLEUR,
MIGNON DA ZANTEZ THÉRÈZE

Paul Dugast deuz ar Vendée a oa gant ar c'hanoliou hag e miz kerzu 1914 e tisklerie petra

e devoa great he c'hoar vian Thérèse evithan.
 « En devez diveza ma on deuz labouret e stour-
 mad ar Marne ni a oa dirak an enebourien.
 N'on doa nemed eiz kanol, an allemanted
 o doa 25. Ouspenn, ar (munitionou) a vanke
 d'eomp ha gant ar brez da rei plas d'ar re a deue
 d'hor zikour ez oun kouezet d'an douar en
 hevelep doare ma ranke va c'hanol tremen dreist
 va diou c'har. Ho diou e tlient beza friket, rak
 ar c'hanol 75 a bouez 4.000 lur.

Va c'hamaraded a deue d'ar red d'am zikour
 evit va c'hass gantho, marvad. Pegen souezet
 int chommet o velet ac'hanon o sevel heb drouk
 ebet. En eur vouez e leveront : « Eur mirakl »,
 ha me, va c'halon leun a anaoudegez vad a res-
 pont d'ezho : « Va c'hoar vian Thérèse eo e deuz
 great kementse. » Ha dioc'htu em euz kavet em
 godel eur c'hrayon guen ha skrivet var ar c'ha-
 nol : « Batterie de Sainte Thérèse de l'Enfant
 Jésus ».

Goudeze, pa deue ar glao da efasi ar c'hom-
 zou-ze, Paul Dugast a skriva a nevez, ha kredi
 a ra en euz ar merk-se a fizianz roet da sœur
 Thérèse, diouallet hen hag he ganol epad ar
 vrezel. — Goude ar pevar bloaz, Dugast a zo
 brigadier ha deue eo d'ar gear iac'h ha dispos,
 ne ankounac'hai ket, emezhan, an hini a zo bet
 « sa petite compagne des mauvais jours ».

Santez Mari,
 pedit evidomp,
 Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
 pedit evidomp.

Trizegved devez

En nosvez kaër Nédélec 1886, ar Mabig Jesus, o velet bolontez vad Thérèse, a reaz ennhi, en eun taol-kount, ar pezh n'e doa ket gallet ober he-unan epad meur a vloaz. — He bugaleach a zo tremenet hag amzer diez ar c'hreskanz ive; breman e c'hello poania da gass da benn ar zonz e deuz bet atao : beza leanez.

Sellet a ra var eün varzu an amzer da zont; ken kaër e kav anezhan ma ne deuz douetanz ebet, hag ar vouez a c'halv anezhi a gomz skleroc'h ha krenvoc'h bemdez d'he ene ha d'he c'halon; Thérèse a lavar gant anaoudegez-vad : « Karantez Doue a deuaz em c'halon gant an ezom d'en em ankounac'had va-unan, atao; abaoe ez oun euruz. »

Pa vezo guisket ganthi sae ar C'harmelitezed ha pa vezo oll d'he muia karet, ne ankounac'haio biken bloaveziou eüruz he bugaleach tremenet evel eun nevez-amzer leun a voke-dou, pa zigore he ene da draou brao ar mea-

ziou. Karet a rai atao an amzer-ze nevez tremenet, sonj e devezo er parkeier e leac'h ma karie dastum fleur, ha sonj dreist-oll er Buissonets, zoken pa ne devezo dirazhi nemed mogerioù ar gouent e leac'h ma tremeno he buez evel eur c'houlouen benniget o tevi dirag Doue pe eun encensouar a c'houez-vad.

Setu aman petra e deuz skrivet : « Pa lennan leorioù hag a verk pegen diez eo hent ar perfection, e skuizan hag e serran va leor. Kemeret a ran ar Skritur Zantel ha neuze e velan sklear ez eo aouallac'h d'eomp anzañ ne domp netra hag en em deuler, evel eur bugel bian etre divreac'h an Aotrou Doue; lezel a ran al levrioù gant ar sperejou braz a dud, hag e kavan brao beza bugel ha dister pa 'z eo guir ne 'zeuz nemed ar vugale hag a iaffe d'ar baradoz. »

« Euruz omp, emezhi da eur misioner, pa'z euz meur a di e rouantelez an env, rak ma ne vije bet nemed an hini a zo ken diez deski an hent da vont d'ezhan, a dra zur, ne zigouesfen biken. »

Evit Thérèse, skiant pe hent ar perfection a vezo ar garantez. « Skiant ar garantez, emezhi, ne c'houlennan nemed hounnez ». Heb ar garantez evit Doue, an oll oberou a zo vean, zoken ar re gaëra. »

Setu eta ar plac'hig a bevarzek vloaz var an hent, evit mad, da zevicha Doue beteg en em rei oll d'ezhan ha mont da netra dre garantez evithan. Thérèze a ouie mad e vije paeet gant Jesus.

Eun devez, o velet var eun imaj Jesus crucifiet, Thérèze a zantaz he c'halon o ranna dirag ar goad a deue deuz gouliou zantel he zaouarn hag he dreid; hag ar goad priziuz se, den ne glaske he zastum. « Neuze, emezhi, eo falvezet d'in chomm atao, a spered, e harz troad ar Groaz evit dastum ar gliz a zilvidigez hag he skuilla goudeze var an eneo. »

Sec'hed am euz!... a lavare Jesus o vervel var ar groaz. Ar gomz poa niuz-se a ie doun e kalon Thérèze. C'hoant am boa, emezhi, da derri sec'hed va muia karet; ha va unan em boa ive eur zec'hed vraz da gaout eneo. Me a falveze d'in diframma an eneo deuz tan an ifern. »

Thérèze a glaske atao, neuz forz penaoz ober vad d'an nesa, dre garantez evit Doue. — Kredi a reat ne gave netra poaniuz abalamour ma veze dous atao hag *en himor vad*. Karantez e doa, heb ho anaout, evit ar bec'herien vraz, ar re o doa great torfejou. — Klevet e doa ez oa bet eur muntrer, hanvet Pranzini, kondaonet d'ar maro. Ne

falveze ket d'ezhan kovez, chomm a rea aheurtet en he bec'hejou. Thérèze a bedaz a greiz he c'halon; goulenn a rea digant Doue he gonversion pe, da viana, eur merk benag da ziskouez e sonje e Doue. An torfetour, araok mervel, a c'houlennaz he groaz digant ar beleg a oa en he gichen ha teir guech e pokaz d'ar groaz-se. — Kementse a reaz kalz plijadur d'ar plac'hig santel e devoa great pinijen ha kalz pedet evithan.

Ar gentel a zo hirio dirazoc'h a dle ober d'an dud iaouank sonjal e kement-man : Ha kreski a ra ar zantelez en hoc'h ene epad ma kresk ar c'horf? — Pa ne oar mui bugale, e tle ive an ene huelad ha kreski er zantelez assamblez gant ar c'horf; ha peurvuia ar vugale a glev tro pe dro mouez Doue o c'hervel anezho da vont d'he gaout. Doue, zoken, a gomz meur a vech d'ar vugale en ho bloaveziou kenta.

Ha karet a reomp-ni ive lenn traou mad ha santel e leac'h koll hon amzer o lenn traou hag a zo vean, da viana, pa n'int ket traou fall ha ne gaver profit ebet enno nag evit ar spered nag evit ar galon.

Guerc'hez santel, lakit en hor spered ar zonz deuz an oll vadelez oc'h euz bet evidomp

abaoue ma 'z euz ac'hanomp. Grit d'eomp beza fidel hag heulia var eün an hent merket d'eomp gant Jesus ho Mab. Pellait an danjerou a c'helfe ober d'eomp koueza, evit ma c'hellimp, bleinet gant Santez Thérèse ar Mabig Jesus, digouezout eun deiz ganeoc'h en ho paradoz.



EUR BESKETADEN BURZUDUZ

*E bourk Porto, en Itali, ne 'z euz nemed pesketerien. Nazareno Felicioti a zo ive peske-
teer. Paeet e vez deuz ma ve ar besketaden. —
Er bloaz 1913 n'en doa gounezet netra. He
vreg, Agatha a oa eur vaouez devot meurbed,
gounezet oa bet gant gened Santez Lisieux.*

*Eun devez, he fried, skuiz o labourat evit
netra, en doa kollet fizianz. Dalc'h mad, eme
Agatha, me a ia da rei did imaj eur zantez
hag a ra kalz a viraklou; dreizhi te a rai eun
devez mad. — Daoust, eme Nazareno, hag
imaj eur zantez a gargo ar vag a besked? ne
gredin biken andra-ze. Kemer atao, eme Aga-
tha, hag e laka an imaj en he c'hodel. Nazareno
a grede muioc'h eget na ziskoueze ha lakad a
reaz an imaj en eur c'haset bian e bourz ar vag.*

*Digouezet er mor doun ar roued a zo lakeat
er mor, O burzud, raktal koulz lavaret, e man
leun a besked. Tenna a reont anezhan, pesked
oa aleiz ha dreist pep tra eur pesk braz, enn
esturgeon hag a boueze kant lur ha ne vez ket
kavet er mor-ze.*

*Ar c'hiz so, gant pesketerien an Itali da
winta eun drapeau e beg ar vern pa ve great
peskerez vad. D'ar mintin an oll a zistro d'ar
porz, bagou ar re all a oa goullou hag an oll a
c'houlenne : Petra oc'h euz great evit kaout
kement a chanz? « Imaj eur zantez eo, e deuz
roet va greg d'in. » Ha Nazareno a ziskoueze
an imaj d'an oll. — Neuze e oue goulenn d'an
imaj : « Roit d'in-me unan, me a zo pried eur
pesketaër, eme unan; me a zo c'hoar me a zo
merc'h eur pesketaër, a lavare unan all. Oll
o doa fizianz en hini a hanvet la (Santina).*

*An dra-man a c'hoarvezaz an daouzeg a viz
here 1913. Mestr a vag he-unan, deut da Lisieux
en euz diskleriet ar burzud ha roet testeni ez eo
guir.*

Santez Mari,
pedit evidomp.
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Pevarzekved devez

Sant Yann ar Groaz a lavar : « An distera akt a garantez evit Doue a zo muioc'h talvouduz d'an Iliz eget an oll oberou assamblez. »

Ar c'homzou-ze a verke da Dhérèze an hent e doa da heulia en he buez, ha goude beza sonjet mad e lavaraz ennhi he-unan : « Me a fell d'in mont e leac'h ma c'hellin en em rei tout a bez, heb dere'hel netra evidon va-unan : da Zoue da genta ha dre Doue d'an nesa. »

Ar c'hoant da vont d'ar gouent a greske bemdez en despet d'an aliou a roe d'ezhi he c'hoar leanez Marie. Houtman a gave ez oa Thérèze re iaouank evit rén eur vuez ken rust. Kenderc'hel a rea da rei nerz-kalon d'ezhi, mes c'hoant e doa ive da ober d'ezhi gortoz c'hoaz abenn mont d'ar C'harmel.

D'ar pardaëz, pa vije echu ar studi ha labour an ti, Céline hag hi o divije plijadur o kaozeal divar benn ar joa a zo er groaz hag a gaver er gouent, leac'h distro ha sioul

meurbed. — Ho diou ez eant d'ar jardin, hag eno, pa vije erru an noz e chomment da zellet deuz an oabl steredenet, ha Jesus a lakea da zisken en ho ene he c'hrasou kaëra.

Mes, penaoz digeri dre forz dor ar C'harmel pa'z eo guir ar Superiorez koulz hag he c'hoar gosa a lavare ez oa re abred c'hoaz digeri d'ezhi.

Araok mont da chomm etal an Hini a glaske, Thérèze a gavo c'hoaz meur a dra a dreuz var he hent.

Ma ne doa ket a aoun e vije eat Céline a eneb d'ezhi, pa 'z eo guir hou-man ive a oa troet da glask ar memez hent ganthi, ne oa ket ken dizoursi deuz kostez he zad, hag he c'halon a oa ankeniet. « Penaoz, emezhi, lavaret d'ezhan dilezel ive he « rouanez vian » pa en doa dija great ar sakrifik da rei he ziou verc'h hena da Zoue. »

Ouspenn, er bloavez-se ive, a lavar he c'hoar, hon tad a oa bet skoet gant ar « paralyisie ». Pareet oa bet buan, guir eo, kementse koulsgoude a vire ouzomp da veza dinec'h evit an amzer da zont. »

Thérèze a c'hortozaz eta goueliou Nédélec araok digeri he c'halon ha lavaret d'an tad eun dra hag a boueze kement var ho buez. Fizianz e doa e divije sklerijen ar Spered

Santel hag epad meur a zevez ne ehanaz da bedi an Ebestel da rei sikour d'ezhi evit dont a benn deuz he zad.

O tistrei deuz ar gousperou e kavaz an tu da gomz d'ezhan. « Va zad, emezhi, a oa azezet er jardin, hag eno, he zaouarn kroajet, e sonje ennan he-unan pegen kaër eo ar meaziou gret gant Doue. An heol o vont da guz heb dale, a live en aour begou ar gouez; al laboused bian, o richanat, a lavare ho feden diouz an noz. He vizaj a oa kaër evel an deiz ha santout a rean ez oa he galon leun a beoc'h. — Heb lavaret ger, me a zo eat da azeza en he gichen, an dour dija em daoulagad. Ober a reaz ouzin eur zell lenn a deneredigez, hag o chacha ac'hanon var he galon e lavaraz : « Petra zo, va rouanez vian, lavar d'in »? Neuze e sao en he za, gant aoun, marvad, e veljen e lamme ive he galon. Thérèse oa savet ive hag assamblez e valeont harp an eil en egile.

Kalon Thérèse a lamme krenvoc'h c'hoaz ha neuze e komzaz d'ezhan divar benn kouent Carmel hag ar c'hoant e doa da vont di heb dale. Lavaret a reaz ive gant dousder pegen sklear e c'halve Doue anezhi ha ne c'helle mui ober skouarn-vouzard d'ezhan.

Ar c'helou-ze a oue kalet evit an tad karet

en doa gullet he di goullonteret a nebeudou, hag an disparti nevez-man a lezo anezhan, koulz lavaret, he-unan en he gosni. Piou a gemero soursi outhan? hag an tad paour a rankaz gouela. — Thérèse koulskoude a velaz etouez he zaëlou e roche he assant hag a vriataz anezhan gant kalz a deneredigez. Kalon an tad hag hini he verc'h ken karet a zo breman unanet startoc'h c'hoaz gant ar garantez.

Breman e ranke kaout assant an Aotrou Guérin, he zonton rak beza oa ive he c'hulador. — Heman ne blegaz ket. « Kementse, emezhan, n'eo ket bet gullet c'hoaz e France. Evel eur goal skuer e ve gullet eur bugel pemzek vloaz o vont da gouent ar C'harmel. Evidon-me ne roin ket va assant, me a enebo guella ma c'hellin, red e ve kaout eur mirakl abenn ober d'in chench va santimant. »

Braz oa anken ha glac'har Thérèse o klevet ar respont-se. Ne doa mui nemed eun dra da ober : pedi. Mont a reaz d'an daoulin dirak skeuden ar Verc'hez he mamm; pedi a reaz he zent patron da drec'hi bolontez he zonton ha ker c'houeg oa he fedennou ma ouent selaouet gant Doue.

D'ar bevare devez, Thérèse a zistroaz da di he zonton. Ne oa mui ar memez den. « Eur

mirakl, emezhan, n'eo mui necesser, pedet am euz evit kaout sklerijen, ha bet am euz. Kea e peoc'h va merc'hig karet, te a zo eur fleuren dibabet ha Doue a fell d'ezhan kutuil ac'hannout. » Hag e pokaz d'he nizez gant kalz a garantez.

An oabl en dro d'ezhi a deue da veza skleroc'h; kredi a ra ez eo kouezet kement tra a stourme outhi hag e c'helle breman ober he goulenn da veza digemeret er C'harmel.

Kement a dleomp klask var an douar-man eo ar zantelez, Doue a fell d'ezhan e vefemp santel.

Pa on deuz eun dra benag vraz da ober, eun dra hag a zo stag outhan hor buez mar-teze hag hon eternite, daoust ha mont a reomp-ni ive d'an daoulin gant feiz ha fizianz da c'houlenn digant Doue kass da benn ar pezh on deuz c'hoant. En em lakad etre daouarn Doue eo a denn varnomp he c'hrasou kaëra.

O Mari, rouanez an env, lakit en hor spered hag en hor c'halon ar pezh a ouzoc'h a zo ar guella evit hor sikour d'en em zantelad. — Lakit ive, en hor c'hichen tud a guzuil vad, tud a feiz hag a skiant evit hor zikour dre ho fedennou da vont beteg ennhoc'h ha da erruout er baradoz.



EUR C'HANSER PAREET

Superiorez ti ar re goz e Lisieux a skriv kement-man da gouent ar C'harmel.

Ferdinand Aubry a deuz en hon ti e miz mae 1910. Eun tamik poan en doa en he deod, Heb dale ar boan a greskaz hag ar paour keaz na c'helle mui drebi traou tomm. An dri var-n-ugent a viz guengolo, ar seurez karget deuz ar reglan a velaz e teue ar c'hig d'en em zrebi en he deod hag ar medisin a lavaraz ez oa ar gangrene pe eur c'hanser. — Ar bemp var-n-ugent e oue roet d'ezhan evit kommunia, eun tamik deuz an Hosti, ar gommunion diveza marvad.

Rei a rer d'ezhan imaj sœur Thérèse hag eun navet a rajemp assemblez ganthan. — Ferdinand araok dont d'hon ti a garie re he vanne, breman ez eo direbeck. — Lenn a reomp d'ezhan ar pezh e deuz skrivet Sœur Thérèse diwar benn ar paour koz ma kase d'ezhan an aluzen hag evit pehini e doa pedet, devez he fask kenta. Ferdinand a zo gounezet he galon. Ober a ra he naved ha ni on deuz goulennet deuz ar C'harmel eun tam dellien roz deuz ar

re a lakea Thérèse var he c'hrusifi. — Beg an teod a oa kouezet dija. Lakad a rejomp an dellien roz etal an hini klanv hag eur pennad goudeze ne gavomp mui netra. — Petra oc'h euz great deuz an dellien? « Lounket 'meuz anezhi, emezhan. »

Adalek neuze e velleaz buan. Ne lavaraz netra koulsgoude epad tripe bevar devez. — An eil a viz even e lavaraz d'eomp : « Pare oun. » Ar medisin a oa souezet o velet he deod kleizenet. Poan en doa o kaozeal, koulsgoude e c'hellaz goulenn : « Daoust ha va zeod ne astenno ket? Oh nann, a dra zur, eme ar medisin. — Mes Thérèse ne lezaz ket he labour hanter c'hreat. Teod Ferdinand a astennaz, hag abenn nebeut amzer ez oa evel araok. — (Lisieux ar dregont a viz Kerzu 1910). Ar mirakl-man a zo bet sellet piz outhan pa 'z eo bet lakeat Thérèse e renk an dud Euruz.

Santez Mari,
pedit evidomp.
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Pemzekved devez

Urz Carmez a zo bet savet er bloaz 1415, er Spagn. Er c'huezekved kanvet, Santez Thérèse d'Avila a falvezaz d'ezhi sevel eur gouent all e leac'h ma vije heuillet lezen striz ar C'harmel evel er penn kenta. Gant skoazel an Aotrou-n-Eskop hag en despet d'an oll draou poaniuz a deuz d'he diarben, e teuz abenn da zevel, en he c'hear. Avila, kouent Sant Joseph. — Ar gouent se eo ar vagerez a zo deut outhi an oll Garmelitezed nevez hag ho reolen, striz koulsgoude, a zo bet kavet mad gant ar Pap Pi IV er bloaz 1562.

Skoet ha dispartiet gant ar Révolution vraz, al leanezed en em gavaz adare e Paris goude ar bloaveziou skrijuz-se, dre c'hras an aluzennou braz a reaz d'ezho an itron de Soyécourt. — Hirio o deuz kalz a gouenchou hag er France hebken ez euz var dro deg ha pevar-ugent kouent.

Mad eo displega kement-man evit deska-durez ar gristenien.

Breman e kavimp adare hor zantez vian.

Superiores Lisieux, ne doa ket selaouet Thérèse pa e devoa houman, d'he nao bloaz, diskleriet d'ezhi e karje mont d'ar gouent. — Ar reolen ne verke ket da be oad e c'hellet reseo ar re a zo hanvet *Postulantes*, merka a rea hebken ne c'hellet ober profesion nemed da 17 vloaz echu.

Ar superiores a anaveze Thérèse dre ar pezh e doa klevet he c'hoarezed o lavaret divar he fenn. Meur a vech e doa gullet anezhi er gouent ha netra na c'helle breman miret ne vije digemeret.

Red oa koulsgoude goulenn avis an Aotrou Superior, rak derc'hel ar rea plas an Aotrou n-Eskop.

Au Aotrou Chaloni Delatroette a oa, a dra zur, leun a vadelez, mes difen a rea start reolen Urz Carmez, ha diskleria a rea ne dleiet ket, kaout digor er C'harmel nemed da eur bloaz var-n-ugent echu.

Ar Vamm Marie de Gonzague a glaskaz meur a vech ober d'ezhan plega. « Kredet e ve, emezhan, ne jommo ket ar gouent-man en he za, ma ne deu ket ar bugel-ze enni. Gortoz a c'heller; n'e deuz da ober nemed chomm gant he zad beteg he bloaz var-n-ugent. Ne gomzit mui d'in a gementse ».

Penaos eta e vezo digemeret Thérèse pa'zai da gaout superieur ar gouent? — An Aotrou Martin gounezet breman da vad gant Thérèse a falvezaz d'ezhan mont ganthi. P'o doa lavaret evit petra e teuent e klevchont ar respont seac'h ha berr : (Nann). Koulsgoude, emezhan, me ne m'aoun aman nemed en hano an Aotrou-n-Eskop. D'eoc'h eo mont beteg ennan. Malavar « ia » me n'am bezo netra da lavaret.

Glao a rea, en oabl ez oa koummoul teo ha tenval. Ene ar fleuren vian a oa ken trist hag an oabl pa'z achont dez ar presbital. Chomm a rea koulsgoude eur sklearaen en he c'halon : Mont da gaout an Aotrou-n-Eskop.

Va « rouanez vian » eme an tad, me a gaso ac'hanout da gear Bayeux e leac'h m'e man an Aotrou-n-Eskop o chomm.

Setu aman penaos e deuz kountet Thérèse ar vizit-se: Vazad, pavelaz an Aotrou-n-Eskop ha ganthi he vikel vraz, an Aotrou Reve-rony, a zaoulinaz evit kaout he vennoz. An Aotrou-n-Eskop a reaz d'eomp azeza. Me a grede en divije kaozeet va zad, mes lavaret a reaz d'in displega evit petra e teuen. — Me a gomzaz deuz va guella, en eur zonzal e vije bet talvoudusoc'h d'in kaout eur gomz vad benag digant ar Superior. An

Aotrou-n-Eskop a c'houlennaz diganen ha pell ez oa abaoe ma c'hoanteen mont d'ar gouent. — « Oh ia, Aotrou-n-Eskop ». Da viana, a lavaraz an Aot-Reverony, en eur c'hoarzin, n'euz ket pemzek vloaz c'hoaz. Me a respontaz : « Guir eo, ne vank ket kalz koulsgoude, rak adalek va zri bloaz em euz bet c'hoant d'en em rei da Zoue ».

An Aotrou-n-Eskop a glaskaz ober plijadur d'an Aot. Martin, o tiskouez d'ezhan e tlie derc'hel he verc'h ganthan er gear, eur pennad c'hoaz. « — Ni a dle mont da Rome gant pelerinaj an Eskopti, a lavaraz an Aotrou Martin ha va merc'h ne devezo ket aoun o kaozeal d'hon Tad Santel ar Pap, ma n'e deuz ket bet he goulenn araok ».

Thérèse ne c'helle mui enebi deuz he daëlou, hag an Aotrou-n-Eskop, tenereat o velet anezhi o ouela, a ziskouezaz d'ezhi kalz a garantez. — « Ne 'z euz netra kollet c'hoaz, va merc'hig karet, kontant braz oun o c'houzout e tleit mont da Rome gant ho tad. Evelse e startai c'hoaz ho vocation. E leac'h gouela, c'houi a dleffe beza stad ennhoc'h ».

Var gementse ez echont er meaz; Thérèse ne doa ket bet he goulenn.

Ma ne za ket pep tra evel on deuz c'hoant, daoust ha ne ziskoûezomp-ni ket re pegement

a boan a ra an draz-ze d'eomp. Thérèse ne golle ket he fenn, he daëlou hebken a roe d'anaout an dristidigez a oa en he c'halon; derc'hel a rea mad var he hent, ar pezh a c'houlenne a dlie digouezout; Doue a c'halve anezhi, red ez oa ober he volontez.

Ar pezh a zo da ober pa deu eun dra benag, aberz Doue, da waska ac'hanomp, eo kemeret pep tra deuz an tu mad.

Guerc'hez Santel, roit d'eomp, evel da Zantez Thérèse, ar c'hras da zerc'hel mad pa ne glaskomp nemed gloar Doue, ha ma teu eun dra benag da enebi ouzomp grit ma tigemerimp gant himor vad, ar poaniou-ze, rak ne badint ket pell.

★ ★ ★

EUR MISIONNER PAREET.

An tad Mulder en doa en em roet a bez da vision Locandu (Congo), epad ar vrezel vraz. E miz gouere e rankaz anzañ ne c'helle mont kén : krena an derzien heb ehan ha recheti dalc'h mad. Ar medisin a deuaz; ar vellaen ne badaz ket pell hag an askouez a oue goasoc'h, n'en doa ket pell da veza.

O sonjal pegen nebeut a vissionnerien ez

oant (kement-man a oa bet kaoz d'ezhan da goueza klanv) an tad Mulder a zonzaz goulenn digant eur missionner all, ober eun naved, assamblez gant kristenien ar mission, de Zantez Thérèse ar Mabig Jesus, evit goulenn evithan ar iec'hed mar boa talvouduz evit mad an eneou. — An eil devez deuz an naved, eme an tad hé-unan, ar bevar a viz east, epad ma oa ar gristenien o pedi en iliz, ha me o pedi assamblez gantho, e kleviz eur vouez freaz ha leun a zousder o lavaret d'in : « Nann, va zad, ne varvot ket c'hoaz, red eo d'eoc'h kenderc'hel da labourat evit ar vorianed ». O klevet ar c'homzou-ze, e rankan gouela kement e lamm va c'halon ».

En devez varlerc'h kouls goude ez oa hano da rei ar sakramanchou diveza d'ar c'hlanvour. — Neuze em euz diskleriet ar (secret) d'an tad a oa deut aberz an Aotrou-n-Eskop; heman ne grede ket. — Na pegen souezet e chommaz eta an oll, o velet an tad Mulder var droad da fin an naved. Pare oa.

Ar bevar var-n-ugent a viz east oa ar zul, hag an tad pa ne c'helle ken kuzat deuz he gristenien he bareanz burzuduz, a roaz d'ezho da anaout ar pezh a oa tremenet hag a glaskaz, gant eur vouez troc'het ha mouget gant an daëlou, trugarekad ar zantez ker karet.

Adalek neuze e krogaz adare gant he labour evit konversion ar vorianed evel ma c'houlenne Santez Thérèse.

An tad Mulder a zo deut divezatoc'h da Lisieux da drugarekad Doue hag he vadoberouez, ha lavaret en euz an oferen dirak ar veren a liou a verk ar mirakl great evithan.

Santez Mari,
pedit evidomp
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

C'huezekved devez

Tri devez goude beza bet e Bayeux, an Aotrou Martin hag he ziou verc'h Thérèse ha Céline, a oa en hent abred deuz ar beure, ha digouezet e Paris, kenta rejont oa mont da iliz Itron Varia ar Viktoriou. En iliz-se, ker brudet, Thérèse a bedaz ar Verc'hez Santel e doa great kement evithi adaleg he bugaleach, da genderc'hel da gaout soursi outhi evel eur vamm vad, dreist pep tra er mare-ze, rak muioc'h eget biskoaz e doa ezom da gaout sikour Doue.

Ar pelerinaj-se a oa great evit mont da gemeret perz e Jubile hanter kant vloaz belegiach ar Pap Léon XIII.

An Aotrou Legoux, vikel vraz eskopti Coutances a oa karget deuz ar pelerinaj evit kass d'ar Pap doujanz ha karantez bro an Normandi, bet atao eur vro gristen. An oll a dlie en em gaout e Paris.

Thérèse kustum d'en em ober deuz an dud ne oue ket pell evit en em gaout eaz etouez

an dud-se gant pere e tlie beva tost da eur miz. En eur veach hag a bad keit, e teuer d'anaout an dud hag e veler andefaotou bian a gaver atao etouez ar re vella.

Etouez ar belerined ez oa an dibab deuz tud vraz an Normandie ha kalz a veleyen. Thérèse a vele e roent skuer vad heb en em zizober koulskoude deuz an defaotou a gaver atao etouez an dud.— Ma o deuz eta ar re a zo hanvet gant Doue c'hoalen ar bed, ezom e ve pedet evitho, pegement muioc'h a ezom o deuz c'hoaz tud ar bed.

Thérèse a gomprenaz neuze pegen talvouduz eo, evel ma ra al leanezed Carmélite, pedi evit ar veleyen ha raktal e sonjaz lakad an dever-ze etouez ar re genta en he buez a leanez.

Araok mont en hent, famill an Aot. Martin a dremenaz an amzer a jomme, o teurel eur zelle deuz an traou kaëra. Evit Thérèse netrane oa par da iliz Itron Vari ar Viktoriou. Eno e tremenaz kalz a amzer; kement a draou e doa da c'houlouen digant he Mamm vad, ar Verc'hez Santel.

Ar mare da vont en hent a deuaz koulskoude. — Ne gomzin ket deuz kement tra a dremenaz epad ar veach. Beza oa, e guirionez eur pelerinaj a binijen. Guelet a rejont

ar Suisse gant he menezioù goloet a erc'h. Thérèse a jomme sebezet; kement a draou kaër a roe leac'h d'ezhi da veuli Doue krouer ar bed. Setu Milan gant he iliz burzuduz, great oll gant marbr guen; Padoue, bro sant Anton. Bologne e peleac'h e man korf Santez Catherine. Hirio ez eo c'hoaz eur mirakl rak he c'horf a zo atao soupl evel pa oa beo, hag he goad atao ruz ha tano a verk galloud an Aotrou Doue. Lorette, dreist oll, a blijaz da Thérèse, abalamour eno e man ti ar Verc'hez, e leac'h ma'z eo Mab Doue en em c'hreat den. Céline hag hi o doa an eur vad da gommunia en ti bian-ze a zo breman savet eun iliz kaër a zioc'h d'ezhan, ha da lakad ho chapeled e skudel ar Mabig Jesus a zalc'her eno atao gant kement a respet.

Neubent amzer goudeze, setu hi adare en hent epad an noz, ha deuz ar mintin Thérèse a zo difunet o klevet Roma... Rome, setu penn ar veach.

Ar gristenien o deuz ar c'hiz vad da ober sin ar groaz pa'z eont en hent. Mad a reont lakad ho beach dindan skoazel an Aotrou Doue. Eun dra vad eo ive sonjal e Doue pa veler ar meziou kaër a gaver var an hent hag a verk d'eomp galloud Doue. — Ar veleyen eo a ro ar vuez d'an eneoù; ha pedi a reomp-ni

avechou, evit ma vezo muioc'h a veleyen, ha pedi a reomp-ni Doue d'ho zantelad, ha n'or beuz-ni klasket avechou ober gaou deuz ho brud vad?

O Mari, rouanez ar veleyen, c'houi a c'hell en em gonsoli pa vank unan benag, o velet ho Mab Jesus ar beleg eternel. Roit kalz a c'hrasou da veleyen France evit ma raint kalz a vad, rak ezom braz a zo en hon amzer.

★ ★ ★

DAOU VORIAN DALL, PAREET

Dindan bolz glaz an eno, en Afrique, er bloaz 1913, an hini a vezo heb dale patronez ar missionou, a gommanz he labour en eur rei ar guelet da zaou vorian koz. Gant ho feiz nevez ha birvidig (konvertiset ha badezet oaint bet, nebeut amzer a ioa) e c'houlenjont enn devez ma vijent renet beteg ti an tad missioner, ha digouezet eno e taoulinont dirag ar beleg en eur c'houlen diganthan rei d'ezho ar guelet.

Kement e pouezent, en euz lavaret an Tad Lecomte, missioner a urz ar Spered Santel, ha kement e tiskouezent a feiz hag a fizianz, ma

em euz kemeret deuz relegou sœur Thérèse (eun tamik gloan bet en he fenn vele) ha great gant fizianz ganthan teir guech sin ar Groaz var daoulagad ar c'henta, en eur bedi Servicherez Doue. A veac'h am boa great ma lavaraz en eur grial : « Guelet a ran ».

Goudeze ez oa tro an eil. He fizianz a zo kresket c'hoaz o c'houzout ez eo pare he gamarad, hag hen ive en euz bet ar memez mirakl.

An daou zen koz a zo iaouankeat o velet an traou en dro d'ezho, ne ehanont da lavaret ar pezh a velont ha da drugarekad Doue hag an tad missioner.

Kaëroc'h c'hoaz e vezo ar burzudou a rai c'hoar ar Vissionnerien, e broiou ar baianed pa lakai sklerijen ar feiz da bara var gement a eneo. — Evithi eo guir komzou an Aviel : « An dud dal a vel, ar re vouzar a glev, an aviel a zo roet d'anaout d'ar paour.

Santez Mari,
pedit evidomp.
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Seitegved devez

Beza oa, er pelerinaj, unan ka ne ehanaz ket da zellet piz deuz buez Thérèse epad ar veach hag e Rome ive. Hennez oa an Aotrou Révérony. Ar zantez vian ne oa ket nec'het gant kementse ha ne daolaz pled ebet d'ezhan.

En dro da Rome ez euz kalz traou da velet, ouspenn an ilizou dispar a zo e kear. Ar pezh a ie ar muia da galon Thérèse, kouls-goude, oa berejou an amzer goz, hanvet « Catacombes ». Ar re-man a zo hentchou dindan an douar e leac'h ma vije enteret ar verzerien e penn kenta an Iliz; hentchou great a dreuz hag a hed evit miret deuz ar baianed da vont enno. — Meur a leo a zo anezho hag an tad Marie Bernard, trapiste deuz an Normandi ive a rene ar belerined, eur pennad goulou en he zorn. — Guelet a rejont bez Santez Agnès, ha Thérèse a gemeraz var an douar eum tammik mean marbr da gass d'he c'hoar hanvet Agnès de Jésus.

Ar bez pe an toul great er voger evit lakad korf Santez Cécile a oue sellet kalz outhan

hag eno Thérèze a zantaz eun devosion vraz evit ar zantez-se rak hou-man ive a oa en em roet oll da Zoue ha dre he fizianz heb muzul e Doue, a deuaz a benn da zeski ar burete d'ar re ne zontent nemed er blijadur var an douar-man.

Ar glao ne ehane ket en devez-se ha Thérèze ne glaske guelet netra. En he spered ne oa nemed eur zonj : An ugent deuz ar miz a oa merket evit mont da velet ar Pap, neuze eo e rache he goulenn. « Da seiz heur hanter, setu ni en eur gambr vraz, e palez ar Pap, stignet eo e ruz hag er penn huella e man an aoter. — Eno e man Eskop Coutances, ar vikel vraz Reverony, Eskop an Naoned, Eskibien Seez ha Guened gant ho felerined.

Da eiz heur ar Pap Leon XIII, eur vantel ruz var he zoudanen venn a zigouez ive. Dont a ra etouez ar belerined daoulinet, en eur rei d'ezho he vennoz, ha daoulina a ra he-unan dirak an aoter araok lavaret an oferen. — Eaz eo kompren devosion Thérèze, ha neuze e santaz ez eo, e guirionez, ar Pap, an Tad Santel.

Goude an oferen Leon XIII a azeaz var he drôn, guisket eo breman e guen ha rei a ra he vennoz d'ar belerined a deu an eil goude egile da zaoulina dirazhan.

Pa deu tro pelerined Bayeux ha tro Thérèze, an Aotrou Reverony a lavaraz, a vouez huel, e tifenne kaozeal d'ar Pap. Thérèze, he c'halon o lammet a zellaz deuz he c'hoar Celine hag houman alavaraz d'ezhi : « Kaoze ».

Setu Thérèze e harz treid an Hini a zalc'h plas Jesus-Christ var an douar : « Tad Santel, emezhi, me am euz eur c'hraz vraz da c'houlen dganeoc'h ». Ar Pap a blegaz eun tammik he benn evit selaou ar bugel. « Tad Santel, eme Thérèze, roit d'in aotre da vont da gouent Carmel da bemzeg vloaz ». — An Aotrou Reverony a oa eno adare. « Tad Santel, emezhan, ar superioed a zo o studia ar goulenn-ze ». « Mad, va merc'h, eme ar Pap, grit ar pezh a lavaro ar Superioed ». Mes Thérèze a bouez c'hoaz; he daouarn kroajet var daoulin ar Pap e lavar : Tad Santel ma karit lavaret « iá », an oll a lavaro evel doc'h ». Hag ar Pap, o sellet outhi gant madelez a lavaraz : « Allons, va merc'h mont a reot mar plij gant Doue ».

Thérèze leun he daoulagad a zaëlou, a jomm atao stouet da dreid ar pap, pa deuaz daou deuz ar goardou da lavaret d'ezhi sevel. Red oa d'an Aotrou Reverony distaga anezhi deuz daoulin ar pap.

Ar Vikel vraz ne glaske ket miret deuz

Thérèze da vont d'ar gouent, mes kredi a rea ez oa evelse sonj an Aotrou-n-Eskop hag e talc'he re start.

Guelit penaoz ez a atao Thérèze var eün d'ar penn daoust ma klasker stanka outhi. D'ar C'harmel e rank mont.

Pa zeu Doue da c'hervel unan benag, an hent a franka atao dre he Brovidanz. — Thérèze, diframmet digant ar pap a zo trist he c'halon. « Va foan a oa braz, emezhi, mes o veza great kement a oa em galloud evit senti ouz Doue, ha daoust d'am daëlou, ar peoc'h a oa em c'halon ».

O Mari, hor Mamm, c'houi oc'h euz bet ive kalz trubuilhou en ho puez. Var an douar e kaver aliez traou a dreuz var an hent; aliez e kaver kalz da zirouestla; pa c'houzer kouls-goude gortz e leac'h mont var hor giz ha koll evelse ar pezh on doa gounezet, e teuer atao a benn gant sikour Doue, pa boanier evithan. Pa zonjer eo kollet pep tra, aliez pep tra a deu da vad pa c'houzer digemeret mad ar boan hag evelse ez euz kalz da c'hounit dirak Doue.

★ ★ ★

EUR VAMM A FAMILL PAREET.

An itron Elisabeth Green deuz Edimbourg en Ecosse, e devoa abaoue dek vloaz eur gouli braz en he gar. Kalz a boan e doa ganthan ha ne c'helle na bale nag ober labour an ti. Meur a vedisin o doa klasket he farea hag ar gouli a wasee atao. — Ar vamm baour a anavezaz saeur Thérèze dre eur journal katolik; raktal e santaz kalz a garantez evithi hag ar fizianz a ziouanaz en he c'halon. Kommanz a ra eun naved e miz ebrel 1912, evit goulenn ar pare. Abenn tri pe bevar devez ar gouli a oa eun tam kizet. Evit para buanoc'h, emezhi, e prenaz eul louzou benag, mes en devez varlerc'h e velaz ez oa gwased ar gouli. Ar plac'h paour a gom-prenaz neuze e doa great fall. Goalc'hi a ra argouli heb lakad netra varnezhan hag e kendalc'h gant he naved.

Abenn pemzek devez, abred deuz ar beure, a veac'h hanter zifun, e velaz dirazhi santez vian Lisieux. « Kaër oa, emezhi, e kreiz ar sklerijen; daoublega a reaz dirazon en eur vousec'hoarzin hag e santen ez oa o tispakavagar. Neuze ez oun difunet mad ha me ive a vousec'hoarze d'ezhi gant kalz à joa. Eur zell a ran deuz va gar dispaket, hag e velan ez eo iac'h mad ». — Diou deuz bugale iaouanka an itron

Green, diou blac'hig eunnek ha deg vloaz a gemere perz en naved ha a deuz evel bep mintin da velet penaoz e doa ho mamm tremenet an noz. Pebez joa o velet ez oa pare, pedet o doa kalz evithi. — Eürusoc'h c'hoaz eget he bugale, ar vamm a stagas raktal gant he labour bemdez hag abaoe n'e deuz bet poan ebet.

Santez Mari,
pedit evidomp,
Santez Thérèze ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Trivac'hved devez

An Aotrou Martin a ioa bet dirag hon Tad Santel ar Pap, araok ma oa deut tro Thérèze hag a oa o c'hortoz he verc'h etal an or. Daëlou ar verc'hig paour a ruille druz hag he zad a velaz dioc'h-tu ne doa ket bet he (rouanez) vian ar pezh a c'houlenne.

En desped d'he foan spered, Thérèze ne golle ket fizianz. Kredi a rea ne c'helle ket Jesus, ker karet ganhi, lezel da vont da netra an esperanz a oa en he c'halon.

En devez varlerc'h e tliet mont da velet Naples ha Pompéi. Thérèze a heuliaz ar re all heb kalz a brez; nag ar pezh a jomm deuz Pompéi, eur gear devet er bloaz 79 ha goloet c'hoaz alud distolet gant menez tan ar Vésuve, na kear Naples nag he rad ken kaër, netra na c'helle lakad ar joa en he c'halon, nag ober d'ezhi ankounac'had ez oa bet diskaret he esperanz en devez araok. — Skriva a reaz divezatoc'h : « Ah, emezhi, santet am boa : ar joa guirion n'e man ket entraou a zo en dro

d'comp; beza e man, e guirionez, diabarz ennomp, en hon ene; he c'haout a c'heller en eur prizoun tenval kerkoulz hag e leziou kaëra ».

Thérèse e doa mall da zistrei da France.

Ar bevar var-n-ugent a viz du, an train a loc'he adare evit treuzi a nevez an Itali, ha gant eun amzer ar c'haëra e chommaz e traon menez Assise.

O tisken deuz an train Thérèse ha Celine en em gavaz gant an Aotrou Legoux. Heman a deuz beteg ennhi, hag o sellet outhi, e lavaraz en eur c'hoarzin : « Penaoz a ra hor c'harmelitez iaouank? ». — Ar verc'hig paour e doa mez o klevet ar c'homzou-ze, rak kredi a rea ne 'z oa ar goulen e devoa great d'ar Pap, anavezet nemed gant eun nebeut tud deuz mignoned he famill.

Assise, bro ar paour Sant Francès, a deuz a benn, koulsgoude, da lakad eun tam levenez en he c'halon. Sant Francès hag en doa kavet eun eürusted ken braz o rei kement e doa hag hen he-unan da Zoue a dlle tenna d'he gaout an ene iaouank a glaske ive en em zistaga deuz kement so evit beva e paourentez ar C'harmel.

Pedi a reaz gant kement a zevosion e chapel ar gouent, ma ne oueze ket pegeit ez oa

chommet ebarz, ha pa deuz ar mare da vont en hent, ar voetur ma tlie mont ennhi a oa eat kuit.

Ne jomme nemed unan all, hini an Aotrou Reverony. — Thérèse a rankaz neuze diskleria perag ez oa re zivezad, ha goulen eur plas digant ar beleg e doa breman muioc'h a aoun razhan eget biskoaz. Lakeat oue da azeza dirag ar vikel vraz. Me a ioa, emezhi, evel eur gwinver paket el lass.

Ar beleg, keuz d'ezhan marvad da veza great poan d'ar verc'hig santel a gomzaz d'ezhi divar benn ar C'harmel en eur brometi e rache ar peza oa en he c'halloudevit he zikour da vont d'ar gouent d'he femzek vloaz. — Dre Brovidanz Doue, marvad, ez oant en em gavet, rak ar c'homzou-ze a lakeaz eun tam laouenedigez e kalon Thérèse evit ar rest deuz ar veach.

Heb dale e maint var douar France. — En eur dremen e veljont an diou iliz kaër savet en hor bro d'ar Verc'hez : Itrou Varia de la Garde, e Marseille hag Itrou Varia de Fourvières e Lyon. Digouezet int e Paris an eil a viz kerzu.

A veac'h digouezet e Lisieux, Thérèse a oa mall ganthi mont da gounta d'he c'hoarczed petra oa talvezet d'ezhi he beach. Goulen a

reaz digant he c'hoar Agnès de Jesus, poueza c'hoaz evithi var Eskop Bayeux.

Goulennou entanet Thérèse d'ar Pap hag he fedennou c'houeg a deuaz a benn da c'hounit Kalon Jesus. — Da c'houel an Inno-santed Santel, an eiz var-n-ugent a viz kerzu 1887, e tigouezaz er Buissonnets eul lizer deuz an eskopti. Al lizer-ze a roe da Thérèse aotre da vont raktal da gouent ar C'harmel.

Guelet on deuz ez oa ranket diframma anezhi a zaoulin ar Pap... Daoust pegen braz oa he foan-spered, den ne glevaz anezhi o klemm; he daëlou hebken a roe d'anaout pegen ankeniet ez oa, hag e leac'h koll he nerz kalon e kreskaz da bedi gant he oll devo-sion.

Seulvui e kavomp anken ha poaniou var hent ar vuez, seulvui e tleomp chomm tost da Jesus dre ar beden. Klemm atao ha tammal an Env pa ne'za ket pep tra ervez hor c'hoant n'eo ket din deuz eur c'hristen.

O Mari, mamm ar guzuil vad, hirio etal hoc'h aoter, ni a bromet mont atao d'ho kaout pa zigouezo ganeomp eur boan pe eun anken benag. Renit ac'hanomp var guir hent ar zilvidigez; kreskit hon nerz-kalon evit ma

c'hellimp, skoazellet ganeoc'h dere'hel mad beteg kaout an trec'h.

★ ★ ★

EUR ZOUDARD, KENNERZET GANT
SÆUR THÉRÈZE, A DEU DA VEZA KRISTEN MAD.

Eun devez benag araok ar vrezel, an aotrou P. o tremen dre Lisieux, a deuaz e pelerinaj var bez Sœur Thérèse ar Mabig Jesus. O vont di e klevaz hano deuz ar miraklou a rea al leanez, ha daoust ma n'en doa ket a feiz, ar pez a gleve a rea d'ezhan ober kalz a zonzou.

An eiz a viz eost ez a, gant ar (43^e infanterie coloniale) er penn araok, hag an ugent a viz eost e man e kreiz an tan, e Morhange. Pa oa o vont deuz ar gear he bried e doa roet d'ezhan eun tammik deuz arched sœurz vian Lisieux en eur lavaret d'ezhan pedi anezhi aliez pa en em gavche e danjer.

An dregont a viz guengolo he regimant a oa er goasa. Karget oa da c'hounit koat Maricourt. An devez-se a oa deiz ar bloaz maro Thérèse ar Mabig Jesus. — A veac'h, emezhan m' on doa great eur pennad hent m'en em lakeaz kanoliou an enebourien da strakal. En dro d'eomp ne velomp nemed obuzou o koueza, ha me, o velet

ar maro ken tost, en em erbed ouz Sœur Thérèse. — Urz a deu d'eomp da vont araok. Sevel a ran em za ha petra velan : Sœur Thérèse, dirazoun, eun tam dibrad deuz an douar; he mantel vraz a ioa ganthi, ha mousc'hoarzin a rea d'in gant dousder eun eal. Ne greden ket ar pezh a velen hag e klozen va daoulagad, diou vech zoken. Kaër am boa e velen anezhi atao. Asten a ra he dorn varzu ennhon evel da lavaret : « Kouraj ha fizianz, me a zo o tioual ac'hanout ». Adalek neuze n'em euz bet aoun ebet. — Ar pezh am boa guelet na c'hell ket beza ankounac'heat ».

Ar zoudart P. a gomprenaz petra c'houlenne al leanez santel evit beza he ziouallet, ha beteg fin he vuez e chommaz start en he zeveriou a gristen.

Santez Mari,
pedit evidomp,
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Naontekved devez

Kouent Carmel, e Lisieux a zo bet savet er bloaz 1838. Ar c'huec'h leanez genta deut deuz Poitiers a rankaz mont da jomm en eur c'hos ti fermet gantho, hag eno e tremenjont eur pennad mad er baourentez hag er vizer, n'o doa netra. En ho zi ez oa diou vanzarden hag eur gambr vraz, rannet ive e meur a hini; ho chapellik dister a oa eun toull heb netra da gaërad anezhan.

Goude eun nebeut bloaveziou e oue kavet eul lojeiz all, e leac'h m'e man breman ar gouent.

Ho faourentez a oa braz pa'z eo guir e rankent aliez ober ho fred gant pour poaz hebken. Mes ho devosion maget gant gras Doue a greske atao beteg ober d'ezho ankounac'had ho faourentez.

Ar Superiorez (mère Geneviève de Sainte Thérèse) a rene he c'houent gant kement a skiant hag a c'hoant da ober vad d'an eneo, ma teuaz, a nebeudou, seurezed nevez; he

zantelez a dennaz bennoz Doue var he c'houent hag heb dale ez oa easoc'h beva en ti.

Ugent vloaz goude, 1858, e oue savet ar c'hostez braz deuz ar gouent, ha (Mère Marie de Gonzague) a reaz peurober anezhan evel m'e man breman.

Varc'hoaz eo e tle Thérèse mont d'ar C'harmel; setu deut an eiz a viz ebrel 1888. Ar gerent a zo oll azezet en dro d'an daol er Buissonnets. Ne oa ket kalz a gaojou; gouela eo a reat, ia, gouela gant ar joa. Thérèse a oa eun dudi he guelet, ne oa dija mui deuz ar bed-man.

En devez-se, ar goan a badaz pelloc'h eget kustum, den ne glaske mont kuit. — Kement tra a oa er zal, an oaled, an diou gador ma vije azezet enno an tad hag ar vamm guechall evit ar veilladeg-noz, an horolaj hag a skoe re vuan hirio an heur evit merka an nebeut amzer a oa c'hoaz da dremen assamblez, ar mogerioù ho-unan hag a doa klevet ken aliez ar c'homzou tener ha devot a vije lavaret er famill, pep tra o doa eur vouez evit lavaret kenavo da Thérèse evit mad.

He c'hoar Léonie, deut da veza leanez ive divezatoc'h a lavar evelhen : « Me a oa eno pa'zeo eat Thérèse diganeomp; Souezet edon o velet pegement a nerz-kalon e doa. Ne oa

nemethi, a gav d'in, ha ne lamje ket he c'halon... Me a lavaraz d'ezhi ober mad he zonz araok mont d'ar gouent abalamour m'ac'h anavezen pegement a sakrifisou a zo da ober er vuez-se. He respont hag he doare a verke sklear d'in ne doa ket a aoun rak ar sakrifisou hag e tigemere anezho gant joa ».

Setu deut an heur da zilezel pep tra evit Doue, ha Thérèse eat er Jardin deuz ar mintin a roaz c'hoaz eun taol lagad var ti ar Buissonnets a oa bet evel eun neiz evit he bugaleach.

Hi hag he zud a ieaz assamblez d'an oferen da chapel ar gouent.

Goude beza bet o kommunia, ha pa oa Jesus en he c'halon, Thérèse a bokaz da genta d'he c'hoar Céline ha goudeze d'he oll gerent; neuze e kouezaz d'an daoulin dirak he zad evit goulenn he vennoz. An Aotrou Martin a ieaz ive d'an daoulin dirak he verc'h, hag en eur ouela e reaz sin ar groaz var he zal evit merka e roe d'ezhi bennoz an tad.

« Dor ar C'harmel a oue serret varnon hag eno em euz poket d'am diou c'hoar garet a oa bet eur vamm evidon an eil goude eben ha poket ive d'ar re a oa va famill nevez, famill leun a vadelez hag a deneredigez, ar pezh ne anavezer ket er bed. Kement tra am boa gou-

lennet a oa deut da veza guir ha va ene a oa ennhan eur peoc'h ken dous ha ker braz ma ne c'hellan ket hen lavaret ».

Ar zonz da c'hellout beva en ti benniget ma veve he diou c'hoar ennhan, ar zec'hed e doa bet atao evit ar sakrifisou, ar c'hoant da renonz atao d'ezhi he-unan, pep tra a lakee levenez en he c'halon, ha digouezet oa erfin e leac'h distro e doa atao klasket epad he buez.

Ar pezh a dremenaz e kalon oll leanezed ar gouent, pa zigouezaz Thérèse n'eo bet morse ankounac'heat : « He bizaj, emezho, a oa sklear ha ken dous ma lavaremp ez oa digouezet eun eal en hon touez ».

Doue atao a ra ho hent d'ar re a c'halv en he zervij. Avehou e tale da rei ar goulenn evit guelet ha diazezet mad eo ar feiz hag an esperanz ennhan. — Gortozomp he zevèz, Providanz Doue ne vanko ket, fizianz a c'hellomp kaout ennhan en eur ober atao an deveriou dister on euz da ober bemdez, ha pa on deuzsonjet mad dirag Doue hag ar Verc'hez Santel, pa zomp sur ez eo evit mont varzu ar zantelez, deomp araok heb sellet adrèn, Doue a reno ac'hanomp atao.

O Mari, c'houi a zo grasou Doue etre ho taouarn. Mar deo hor mamm a zesk d'eomp

bale, pa 'zomp bian hag a daol atao evez var-nomp, ho Mab Jesus eo ar sklerijen a ziskouez d'eomp an hent pa ne c'hellomp mui beza harpet var divreac'h hor mamm. — Grit, Mamm zantel ma ne 'zaimp morse koll guel deuz ar sklerijen a reno ac'hanomp beteg ma reposimp epad an eternite.

★ ★ ★

EUR ZOUDARD KRISTEN.

Ar zoudard A. V. a oa eat deuz ar gear en deveziou kenta ar vrezel. Eun den a feiz krenv oa ha devot zoken. Da eur bloaz var-n-ugent ez oa unan deuz an dud iaouank katolik, desket mad ha dispart, hag he gerent o doa gwestlet anezan da zantez vian Lisieux. — Meur a zevèz a oa n'en doa ket roet deuz hegelou, pa deuaz an demezel E. da gonta d'he c'hoar, anavezet mad e kouent ar C'harmel, eun dra hag en doa skoet ha trubuillet anezhi.

« Da eunneg heur deuz ar beure, o vont d'am c'hampr, oa c'hoar a jommaz sebezet o velet dirazhi eun dra burzuduz : Guelet a rea mad ha tost aouallac'h d'ezhi ar zoudard A : etre divreac'h Santez Thérèse. Al leanez santel a oa koant ha laouen, gant he dorn kleiz e

c'harpe ar zoudard gourvezet ha gant he dorn deou e kinnige d'ezhan eur bod palmez. Ho daou e sellent etrezeg an eno en eur vouso'hoarzin. Va c'hoar a jommaz eur pennadig da zellet, pennad amzer, emezhi, ha ne vezo biken ankounac'heat, ha neuze e teuaz da lavaret d'in : « Ar zoudard A a zo maro, pe e man o vont da vervel, rak guelel am euz sœur Thérèse en he gichen ».

Ar zoudard-se, goude beza great ouspenn he zever epad ar vrezel, a oue hanvet sergent var an dachen ha lazet eo bet ar zeiz a viz guengolo e La Fère Champenoise gant eur voulet en he dal.

Santez Mari,
pedit evidomp,
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Ugentved devez

Dirak an tribunäl savet dre urz ar Pap evit studia buez Santez Thérèse ar Mabig Jesus ha guelel a lakeat e c'helle beza e renkar zent, ar vamm « Marie des Anges a gomze evelhen » : « Pa zigouezaz Thérèse er gouent, ar sœur-rezed, pa ouezent peger iaouank ez oa, a zonje guelel eur bugel, mes souezet ez int bet ha leun a respet evithi, o velet he doare ken direbej ha ker modest hag an ear seriuz e doa. Unan anezho (Sœur Jean de la Croix) hag e doa enebet pa zonjet digemeret eur « bostulantez » ker iaouank, a lavaraz d'in nebeut amzer goude : « Me a grede o pije bet keuz o veza great kement evit rei d'eomp ho c'hoar vian, lavaret a rean : Keuz o devezo ho diou. Oh! na me am euz faziet, sœur Thérèse n'eo ket evel ar re all; eur skuer eo evidomp oll ».

Eun dra all a gountin c'hoaz : ar c'homzou lavaret gant an Aotrou Chaloni Delatroette, dirag an Aotrou Martin pa oue digoret dor

ar gouent da Thérèse : « Mad, va c'hoarezed enoruz, kana c'hellit an Te Deum. En hano an Aotrou-n-Eskop, e tiganan d'eoc'h ar bugel-man a bemzek vloaz; c'hoanteat oc'h euz he c'haout; reketi a ran ne faziit ket gant ho fizianz, mes lavaret a ran d'eoc'h, ma tigouez ar c'hontrol, c'houi hebken a responto ». — Ar c'homzou-ze, kouezet deuz muzellou ar beleg koz, ma n'eo ket deuz he galon, a oa bet poaniuz d'an oll da glevet, ne jenchont ket koulsgoude, ar pezh a zonje al leanezed divar benn Thérèse.

Klevet ar c'homzou diez-se a oa kenta pinijen a rea Thérèse o vont er gouent. Ne oa ket bet poaniet gantho koulsgoude; dont a rea evit pedi, rapari ha gouzanv.

Breman beteg fin ar miz ec'h heuillimp Thérèse en he buez pemdeziek.

Poania da glask gloar Doue ha silvidigez an eneou, a oa ar reolen roet gant Santez Thérèse d'Avila d'he bugale, ha kementse a dlire ho dere'hel difun atao e servij Doue.

Setu aman e nebeut komzou ar vuez a rener e kouenchou ar C'harmel, vad a rai d'eoc'h he glevet.

Ar re a ia, a volonteze vad, en hent-se evit klask ar berfection a dle beza distag deuz pep tra krouet ha kaout disprij évitho ho

unan. Ar binijen a dle beza heuillet strisa ma c'heller. Ar zentidigez hag an humilite a zo er penn kenta. — Heb konta ar iuniou gourc'hemennet gant an Iliz, ha pep guener deuz ar bloaz hag an deiz araok ar goueliou braz, leanezed ar C'harmel a rank c'hoaz iun adalek hanter miz guengolo beteg Pask; hag ar re a zo iac'h ne zrebont morse tam kig. — Ne c'heller kaozeal nemed epad an diou heur récréation a zo bemdez. — Eur baillasen kolo, kalet peurvuia a vezo guele prijou Jesus en ho c'hambri vian, eun daol hag eur gador a zo ouspenn; Ar re zantela a gavo c'hoaz ez eo re voug hag a rai pinijennou all, ho-unan.

Ar re a vefte troet da glask ho eazamant ha da ober ho bolontez o deuz pinijennou all : senti raktal evit an distera tra, ha rei peoc'h atao, zoken ma vez great eur rebech benag ha n'eo ket meritet, pe ive pa oar tamallet a eneb pep justis.

An oll boaniou-ze, koulsgoude, ha na c'hell ket tud ar bed ho c'hompren, a zo digemeret gant joa en tiez santel-ze. Lavaret a c'heller gant guirionez, ne 'z euz ket var an douar eul leac'h all benag hag a ve ker laouen an dud ennan.

Setu aze eta ar vuez rust e deuz kemeret Thérèse, c'hoant e deuz da baea, dre he sakri-

fisou ar pec'hejou a rer bemdez er bed a eneb Jesus he muia karet.

Pa zigouez ganeomp klevet eun dra benag poaniuz evidomp, petra reomp? ha gouzout a reomp rei peoc'h gant pasianted?

Thérèse, her gullet on deuz, a ginnig a greiz kalon he buez da Zoue, digemeret mad a ra ar poaniou; o vont er C'harmel e tor pep liam gant ar bed evit beza oll da Jesus.

Ha rei a reomp-ni ive hor c'halon a bez da Jesus ha da Vari? Ouspenn ar garantez a dleomp kaout hag a zo mad, dreist pep tra evit ar gerent, ha n'euz ket en hor c'halon eur garantez benag ha n'eo ket mad, eun darempred benag danjeruz. Ha dere'hel a reomp-ni hor c'halon serret da enebour kement tra zo mad, ha lakad a reomp-ni en dro d'ezhi, evel ma lavar Saint Francès a Sales : kurunen spern hor Zalver Jésus-Christ.

O Guerc'hez leun a vadelez, grit d'eomp, evel Santez Thérèse ar Mabig Jésus, ober ive hor lod evit rapari an disprij a rer d'ho Mab. Goaskit hor c'horf evit ne vezo ket hor mestr hag hor boureo. Roet eo d'eomp evit ma c'hellimp santelad hon ene, grit ma ne vezo ket hon enebour.

★ ★ ★

BEZ DIZOURS, LUIGIA, HEB DALE
E VEZI PARE.

Lizer skrivet deuz Carmel Sutri (Itali) an daou var n-ugent a viz even 1926, da Garmel Lisieux.

Va Mam enoruz. — Skriva a ran d'eoc'h al lizer-man en hano eur famill hag e deuz kalz a anaoudegez-vad da Zantez Thérèse ar Mabig Jesus. Ho Santez karet e deuz roet ar pare da eur verc'hig iaouank, Luigia Liberati, oajet a drizek vloaz, parrez Albano Laziale, tost da Rome.

Ar verc'hig paour en em gave diez meur a zizun a oa, ne c'helle drebi tam. Ar c'huec'h a vire here 1925 an derzien a oa savet beteg 40^o hag ar medisin a ziskleriaz ez oa an « typhus ». Nebeut deveziou goude e lavaraz e doa eur (méningite), ne grede mui rei esperanz ebet d'ar gerent glac'haret.

Luigia e devoa, pell a ioa, eun devosion karantezuz evit Santez Thérèse ha pa jomme he anaoudegez ganthi, en he c'hlenved, e vije klevet o pedi anezhi gant teneredigez. Setu aman petra e deuz diskleriet ar bugel he-unan.

Me a bede Santez Thérèse ar Mabig Jesus da barea ac'hanon pa deuaz he-unan dirazoun;

eur boket lili a oa en he dorn hage lavaraz d'in : « Bez dizoursi Luigia, heb dale e vezi pare ». Mont a reaz kuit ha me n'em gave goasoc'h. — Tri devez goudeze ez oan va unan pa zigoraz an or, ha Santez Thérèse a deuz etal va guele en eur lavaret : « Luigia, pare out ». — Ha possubl e ve, emevet me c'haï da chapel ar C'harmel d'ho trugarekad. Va madoberourez a oa eat kuit ha me n'am boa mui poan ebet, me a oa pare ».

Eun amezegez ha mignonez d'ar famill Liberati a lavaraz d'eomp goudeze : « Ar medisin en doa diskleriet d'in : Rede ve kaout eur mirakl evit he farea, ne greden mui komz d'ar gerent, rak n'am boa netra vad da lavaret d'ezho ».

Setu aze, va Mamm ar pezh on deuz gallet gouzout divar benn eur c'hras ken kaër, ho « c'hoar vian » garet e deuz lezet da goueza eun dellien roz burzuduz var ar perc'hig e doa kement a garantez evithi ».

SŒUR MARIA BENEDETTA DE JÉSUS.
LEANEZ, Carmélite.

Al lizer-man a zo sinet ouспен gant Luigia he-unan.

FERNAND LIBERATI he zad,
JEANNE LIBERATI he mamm

IDA PERUZII, eur gamarqdez
IDA DUFLISSI, Infirmierez.

Santez Mari,
pedit evidomp
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Kenta devez var-n-ugent

Oad braz ha poaniou ar gosni kouezet var (Mère Geneviève de Jésus,) a reaz d'ezhi dilezel ar garg a Superiorez. (« Mère Marie de Gonzague a deuz var he lerc'h da rén ar gouent. Hou-man a oa kalz a vad da lavarret divar he fenn, guelet a rea sklear en aferiou, savet oa bet evel ar merc'hed iaouank deuz ar renk huella, Koulsougoude ne doa ket ar c'harakter eaz a ra d'andudbeza mestr d'ezho ho-unan hag a oa red kaout evit ober d'ar vuez beza eaz evit ar re a oa dindannhi.

« Ar c'hammejou kenta am euz great e buez ar gouent, a lavar Thérèse, o deuz kavet muioc'h a zrein eget a fleur... Doue a falveze d'ezhan e vije va Superiorez rust evidon. Eun devez, sonj mad am euz, em boa lezet er c'horridor, eun tam guyad kenvit benag, hag hi a lavaraz dirak an oll. « Guelet aoual-lac'h a rer ez eo bet ar c'horridorskubet gant eur bugel pemzek vloaz ».

Au Tad Godefroy Madelaine, a ziskleriaz

er procès great gant ar Pap, ar pez en doa klevet gant ar Superiorez he-unan. Houman a lavare « ez oa evit guelet ha start ha guirion oa vertuz Thérèse eo e tiskoueze beza rust evithi. Ar pez a rean, emezhi, a oa poaniuz, a dra zur evit servicherez Doue, mes he foan ne deuz morse great d'ezhi mankout en distera tra d'ar zentedigez parfet ».

Mestrez an Novised, mère Marie des Anges, unan deuz ar guella famillou er C'halvados, e devoa evit Thérèse eur garantez vraz. Houman a gonte d'ezhi ar pez a gave a dreuz var he hent hag ar boan a rea d'ezhi guelet ar Vamm ken rust evithi. « Thérèse a deuz, eun devez, da lavaret d'in ez oa rannet he c'halon, ha koulsougoude ne oa ket ganthi eur glemmaden; guelet a rea dorn Doue e pep tra hag e vouse'hoarze gant madelez ».

Thérèse a gave eta nebeut a zikour en dro d'ezhi, konta rea var he c'hovesour. Beleg ar gouent, klanv peurvuia ne reaz evithi nemed gallout kommunia bemdez. — Eur beleg all, deut da brezeg ar retred, desket mad koulsougoude var draou an ene, ne gomprenaz ket ar c'hoant e devoa ar sœurz iaouank da veza oll da Zoue. — « Va zad, a lavaraz Thérèse, eun devez, d'an tad Blino, me a fell d'in karet Doue evel Santez Thérèse d'Avila. « Pebeuz

ourgouil deuz ho perz, va merc'h, auallac'h eo d'eoc'h korija ho tefaotouheb ofansi Doue, ha lezit a gostez ho c'hoantchou ken huel ». — Va zad, emezhi, ne gav ket d'in'e veffent dreist ar pez a c'heller, pa 'z eo guir hor Zalver en euz lavaret : Bezit parfet evel va zad a zo en env ». An tad ne zelaouaz ket.

Er bloaz 1888, an tad Pichon a deuaz da brezeg eur retred ha Thérèse a reaz d'ezhan eur govesion deuz he oll vuez, ha goude an tad a lavaraz d'ezhi : « Dirak Doue hag ar Verc'hez, e tisklerian d'eoc'h n'oc'h euz great morse pec'hed marvel ebed; trugarekait Doue evit ar pez en euz great evidoc'h, heb mirit ebet deuz ho perz ». Ar memeuz tad a lavar : Eaz oa rén ar bugel-ze, ar Spered-Santel eo a rene anezhi... Ar pez am euz guelet eo ar poaniou spirituel a leze Doue da boueza varnezhi, hag adalek neuze em euz atao sonjet e falveze da Zoue ober outhi eur zantez-vraz ».

Ar Superiorez a zeske d'ezhi beza distag outhi he-unan; mestrez an novised a zeske d'ezhi ar vuez relijiuz, he c'hovesored a roe kalz a genteliou mad; lenn a rea kalz ar Skritur-Zantel hag Imitasion J. C. hag evelse ar fleuren vian a vleunie muioc'h-mui bemdez e jardin zantel ar C'harmel.

Thérèse e deuz kavet eta, var he hent, er penn kenta muioc'h a spern eget a vleun. E gortoz ez oa, ha ma lavar d'eomp he foan, n'eo ket evit en em glemm; evit trugarekad Doue eo da rei d'ezhi an nerz-kalon a oa red; ne deuz morse bet an distera ourgouil.

Peseurt implij on deuz ni great beteg breman, deuz hor bolontez? Evel Santez Thérèse ar Mabig Jesus hag evel ar Verc'hez Vari, ha klasket on deuz-ni atao lakad hor bolontez da veza a-uñan gant karantez Doue?

O Mari, deskit d'eomp distaga hor c'halon a nebeudou deuz traon ar bed-man, evit ma kousto nebeutoc'h d'eomp en em zistaga pa deuio ar maro. — E leac'h m'e man ho tenzor e man ho kalon. Tenzor Thérèse a oa Jesus ha dezhan oa ive he c'halon. O Mamm deuz an env, grit d'eomp karet ar madou guirion evit ma vezo leun hon daouarn a veritou o vont deuz ar bed-man.

★ ★ ★

EUR ZOUDARD TENNET DEUZ AN DOUAR GANT
SŒUR THÉRÈSE.

*An eiz a viz du 1918, e departamant l'Aisne
(cote 118) ar c'hrogat a oa spountuz. Ar zoudard*

Pierre Albert deuz Campeau (Calvados) a oa chouchet en eur gaonien vian gant he vitraillouse; Sonjal a rea e Santez vian he vro hag he fedi a rea a greiz kalon.

Kerkent eun obus a gouez en he gichen, he vitraillouse a zo diskaret hag hen a zo beziet koulz lavaret dindan eur bern douar. Mouget eo, ne c'hell mui tenna he alan, e man o vont da vervel, den na c'helle he glevet. Enkrez ar maro a ra d'he beden beza birvidikoc'h. « Sœur Thérèse, deuit d'am zikour ».

He beden a zo klevet, ar zantez a deu d'he gaout. Ne c'hell ket he guelet, he c'hlevet a ra koulskoude; gant he mouez leun a druez e lavar d'ezhan kaout pasianted, feiz krenv ha nerzkalon ha gant he dorn e krogaz en he himi evit tenna anezhan er meaz. He guelet a ra breman etal an toul doun a zo en he gichen hag hi, a ro d'ezhan he hano : « Me eo sœur vian Thérèse ». Kerkent ez a kuit, hag e lez he zervicher da lavaret an anaoudegez vad a oa en he galou.

Santez Mari,
pedit evidomp,
Santez Thérèse ar Mabig Jésus,
pedit evidomp.

Eil devez var-n-urgent

Eul leor braz a ve red kaout evit skriva an oll sakrifisou ha kement tra a rea Thérèse evit beza trec'h d'ezhi he-unan, hag unan all evit merka kement e derz great dre garantez. Dre forz renonz d'ezhi he-unan e deuz desket e teu ar garantez da ober d'an oll boaniou beza leun a zouster.

He c'hoar Céline a oa chommet er gear gant he zad, hag al leanez iaouank a skrive d'ezhi evelhen an eil a viz maê 1888 : « Guir a leverez, ar vuez a zo aliez pounner ha c'huero, poaniuz eo staga gant eun devez labour pa deu Jesus da gusat deuz hor c'harantez, Petra ra eta, ar mignon-ze ken karet? daoust ha ne velfe ket hon anken hag ar bouez a zo varnomp? E peleac'h e man? Perak ne deu ket d'hor frealzi? Ah! Céline, na pez aoun ebet, aze e man en hor c'hichen, o sellet ouzimp. Hen eo a c'houlenn en aluzen hor poan hag hon daélou, ezom en euz outho evit an eneo, evit hon ene, ken kaër eo

ar rekompanz a fell d'ezhan rei d'eomp! Poan a ra ganthan rei d'eomp traou ken c'huero, mes gouzout a ra ez eo evelse e teuimp d'he anaout ha da veza henvel outhan. Savomp hueloc'h eget an traou a dremen, pell deuz an douar; en eac'h an ear a zo puroc'h; Jesus a c'hell kuzat, gouzout a reomp e man aze ».

Heb dale, an oll a oueze er C'harmel ez oa Thérèze eun eal a furnez hag a vertuz. He ene ken pur ha ken kaër a c'hounenze an oll.

Ar retred evit kemeret an habit a zigouezaz.

« Nag Hen a zo mad evidon, eme Thérèze, an Hini a vezo va fried heb dale; eüruz oun da gaout poan ». Setu petra glevet aliez ganthi.

« Ne fell ket d'in o deffe an traou krouet an distera tam deuz va c'harantez; oll da Jesus pa ra d'in kompren ez eo Hen hebken an eürusted parfet; tout evithan ha pa n'am bezo netra da rei d'ezhan, me a roio d'ezhan an netraik-se ».

Deut eo devez braz ar viskamant. Thérèze a zo ganthi eur vantel voulouz guen gant dantelez Alençon. He bleo melen-ken kaër a nij var he diouskoaz, mesket gant ar bleun lili a verk gened ar guerc'hez. Etal dor ar gouent e man an Aotrou Martin o c'hortoz he

rouanez vian. Pa vel anezhi ez a d'he c'haout en eur ouela, hag e start anezhi, pell anzer, var he galon, ha rei a ra d'ezhi he vreac'h evit mont d'ar chapel.

Goude an ofiz, ar Superiorez hag an oll leanezed a deuaz da zorargouent da gerc'hat Thérèze, p'e doa bet bennoz diveza he zad, evit he c'hass d'ar c'hœur e procession. — Nebeut amzer goudeze ar re a ioa er chapel, an dour en ho daoulagad, a velaz Thérèze ker koant bremaik ha guisket ken kaër, ken dishenvel breman. He bleo melen a zo troc'het, breman e toug eur zae mezer gröz ha var he fenn eur « voile » lien guen, he hano breman : Sœur Thérèze ar Mabig Jesus.

Meur a hini n'o doa ket a fizianz araok abalamour ma kavent ez oa re iaouank ar « bostulantez ». Breman ez int dizoursi, Thérèze e deuz gounezet an oll galonou en dro d'ezhi.

Selaouit petra lavar Sant Francès a Sales divar benn ar Vere'hez Vari ha lakeomp ar c'homzou-ze var gount ar Garmeliteziaouank: « Diouz ar beure, pa vez brao an amzer, e velomp an deiz o c'houlaoui, ar sklerijen o kreski, n'eo ket a lammou, mes a nebeudou hag heb ehana, a veac'h ma veler e kresk ar sklerijen hag an domder ». Evelse e save

Thérèse deuz an eil vertuz d'eben evel eur fleuren gaër gant ar c'houez a ro d'anaout e man Jesus ganthi.

Ober atao bolontez Doue eo ar pezh a glask heb troidellat. Ma roet d'ezhi meuleudi ne glask ket her mouga, he gass a rea raktal varzu Doue en eur lavaret d'ezhan : « D'eoc'h an enor hag ar gloar hag ar vez d'in me ». — Eun elfen dan kouezet deuz kalon Jesus e kalon ar bugel-ze a oa deut da veza eur forniet tan hag a domme pep tra en dro d'ezhi.

O Mari, pa ieaz Thérèse ar Mabig Jesus e kœur chapell ar C'harmel, harpet var breac'h ho Mab deut da veza he fried, braz oa bet joa kement hini a oa test eno; peger braz ez oa bet ho levenez-c'houi, Mam Jesus, devez an Assomption, pa gane an Elez evelhen : « Piou eo hounnez a deu deuz an désert, ken kaër gant gened an Env, hag harpet var breac'h he muia karet? ».

Ma kavit ac'hanomp din da vont eun devez d'ar baradoz, O Mamm Zantel, astennit d'eomp ho torn madelezuz evit ma c'hellimp ive kaout digor e palez an Drinded e leac'h ma pado an eurusted da viken.

★ ★ ★

SŒUR THÉRÈZE A ZIOUAL
EUR ZOUDARD EPAD AR VREZEL.

Auguste Cousinard a oa eat d'ar vrezel heb ober he zeveriou a gristen, kaër e doa bet he bried alia ha pedi anezhan; doujanz ar bed, arvez ha netra ken avire outhan da ziskuez ez oa kristen. Kass a reaz ganthan, kouls goude, imaj sœur Thérèse ha bet oa e Lisieux da viz mae diveza. sonjal a rea enni ha goulenn sikour diganthe pa vije eur goal stourmad benag.

Da hanter miz guengolo, emezhan, ez oamp kuzet en tranchées étal Reims. Deuz an daou du ar c'hanoliou a re trouz ar gurun, ha me, trist va c'halon, a lavare da sœur Thérèse : « Va c'hoarig Thérèse, diouallit ac'hanon evit va greg ha va bugale, ha prometi a ran d'eoc'h mont da zaoulina var ho pezh kerkent a ma vezin distro d'am bro ».

A veac'h em boa great va feden, ma veliz ar c'hounnoul o tigeri dirazon, hag e kreiz, ar Santez vian. Kredi a rean ez oan badaouet hag e kassen va bizied var va daoulagad. Kaër am boa e velen atao he zremm ken kaër guelet a rean, dreist pep tra, he daoulagad burzuduz troet varzu an env, evit pedi, marvad. Adalek ar

mare-ze ez oun bet leun a nerz-kalon hag a fizianz.

Nebeut amzer goudeze em euz ranket mont d'an hospital, ha pa oue goulennet piou en doa c'hoant da gommunia, me a oa deuz ar re genta o lavaret : « Me », ha neuze em euz prometet e rajen atao va fask.

Goude beza great he zever penn-da-benn, kennerzet gant ar zonz deuz Thérèse ar Mabig Jesus, ar zoudard Cousinard a oue lazet ar bevarzeg a viz gouere 1915. He letanant a brize kalz anezhan hag a lakeaz he enteri e gwered Berthonval. Thérèse e doa saveteet he ene hag he familh gristen a gavaz e kementse kalz a gonsolasion.

Santez Mari,
pedit evidomp.
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Trede devez var-n-ugent

An Aotrou Martin n'en doa ket kalz a iec'hed hag ar re a veve ganthan ne oaint ket dizoursi. Goasad a reaz, eur miz benag goude m'e doa he rouanez vian kemeret an habit er gouent.

Doue en doa goulennet digant ar familh-ze ar brasa sakrifisou. An Aotrou Martin, evel ar patriarch Abraham en doa atao sentet ouz Doue. — Skuizet gant ar c'hlenved, he spered a deuz da denvalad hag ez oa bet red lakad anezhan e ti re glanv choazet gant he familh. Eno e chommaz tri bloaz.

Thérèse a skrive d'he c'hoar Céline : « E leac'h klemm, abalamour d'ar groaz-se, ne c'hellan ket kompren ar garantez en euz Doue evidomp. Red eo e ve hon tad ker mad, karet ive gant Doue pa ra d'ezhan kaout kement a boan ».

Eur groaz all a deuz c'hoaz da bounnerad hou-man. Thérèse e devoa great he bloavez noviciat hag a dlle ober he veuiou. Ar cha-

loni Superior, rust atao, ne falvezaz ket d'ezhan.

Ar sœurez santel ne glemmaz ket; lavaret a rea ne oa ket din na santel auallac'h. En he « cellulen » o pedi, e lavare d'he muia karet : « Ne c'houlennan mui ober profesion, gortoz a rin ma plijo ganeoc'h, mes ne fell ket d'in e ve apellet dre va faot, ar mare d'en em rei d'eoc'h ha breman e lakin va oll zoursi da gaërad va ene; pa gavo d'eoc'h e vezo pinvidig auallac'h, netra na viro ouzoc'h d'am c'hemeret da bried ».

Derc'hel a reaz d'he ger ha bemdez e kreske da boania evit beza eul leanez parfet. Goulen a rea atao al labourou starta. — Sœur Saint Pierre deut da veza hegas gant an oad ha poaniou ar gosni a gave e Thérèse kement a garantez hag a boan evit soursial outhi ma teuaz da veza eaz a garakter ha leun a basianted.

Thérèse a stage bemdez deuz sae he ene, mein prisiuz nevez dre ar basianted, ar garantez evit an nesa, ar zentidigez hag an humilite.

Lakeat e doa eiz miz da ober al labour-ze ha ne doa ken aoun nemed ne vije ket kavet kaër auallac'h c'hoaz gant he muia karet.

Ar retred araok ar brofesion a oa bet

poaniuz evithi; evel eun noz tenval, anavezet mad gant ar re a zo galvet gant Doue da zevel var menez ar garantez; kementse ne viraz ket outhi d'en em rei muioc'h mui da Zoue. Chomm heb konsolasion en eur mare evelse, e leac'h mouga he c'harantez ne reaz nemed he c'hreski.

Eun heol laouen a zavaz en oabl glaz ha pur evit sklerijenna eured Thérèse gant Oan Doue.

Pa vez al leanez, astennet var an douar da vare he profesion e man ar c'hiz ganthi da c'houlen eur c'hras benag digant Doue. Iéc'hed he zad a deuje marvâd en he spered. Pedi a reaz evit se, mes he c'halon a zigoraz frankoc'h, evel kalon Doue. — Goulen a reaz ma vije konvertiset an oll bec'herien en devez-se ha ma vije golonteret ar purgator.

Evithi he-unan e c'houlenne : « O Jesus, guir bried, grit ma ne vezo morse sklabezet sae venn va badiziant. Kemerit va buez kentoc'h eget va lezel da ober, a volontez vad, an distera pec'hed veniel; Grit ma ne glaskin morse nemethoc'h, ma ne vezo an oll grouadurien netra evidon, na me netra evitho. Grit ma varvin merzerez evidoc'h; roit d'in ar verzerenti a galon pe a gorf

pe guelloc'h an diou verzerenti; grit ma ne daolo den evez ouzin; me n'em ro deoc'h evit ma c'hellot atao ober ganen ho polontez santel ».

A veac'h ma teuaz eun tentasion da glask tenvalad ene pur Thérèse. Mère Marie des Anges pa glevaz ganthi petra oa, a stagas da c'hoarzin ha Thérèse a gomprenaz dioc'htu ne z'oa nemed eun tentation hag ar peoc'h a renaz en he c'halon.

He veuiou braz a oue great an eiz a viz guengolo, gouel Ginivelez ar Verc'hez Vari.

Guelet on deuz e deuz bet Thérèse kroaziou en he buez. Ar Groaz, emezhi, e deuz heuillet ac'hanon adalek va c'havel ha Jesus en euz great d'in kaout kalz a garantez evithi. Evelse eo e deuz lakeat he ene da veza ken kaër evit plijout d'he fried : Netra n'eo re gaër evit Doue.

O Mari, Mamm leun a drugarez, daoulinet dirag hoc'h aoter hag evel Santez Thérèse pa oa o vont da ober he veuiou, ni a c'houlenn diganeoc'h benniga hor c'herent ha kement hini on deuz karantez evitho; ni ho ped da asten ho trugarez var an oll bec'herien evit m'o devezo keuz d'ho fec'hejou ha ma tis-

troint varzu Jesus evel ma c'houlenne *he bried* ker pur, fleuren vian Lisieux.

★ ★ ★

EUN AUTOMOBILE A JOMM EVEL
A ZISTRIBILL AZIOC'H EUN TOUL DOUN.

N'eo ket hebken pa reont ho labour evel beleyen eo e teu Santez Thérèse ar Mabig Jesus da gemeret soursi deuz ar re a zo karget da zavetei an eneou, a hent all ive e tioual anezho evel he breudeur.

An tad Revenant, chaloni deuz Urz ar Verc'hez dinam ha karget deuz an dispignou en eur skolaj paotred iaouank var ar studi evit beza beleyen e Gallese (Itali), a zigouezaz d'ezhan, er bloaz 1913, beza en eun danjer braz epad eur veach en automobile. Ar voetur a ie buan var eun hent hag a oa toullou doun a bep tu d'ezhan.

En eur c'horn pleg, an hini a oa gant ar voetur ne c'helle ken rén anezhi. Lammet a reaz var eur c'hleuz izel; ez oamp o vont a ruill en eun toul lonk doun, pa jommaz a za anezhi heunan, an diou rod arak n'o doa harp ebet. — Me a oa o paouez ober eur beden a galon hag o lakad va fizianz e Santez Thérèse ar Mabig

*Jesus. — Dezhi, a dra zur, e tleomp hor buez
ha me a fell d'in hen diskleria ».*

Santez Mari,
Pedit evidomp.
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
Pedit evidomp.

Pevare devez var-n-ugent

Ar bevar var-n-ugent a viz guengolo ez oa eur gouel all : Thérèse a gemere ar voile. Esperanz e doa bet e vije deut he zad ive. Allas, ne deuaz ket ha Thérèse a skrive d'he c'hoar Céline, gant tristidigez : « Doue a fell d'ezhan e venn emzivadez ».

Epad an examin a rankaz tremen araok ar brofesion ez oa goulennet outhi : « Petra en euz chachet ac'hanoc'h da zont d'ar gouent? »

« Deut oun d'ar C'harmel, emezhi, evit savetei an eneou ha pedi evit ar veleyen ». Abaoue he beach en Itali e kompene guelloc'h pegen huel eo savet ar veleyen hag e pede muioc'h evitho.

Pa zave he c'halon varzu Doue, var diouaskel ar garantez, e teue en he spered ar c'hoant da vont da gass ar c'helou mad, an Aviel d'ar broiou ne anavezont ket c'hoaz Doue. Mervel merzerez evit Jesus! pebeuz joa ha pebeuz enor.

Epad ar retreat great er bloaz 1891, al

leanez iaouank a zigoraz he c'halon d'an Tad Alexis, a urz Sant Francès. Heman a gomprenaz Thérèse. « An Tad, emezhi, a lavaraz d'in mont araok var mor ar fizianz hag ar garantez; araok ne greden ket. Lavaret a reaz d'in ne rea ket va fec'hejou poan d'an Aotrou Doue. « Aman e maoun, emezhan, o terc'hel plas an Aotrou Doue, mad, me hen assur d'eoc'h, Doue a zo kontant deuz hoc'h ene ».

« Ar c'homzou-ze, ker mad, a roaz nerz d'in da zougen kroaziou nevez. Ar Superiorez a oa atao rust em c'henver, ne c'hellen mui kaozeal d'am c'hoarezed ». Epad ar goanv : goalc'hi, kanna en dour ien, epad an anv chomm en eul leac'h tomm da ober ar c'houez; boued treut ha ne oa ket aliez diouthi, labourou poaniuz ha skuizuz, setu petra e doa da ober. Lod deuz an traou-ze a rea poan d'he c'halon, lod all a oa noazuz d'he iec'hed.

E kreiz ar spern-ze, Jesus a lakea ive ar fleur da zevel avechou, evit miret outhi da falgaloni.

Thérèse a garie ar pezh a zo kaër : ar « peinture » hag al leoriou da lenn. Epad ar zizun ne c'helle ket kemeret var amzer ar beden hag al labour; d'ar zul avad e doa amzer evel an oll leanezed evit ober imachou ha skriva gant

rimou ar zonzou kaër a deue en he spered.

An Aotrou Martin a varvaz an nao var-n-ugent a viz gouere er bloaz 1894, e maner ar famill Guérin. Bet en doa eur vech c'hoaz ar gonsolasion da velet he (rouanez vian); ne c'hellaz lavaret nemed daou c'her en eur zevel he viz. « An Env ».

Céline breman a c'hell heulia he vocation pa e deuz great he dever e kenver he zad. D'ar C'harmel ez ai ive.

Mes ar Superiorez e doa aoun e vije bet a eneb ar reolen hag a eneb kustumou ar gouent, kaout peder c'hoar assamblez.

Heb dale e lavaraz (ia) ha Thérèse a skrive d'he c'hoar Céline : « Marvad an dro-man eo ar vech diveza d'in da skriva did. Doue en euz selaouet va fedennou guella; deuz eta, ar soufransou a vezo etrezomp; Doue ne zispartio ac'hanomp biken mui. Ma varvan da genta, ne vezin ket pell deuz da ene, ne vezimp bet morse ken unanet ha ma vezimp neuze ».

Eur miz goude, Céline a oa er gouent, kemeret a rai an hano : (sœur Geneviève de la Sainte Face).

Thérèse a lavare ez oa eat d'ar gouent evit savetei eneou ha pedi evit ar veleyen. — Evit petra e teuit-hu d'an iliz, ti an Aotrou Doue?

Evit mad hoc'h ene, a dra zur; ouspenn ennomp hon-unan e tleomp sonjal. Ha pedi a reomp-ni ive evit ar bec'herien, evit ar re deuz hor famill hag a veffe er stad a bec'hed marvel, a zo klanv ho ene ha ne c'hortozont nemed ho peden evit beza pareet. Pedomp ive, hag aliez evit eneou ar purgator.

Tud ar bed, o redet varlerc'h an eurusted ne gavint morse, n'o deuz ket a amzer da zevel ho spered varzu ho zad a zo en Env. Ar pezh a ra d'ar bed-man chomm en he za eo ar pedennou c'houeg a ra bemdez an eneou zantel dreist oll er c'houdenhou sioul. Malloz d'ar bed ma ne ve den da bedi evithan!

Neuz forz e peleac'h nag e peseurt stad a fortun ez oc'h ganet bezit kontant deuz ar pezh en euz great Doue evidoc'h. Eleac'h klemm, klaskit ober atao he volonte, aze eo e kaver an eurusted. Jesus a ro he c'hrasou deuz ma veritomp ha ne laka morse an drez hag ar spern var hon hent heb lakad eur rozen benag da vleunia en ho zouez.

O Mari, rouanez an Ebestel, unan deuz ar grasou kaëra evit eur famill, eo rei eur beleg da Jesus-Christ. Famill Santez Thérèze ar Mabig Jesus e deuz bet ar c'hras dispar da rei peder bried da Jesus-Christ; lakit eta da

greski, O Guerc'hez Santel, an niver deuz ar veleyen a labour evit an Env. Hi eo a vezo silvidigez ar bed, o rei d'ezhan ar bara zantel a c'hell santelad an eneou.

★ ★ ★

EUR ZOULDARD DEUZ BREIZ IZEL TENNET
DEUZ EUR STER DOUN

En deveziou kenta a viz meurs, er bloaz 1915, var dro deg heur noz, ar zouldard Joseph Derrien, deuz hor bro, a ioa var ar meaz gant he gamaraded soudarded, er Pas-de-Calais; eur pennad mad oa dioutho.

Setu aman petra en euz lavaret divezatoc'h : « Ken tenval oa an noz ma ne velen hent ebet. Dirazon, kouls goude, ez oa eul leac'h skleroc'h, ha me var eün d'ezhan; siouaz, eur ster a oa, ha raktal ez oun kouezet ennhi, doun oa ha kass a oa gant an dour; ha dioc'htu em euz lavaret ennhon va-unan : « Me a zo eun den kollet pa n'ouzoun ket neün. Dont a ra da zonz d'in deuz Sœur Thérèze : « Va c'hoar Thérèze, deuit d'am zikour ». — Kerkent em euz santet ez oan douget var ribl ar ster. Mont a ran d'ar red da gaout va c'hamaraded a oa o furchal ar ster gant ho letern. « Oh, emezho, n'eo ket possubl, ne c'heuz

ket gallet en em denna alesse da unan ».
Joseph ne lavaraz netra, en he galon avad e
lavare : Eur mirake eo, va C'hoar Thérèse e
deuz saveteet va buez d'in ».

Santez Mari,
 pedid evidomp.
 Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
 pedid evidomp.

Pemped devez var-n-ugent

Histor buez Thérèse ar Mabig Jesus, evit tud ar bed, a zo klozet, koulz lavaret, en devez ma 'z eo eat he c'hoar Céline e kouent ar C'harmel. He bugaleach hag ar penn kenta deuz he iaouankiz ne 'z int bet, e guirionez, nemed eun huanaden a garantez o klask beza unanet gant Jesus. Breman e velimp petra eo bet an union ze etre ar Zantez hag he fried ha peseurt frouez e deuz douget.

Eun devez, eul leanez benag a lavare da Sant Francès a Sales : « Me a fell d'in gounit ar garantez dre an humilite ». « Ha me, eme ar zant a fell d'in gounit an humilite dre ar garantez ». Ar garantez eta da genta. — Pa 'z eo guir ne 'z euz ket a garantez heb poan, Thérèse e devezo poan, hag atao e klasko ar boan. Peur ober a rai, dre ar boan, ar pezh en euz great Jesus var ar C'halvar.

O staga skapular Thérèse, unan deuz he c'hoarezed leanezed a zankaz doun eur spillen hirr en he skoaz. Goall c'hlozet oa

bet, a dra zur, ne lavaraz netra koulskoude epad eur pennad mad deuz an deiz; sonjal a rea e tachou Pasion hor Zalver.

Eur vech all e lakeaz var he feultrin eur groaz gant begou houarn lemm ennhi, ha ne falvezaz ket d'ezhi lemmel kuit ar braoik diez-se nemed pa zavaz eur gouli hag a venne beza noazuz. — « Va Jesus, a lavare Thérèze, poaniet auallac'h oc'h euz epad an tri bloaz ha tregont oc'h euz tremenet var an douarman, hirio diskuizit, d'am zro eo enebi ha kaout poan ».

Ar re a zonz hag a lavar ne 'z oa Thérèze ar Mabig Jesus, nemed eul leanezik dous ha koant hag a dremene he amzer o fuilla delliou roz, a fazi. N'o deuz nemed gullet peger krenv oa he bolontez ha pegement a nerz kalon a roe Doue d'ezhi.

Thérèze a lavare da Zoue « papa » ha d'ar Verc'hez Vari « maman » abalamour ma karie Doue hag ar Verc'hez evel ma kar ar vugale vian ho zad hag ho mamm pa en em roont d'ezho gant ho oll deneredigez. Lavaret a rea : « Me a guz va foaniou deuz an Aotrou Doue, d'ar Verc'hez Santel avad ne guzan netra, d'ezhi e lavaran tout.

Ne devoa douetanz ebet e vije atao selaouet gant Doue hag e lavare : « Pa beder ar

zent e ranker peurvuia gortoz eur pennad gantho, e leac'h pa c'houlenner eur c'hras digant ar Verc'hez e vezer selaouet raktal. N'oc'h euz ket marteze taolet evez a gementse, grit hag e velot ez eo guir ».

Pa oa dija goal glanv, Thérèze a lavaraz d'he c'hoar Céline : « Eun dra am euz c'hoaz da ober araok mervel; atao em euz bet c'hoant da lavaret d'ar Verc'hez Santel ar pezh a zo em c'halon. Neuze eo e reaz ar c'hantigman : « *Perak e karan ac'hanoc'h, O Mari* ».

Setu aman ar c'houplad diveza :

Heb dale e klevin ar c'han-zê ken dudiuz,
Heb dale e velin an envou ker skeduz.
C'houi o'h euz c'hoarzet d'in, e mintin va buez
Deuit adare, va Mamm, setu ar pardaêz.

Aman e veler he c'harantez. — Ar galon, setu al loden gaëra a zo ennomp hag ive ar muia riskluz. Dre hor c'halon e c'hellomp, siouaz, disken izel hag ive sevel beteg an huella pazen deuz ar zantelez, beteg ar garantez parfet, ken huel hag an Elez hag ar Seraphined. Abalamour da ze, ken aliez lamm a rea kalon Thérèze a oa ken aliez a akt a garantez.

« Allas! a lavar Sant Francès a Sales, o komz deuz ar garantez, n'or beuz ket

ouallac'h evit hon ezommou, evit karet Doue, ha koulsgoude, tud paour ma 'zomp, e foranomp hor c'harantez o rei anezhi da draou vean evel pa on divije re ».

Gouzout peger gallouduz eo ar Verç'hez Vari var galon Jesus, daoust a rei a ra d'eomp eur fizianz heb muzul ennhi? Penaoz e tiskuezomp-ni d'ezhi hor fizianz? ha karet a reomp-ni sonjal ennhi aliez? mont en he breuriezou, ha karet a reomp-ni he goueliou?

O Mari, ken aliez lamm a rea ho kalon a oa eun akt a garantez evit Doue ha kementse a zo guir ive evit Thérèze ar Mabig Jesus beteg he heur diveza. Ma fell da Zoue e vefemp er boan e tleomp ive, evel Santez Thérèze, kaout levenez en hor c'halon. — An Ebestel hag ar Verzerien a dride ho c'halon pa oaint kavet din da c'houzanv an oll dismeganz hag an oll boaniou evit Doue. Goulennomp ive ar c'hras da ober atao bolontez Doue ha pa ve diez. Gouzanv evit Jesus ha Mari a dremen, beza gouzanvet avad a jomm atao gant ar meritou on deuz gounezet.

★ ★ ★

EUR ZOUDARD, PRISONIER EN ALLEMAGNE
A ZO PAREET.

Er penn kenta deuz ar bloaz 1918, Octave Dumetz, prisonier e Munster (Allemagne) a deuaz d'ezhan eur (c'hancer) en he vuzel d'an traon; goude meur a viz, daoust ma kemere ar vedisined soursi outhan, ar gouli a wasee atao, hag ar paour keaz a glemme hag a hirvoude.

Unan deuz ar re a oa ganthan, Myrtil Duée, dre druetz outhan, a ginnigaz d'ezhan ober eun naved da zantez Lisieux, a rea kement a viraklou. Displega reaz d'ezhan pegen braz eo he galloud ha var he vuzel e lakeaz, eur pennadig, gant feiz ha fizianz, eun tam relegou benag deuz Sœur Thérèze ar Mabig Jesus.— Adalek neuze a lavar Myrtil Duée, an tammou kig a oa a zistribill deuz he vuzel, a goueze a nebeudou hag heb dale e oue guelet ar c'hig iac'h.

Nebeut amzer goudeze, va c'hamarad a c'hellaz kregi adare en he labour hag hon daou e lavaremp bennoz da Zoue ha d'ar Zantez vian e doa pareet anezhan.

Evit diskuez he anaoudegez vad da Zantez Thérèze, ar zoudard Duée a deuaz e pelerinaj da Lisieux. Hen ive a oa dleour d'ar Zantez deuz meur a c'hras bet dreizhi. « Ia, emezhan, ha skrivet am euz d'ar Pap Beneat XV evit lavaret

*d'ezhan e koueze ive ar glao roz var ar brizonie-
rien baour en Allemagne. Kementse a gavo
hent hegalon hag a rai d'ezhan klask, buana
ma c'hello, glorifia an hini a dremen he baradoz
var an douar evit konvertisa an enea ha parea
ar c'horjou.*

Santez Mari,
pedit evidomp,
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

C'huec'hved devez var-n-ugent

Pa oa o peurskriva « Histor eun ene », he
buez he-unan, al leor-ze ken kaër, e devoa ar
Superiorez lavaret d'ezhi skriva, Thérèse a oa
dija krog ennhi ar c'hlenved a dlle lakad fin
d'he buez an 30 a viz guengolo 1897. — Epad
an amzer-ze, pa deue d'he c'haout an (novi-
sed) hag ar seurezed a zoursie deuz ar jardin,
e vijent atao digemeret gant kement a zousder
hag a vadelez, ma oa souezet he c'hoar Agnès
de Jesus. Thérèse a lavare d'ezhi : « Skriva a
ran var ar garantez evit an nesa hag e tlean
ober ar pezh a skrivan. Oh! emezhi, ar garantez
evit an nesa eo kaëra tra a zo var an douar,
rak karet a rer Doue deuz ma c'heulier ar
vertuz-se ».

Prometet e doa lavaret bemdez c'huec'h
Pater ha c'huec'h Ave Maria evit anaon ar
purkator ha netra morse n'en deuz gallet
miret outhi da zerc'hel d'he ger.

Gouzout a rea lakad da rén en dro d'ezhi
kement a garantez ma ranke, ar re zoken ne

oaint ket direbech en he c'henver, dont beteg ennhi, chachet koulz lavaret gant kement a vadelez hag a zoussér.

Pa oue hanvet da veza mestrez an novised, kement tra a rea en he c'harg nevez a ziskoueze he humilite hag he c'harantez. Morse n'e deuz bet, evit ar re a oa dindannhi, eur ger eun tamik rust, nemed pa vije hano deuz mad ho ene evit ho zikour da zevel er perfection. — Skrivet e deuz evelhen : « Kerkent ha m'a em euz gallet disken e gweled an eneo, em euz komprenet ez oa va labour en tu all d'am nerz. Neuze ez oun en em lakeat etre divreac'h an Aotrou Doue evel ma ra ar bugel bian pa en euz aoun rak eun dra benag, choucha ra he benn bleo melen var skoaz he dad, ha neuze em euz lavaret : Va Doue, gulet a rit, me a zo re vian, re zister evit maga ene ho pugale; m'oc'h euz c'hoant da rei da bep-hini ar pezh e deuz ezom, kargit va dorn bian, ha neuze, heb diskregi deuz ho preac'h, me a ranno ho tenzoriou etre an eneo a deuo da c'houlou diganen beza maget. Ma plij ar vagadurez d'ezho, e ouezin mad eo diganeoc'h o deuz bet ».

Thérèse e doa nebeut a fizianz ennhi heunan, mes o c'houzout ne c'helle netra heb sikour Doue, e tigemeraz mad ar garg fiziet

ennhi, ha great e deuz he dever beteg he maro guella ma c'helle beza great.

Ar brud deuz he zantelez a ie pelloc'h eget ar gouent. Eur beleg iaouank, araok mont da brezeg an aviel d'ar Chine, a c'houlennaz digant kouent Lisieux, karga unan deuz al leanezed da bedi evithan hag evit he vission. Thérèse a oue karget gant ar Superiorez hag an Aotrou Roulland, ar beleg iaouank a deuz da lavaret an oferen d'ar C'harmel. — Goude he oferen e c'hellaz kaozeal gant ar seurez. « Me a grede, eme Thérèse n'am bije anavezet va missioner nemed er baradoz ha Doue en euz roet ar c'hras d'in da gaozeal ganthan var an douar. Me na c'hellan ket beza missioner, emezhi, mes hon daou ne glaskimp nemed eun dra : karet Doue ha gounid eneo d'ezhan. Me a fell d'in beza ive missioner dre ar garantez hag ar binijen, ha pa vezin eat da gaout Doue, me a rai muioc'h evidoc'h eget na c'hellan ober var an douar ».

Eur missioner all a oue roet da Thérèse evit breur spirituel : an Aotrou Bellières. Heman a die mont d'an Afrique da gonvertisa ar vorianed payen. Poaniuz e kave dilezel he gerent evit atao, marvad, ha Thérèse a roe nerz-kalon d'ezhan : « Ho loden a zo kaër, emezhi, dre ar boan eo e vez saveteet an

eneou, evel m'en deuz Jesus saveteed ar bed. Prometet oc'h euz d'in pedi evidon epad ho puez (hiroc'h e vezo, marvad, eget va hini-me) mes, n'ankounac'hait ket ar beden a c'houlennan diganeoc'h ». Setu aman ar beden-ze ; « Tad leun a drugarez, en hano ho Mab karet hag ar Verc'hez Vari, goulenn a ran diganeoc'h entani kalon va c'hoar spirituel gant ho Spered a garantez, ha rei d'ezhi ar c'hras da lakad an eneou d'ho karet dreist pep tra ».

Al lizerou-ze ken kaër, skrivet gant eul leanez var dreujou ar maro a rea da ene he breudeur spirituel sevel varzu Doue, hag an Aotrou Bellières a c'houlenne digant arzantez kaout evithan ar c'hras da veza merzer.

Thérèse e deuz eta diskouezet he c'harantez evit ar vissionerien, abalamour ma 'z int galvet da c'hounit kement a eneou da Zoue, ha kementse ive en euz lakeat ar Pap Pi XI da ziskleria ez eo Santez Thérèse ar Mabig Jesus patronez ar missionou.

Hirio eta e velomp pegen birvidig oa karantez Thérèse evit Doue hag evit an eneou. — Ha c'houi, Guerc'hez Vari, mamm ar garantez, roit d'eomp ive an diou garantez

ne reont nemed unan : karantez Doue ha karantez evit an nesa, ha ni a fell d'eomp ober bemdez eun akt benag a garantez evit hon nesa ha lavaret aliez : Va Doue, me ho kar a greiz va c'halon.

★ ★ ★

EUN DEN IAOUANK PROTESTANT DISTROET
DA ZOUÉ.

Eur beleg a zo deut da Lisieux hag en euz diskleriet kement-man er C'harmel.

Eun den iaouank savet e religion ar brotestanted, en devoa dilezet he gerent evit mont da redeg bro da heul an oll dizurchou.

Eun devez, en eun (hotel) e velaz lakad paperou a bep seurt en oaled, evit ober d'an tan kregi. Etouez ar paperou-ze ez oa eun nebeut delliennou ha ne zevent ket, e kreizantan. Tenna ra al leor bian ez meaz, ha varnezhan e man, e berr gomzou : buez Santez Thérèse ar Mabig Jesus. Lenn a ra penn-da-benn ha gras Doue a zisken en he ene. Adalek neuze e klaskaz anaout ar Religion Katholik, hag ar beleg en euz diskleriet kement-man eo a gemeraz soursi outhan epad meur a viz.

An den iaouank distro da vad da Zoue a zo

breman eur relijiuz devot e Chartreuse Val-sainte, er Suisse.

Santez Mari,
pedit evidomp,
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Seizved devez var-n-ugent

Doue n'euz ket great ar boan, ar boan a zo merc'h d'ar pec'hed; ha Doue gant he drugarez heb muzul en euz lakeat ar boan da veza eur remed.

Ar boan a zo mad evit paea. Thérèse her goueze mad ha lavaret e deuz ez ea d'ar C'harmel evit paea e plas ar bec'herien.

Eur boan benag a rank atao beza e buez an den, rak anez ar boan, den n'en em anavez mad. Thérèse e doa entetet mad ar virionezse pa skrive d'he fevarzek vloaz : « Eur berad c'huerdo benag a rank atao beza er veren da eva; me gav d'in e c'hell an dreñ hag ar spern hor sikour da zistaga deuz ar bed-man, ober a reont d'hon daoulagad sevel hueloc'h eget an douar ».

Sœur Thérèse e deuz bet eta kalz da c'houzanv daoust ma n'eo ket bet he buez eur vuez a binijennou braz da veza anavezet gant an oll, evel kalz deuz ar zent. Bet e deuz

koulsgoude kalz da c'houzanv en he ene koulz hag en he c'horf.

Ar vuez a zo striz e kouenchou ar C'harmel, ha Thérèse, daoust ma oa c'hoaz ker iaouank, e deuz atao heuillet ar reolen penn-da-benn, ar iunion ker stank, ar baourentez e pep tra heb klemm morse, hag aliez e rea dreist ar pezh a vije gourc'hemennet.

Setu aman hag a ro d'anaout pegen braz oa he zentidigez : « Epad va noviciat, emezhi, hor mestrez e doa lavaret d'indiskleria d'ezhi beveh m'am bije poan estomac. Kementse a errue bemdez, hag an urz-se a oa eur verzerenti evidon; senti a rean koulsgoude ha sœur Marie des Anges a lavare d'in : « Va c'hoar baour, ne c'hellot morse heulia ar reolen, re galet eo evidoc'h »; ha neuze ez ea da c'houlou louzou digant ar Vamm, hag houman, drouk enni, a lavaraz : « Ar seurez-se a glemm atao, ma ne c'hell ket trec'hi var he foan, he flas n'e man ket aman ». Kendalc'het em euz koulsgoude da anzañ va foan, evit senti deuz an urz roet d'in ».

Fall oa deuz ar ienien hag epad ar goanv e devoa kalz da c'houzanv : hanter vaget hag eur c'hos chausonnou great gant kerden, en he zreid, ne vije morse tomm d'ezhi ha pa deue an noz, astennet var eur gos kalc'ket plouz,

kaër e doa en em zastum en he goloen uzet, e tremene aliez an noz heb kousket, o krena gant ar riou. Ma karje e vije bet guelloc'h guisket, mes klask a rea ar binijen hag an dra-man n'eo bet roet ganthi d'anaout nemed en he c'hlenved diveza : « Bet em euz da c'houzanv gant ar riou beteg mervel, koulz lavaret ».

Klasket e deuz atao ar baourentez vrasa. Epad he c'hlenved diveza e c'houlenne ma ne vije ket roet d'ezhi louzou hag a gouste ker; ne zrebe ket ar rezin a vije kinniget d'ezhi, pa ne oa ket red; netra dre blijadur. Chomm a felle d'ezhi en eur gamprig dister, pell deuz kambr ar re glanv gant aoun da viret outho da gouskat, pa e devoa kement a baz. Pa vije lakeat d'ezhi an ouarn ruz, hag he c'hoar Céline e deuz kountet eun devez meur a gant pikaden, e chomme var he golc'hed plouz, da grena an derzien, heb klemm morse na klask beza easoc'h.

Pa ioa iac'h, e deuz atao klasket al labour diesa ha digemeret atao en eur vousec'hoarzin, ar pezh a gave diez aberz ar re all.

Ar poaniou-ze, evithi a oa c'hoaz nebeut a dra e skoaz ar boan e deuz bet en he ene, en he c'houstianz epad trivac'h miz. An drouk

spered, gant aotre Doue, en doa digaset d'ezhi eun tentasion poaniuz meurbed, en eur lavaret d'ezhi ne oa baradoz ebet evithi. Neuze e pede muioc'h-mui hag e rea pinijen. Mont a ra da gaout Jesus ha diskuez a ra d'ezhan muioc'h c'hoaz a garantez. « Lavaret a rean d'ezhan, enezhi, ez oan prest da skuilla va goad evit diskleria ez euz eur baradoz ».

Bet e deuz an trec'h er vrezel-ze ha breman e red gant tiz var hent ar garantez evit Doue. — Anaout a rea mad an hent-se, pa z eo guir, adalek he zri bloaz, e doa kemeret ar pleg santel man : En em rei atao da Jesus hag ober pep tra dre garantez evithan. Araok he fask kenta e skrive : « Bemdez e klaskan ober kalz a sakrifisou bian, ne lezan hini ebet da vont abiou d'in ».

Buez Thérèse ar Mabig Jesus a zo bet atao eta eur vuez a zakrifisou hag evelse ez eo savet ken huel er zantelez.

O Mari, rouanez ar verzerien, c'houi hag oc'h euz ive bet kement da c'houzanv epad ho puez, goulennit digant Jesus evidomp, ar c'hras da c'houzanv gant kement a nerz ha zantez Thérèse ha da gaout ive perz e meritou Pasion ha maro ho Mab ».



EUN OFISER DIOUALLET GANT
SANTEZ THÉRÈZE EPAD AR VREZEL-VRAZ.

Ar « sous letanant » B. n'en doa ket a feiz. Evit ober plijadur d'he gerent'e kemeraz koulsgoude eur zac'h bian a oa enghan deuz relegou Sœur Thérèse ar Mabig Jesus, en eur lavaret ne ziskrokche morse outhan. — Eun devez ez oa start meurbed ar c'hrogad gant an enebourien hag hen a zelle er (périscopé) evit gouzout penaoz ez ea an traou, pa glevaz eur vouez o lavaret d'ezhan : « Kers kuit deuz al leac'h-se ». Da genta ne daolaz ket a evez. Ar vouez a lavaraz adare ar memez tra hag en trede guech e pouezaz muioc'h c'hoaz. Ar « sous-letanant », souezet maro, a zentaz hag eur pennadig goudeze, eun obus a gouezaz e leac'h ma oa. Ma n'en divije ket tec'het ez oa maro. — Eur c'hras ken kaër a leze ganhan buez ar c'horf hag a roe d'ezhan buez an ene, rak skriva a ra d'he dud : « Hiviziken e fell d'in beva e guir gristen, breman em euz feiz ha sœur Thérèse eo e deuz digoret d'in va daoulaged ». —

Goude ar vrezel e teuz da Lisieux dre anaoudegez vad evit trugarekad sœur Thérèse

ar Mabig Jesus, ha d'ezhi e roaz he groaz a enor.

Santez Mari,
pedit evidomp
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Eizved devez var-n-urgent

E buez Santez Thérèse ar Mabig Jesus ez euz hano aliez dezuz « Hent ar vugaleach spirituel ». — Evit hen rei eun nebeut da gompren Thérèse a lavare d'he Superiorez : « Va mamm, her gouzout a rit, me a zo bet atao em c'halon ar c'hoant da veza santel. Siouaz, pa velan ar zent e komprenan ez euz etre hi ha me kement a gemm ha ma' zeuz etre eur menez huel savet he gern beteg ar c'hroummoul hag ar c'hrouanen a zo dindan treid an dud var an hent. E leac'h falgaloni, koulsgoude, em euz lavaret : Doue ne laka ket e kalon an den mennoziou zantel pa ne c'hellont ket dont da veza guir; me ive a c'hell eta dont da veza santel, daoust pegen dister oun. Sevel hueloc'h na c'hellan ket, chomm a rankan gant va defaotou, a zo kement anezho, mes klask a c'hellan sevel d'ar baradoz dre eun hent berr hag eün.

Hirio en tiez pinvidig, e leac'h pignat an deleziou e ver savet en eur voetur, easoc'h eo

ha buanoc'h, ha me a zo re zister evit pignat deleziou poaniuz ar zantelez. Klasket am euz er Skritur-zantel ha kavet am euz ar c'homzou-man : « Mar doc'h bian deuit d'am c'haout », hag ar re-man ive : « Evel ma teu ar vamm da ziskouez karantez d'he bugel, me ive a zougo ac'hanoc'h var va c'halon hag ho luskello var va barlen ». Setu aze komzou' tener hag a ra vad d'am c'halon. Me a vezo douget eta d'ar baradoz var ho tivreac'h, o Jesus ».

Ar virionez-man a zo skrivet sklear en Aviel : « Ma ne deuit ket da veza evel ar vugale vian, ne gavot ket a zigor e rouantelez an Env. — Lezit ar vugale vian da zont d'am c'haout, a lavare Jesus, d'ar re a zo henvel outho eo rouantelez an Env. — Hag evit merka e komze ive d'an dud en oad, an aviel a lavar : « Ma ne deuit ket da veza henvel deuz ar vugale ». Ar re vraz eta a rank ive dont da veza bugale dre eur vuez nevez, m'o deuz c'hoant mont d'ar baradoz.

Mes penaoz beza henvel deuz ar vugale? Thérèze hen diskouez d'eomp. « Guelit eur bugel bian var breac'h he vamm. Aze n'en deuz aoun rak netra. Bian eo, dister, n'en euz netra dreizhan he-unan, n'euz soursi gant netra, he vamm a bourveo, en em lezel

a ra en abandon ganthi; n'euz nemed eun dra da ober : karet anezhi, hag he vamm ne c'houlen diganthen nemed he garantez. Setu aze penaoz e tle an ene beza gant Doue.

Nerz eur bugel bian eo he zempladurez, rak Doue a zo muioc'h douget da zikour he vugale pa deuont anezho ho-unan da anzaou ne c'hellont netra. Thérèze a lavare : « Evit beza savet beteg an env etre divreac'h Jesus, n'em euz ket ezom eta da greski, red eo d'in chomm bian ha dont da veza bianoc'h c'hoaz. Ar pezh a blij da Zoue ennhon eo guelet e karan beza bian, guelet va faouren-ter hag ar fizianz heb muzul am euz en he drugarez; Jesus eo a ra pep tra ennhon ha me ne ran nemed beza bian, dister ha karet anezhan. »

Distag mad oa eta a bep tra, deuz ar vuez zoken. — Epad he c'hlenved ar medisin en doa lavaret er gouent : « Var gant, taget gant ar c'hlenved-ze, diou marteze a c'helfe para ». Thérèze a ouezaz kementse hag a lavaraz : « Pebeuz maleur ma veffen-me unan anezho! ». — N'oc'h euz ket eta aoun rak ar maro? Oh, nann, emezhi, pa zonjan e komzou ar c'hatekis : « Ar maro eo an disparti etre ar c'horf hag an ene ». Penaoz

kaout aoun rak an disparti a unano ac'hanon da vad gant Doue ».

Pa'z eo guir ez oa en em roet oll da Jesus, e kave en he c'harantez evithan an oll mennoziou a zo ive e kalon Jesus hag e lavare : « Me am euz an oll vocationou : Me garfe beza den a vrezel, beza beleg, Abostol, merzer, evit gounit eneo da Jesus ha paea evit pec'hejou an dud dre an oll boaniou o deuz gouzanvet ar verzerien ».

A beleac'h e teue d'ezhi ar mennoziou kaër-ze? Deuz he c'harantez evit Jesus. Ar garantez-se a oa he buez, buez he c'halon ha buez he ene, evel ma'z eo ar galon buez ar c'horf.

Thérèse e doa, ken aliez, sonjet ervad en tenzoriou spirituel kuzet en ene an Itron Varia, ma komprene mad e teu Doue he-unan da binvidikad he ene. Atao e doa klasket lakad he buez da veza henvel deuz buez kuzet ar Verc'hez Santel e Nazareth. Evit se e doa kemeret hent bian ar « vuga-leach spirituel » hag e teske anezhan d'ar re all.

O Mari, Mamm Jesus, grit d'eomp-ni ive dont da veza bugale vian; ha m'on deuz sklabezet sae venn hor badiziant, grit ma

c'hellimp he goalc'hi dre eur vuez santel, evit mont ganeoc'h d'ar baradoz.

★ ★ ★

SŒUR THÉRÈSE A DEU DA GERC'HAT EUR ZOUARD KOUezet VAR DACHEN AR VREZEL.

Roger Lefebvre oajet a nao bloaz var-n-ugent a oa toer e Sant-Aubin (Eure) ha tad a famil. Da viz eost 1914 e oue rollet en 224 (infanterie). — Eur fizianz vraz en doa e sœur Thérèse ar Mabig Jesus anavezet mad en he vro, hag adalek neuze e pede anezhi ouspenn ugent guech bemdez. — Ar zeiteg a viz guengolo 1914 e Neuville, tost da Reims, var dro peder heur hanter, pa goueze an obuzou ker stank hag ar glao, e oue skoet gant c'huec'h tam obus; meur a wazen a oue troc'het en he c'houzoug, he benn a oue tizet ive, hag he vorzed hag he droad. Koueza reaz heb anaoudegez. Iénien an noz a reaz d'ezhan dont ennan he-unan hag e velaz e rede he c'hoad var an douar deuz he c'houliau digor. — Sempl da vervel, emezhan, e lavaraz gant kalz a feiz hag a fizianz : Va c'hoar Thérèse, deuit d'am zikour. Kerkent e velaz en he gichen ar zantez vian kaër ha leun a druez. En eun dorn e

talc'he eur groaz vraz ha gant egile e tibradaz ar zoudard hag e reaz eur c'hoarzaden d'ezhan, en eur vont kuit. Raktal ar paour keaz soudard ne'z oa mui ar memez hini. Ar goad a oa stanket, ar gouliou klozet. Mont a ra d'ar red beteg al leac'h ma roet sikour d'ar re a oa bet tizet, a oa pemp kant pas adrën. — Pa oue pare mad, Roger Lefebvre a deuaz da Lisieux gant he bried da drugarekad sœur Thérèse evit derc'hel d'ar vœu en doa great.

Santez Mari,
pedit evidomp.
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Naved devez var-n-urgent

Adalek he bugaleach kenta, Thérèse e doa bet atao ar zonz e varveche iaouank.

« An dri var-n-urgent a viz ebrel 1897, d'ar yaou gamblid, goude beza great penn-da-benn koraiz rust ar gouent, me en em gave iac'h mad, emezhi. E leac'h tremen an noz en adoration evel ar re all, e oue lavaret d'in mont d'am guele. Da hanter noz, a veac'h am boa lazet va goulou, ma santiz eun dra benag o sevel beteg leunia va ginou. Gallet am euz trec'hi ar c'hoant da velet petra oa; mintin mad, avad, em euz guelet ez oa va mouchouar leun a c'hoad. Komprenet em euz ez oa falvezet d'am muia karet, devez he varo var ar groaz, merka d'in, dre ar zonz kenta ez oa erru d'am c'herc'hat. Da vener ar Groaz em euz gallet ober pinijennou ar c'horaiz penn-da-benn. En noz varlerc'h, ha me laouen kaër o vont da gouskat, Jesus a roaz d'in ar memez merk e tostea ar mare da vont d'he gaout. Oh! na me a oa eüruz ».

Adalek neuze, he nerz a goueze bemdez. Chomm a rea koulsgoude var zao. Ar medisin en doa lavaret : « Na c'hellin ket he farea; an ene-ze n'eo ket great evit an douar ».

Da viz even, he zempladurez a greskaz hag aliesoc'h e krenche goad. Neuze ez oa ranket lakad anezhi e kampr ar re glanv. Keuz e doa d'he c'hamprrik paour ha dister, e peleac'h e doa kement pedet hag a ioa bet test deuz kement a boaniou kuzet hag a binijennou. « Klevet ac'hanon o pasad a zo poaniuz evit ar re all, emezhi ».

Eun devez, he c'hoarezed a oa ho zeir etal he guele hag e lavaraz d'ezho : « O va c'hoarezed karet, na me a zo eüruz, guelet a ran e ma tost ar maro; sur oun breman ». He c'hoar Marie du Sacré-Cœur a lavaraz : « Peger poaniuz e vezo d'eomp-ni, goude ho maro ». Oh, nann, eme Thérèse, laouen meurbed; *neuze e vezo eur glao roz*. Sonjal a ran er vad a c'hellin ober pa vezin beuzet e karantez Doue : lakad badezi ar vugale vian, sikour ar veleyen, ar visionerien, an Iliz a bez. Arabat d'eoc'h gouela ha pa livirin : « Me am euz poan, livirit : guell a ze, evit va zikour ».

Eun devez e lavaraz d'he c'hoar gosa Agnès de Jesus. Kredi a ran e man va labour

o vont da gommanz, ober d'an dud karet Doue evel m'Her c'haran va unan ha deski d'an eneoù va hent bian, hent ar fizianz e Doue hag an abandon etre he zaouarn. Ma selaou Doue ac'hanon, va baradoz a dremenno var an douar, *ia, me a fell d'in tremen va baradoz oc'h ober vad var an douar* ».

Adalek ar seiteg a viz eost ne c'hellaz mui kommunia, re aliez e krenche goad, ha tremen heb kommunia a oue he foan vrasa en deveziou diveza. Goulen a reaz he c'hrusifi evit pokat d'ezhan evel Santez Jeanne d'Arc, e kreiz an tan, ne ziskrogaz mui deuz he c'hroaz beteg he heur diveza.

Bevech ma teue, ar medisin a lavare d'ar Superiorez : « Ma c'houffec'h pegement a boan e deuz! n'em euz morse guelet gouzanv gant kement a joa dreist-naturel; eun eal eo ».

Unan deuz an nosvezioù diveza, he c'hoar, sœur Geneviève a velaz anezhi, he daouarn kroajet, he daoulagad varzu an env. « Petra rit aze, emezhi? klaskit kouskat. — « Ne c'hellan ket, hag e pedan ». — Petra livirit da Jesus? » — « Ne lavaran netra, He garet eo a ran ».

Adalek ar beure, an derzien a oa ken krenv, he foaniou ker braz ma ne c'heller ket hen lavaret. Sellet a rea gant karantez

deuz skeuden ar Verc'hez lakeat dirak he guele, an hini e doa mousc'hoarzet d'ezhi guechall ha roet d'ezhi ar pare, hag e lavare en eur juntra he daouarn : « Oh! pedet am euz anezhi gant kement a garantez! breman e *man* an angoni heb tam konsolasion ».

An oll leanezed a oa en dro d'ezhi : « Oh, va c'hoarzed, pedit evidon, n'em euz ket a geuz da veza en em roet d'ar garantez ».

Epad div heur, ronkel ar maro a freuze he diabarz, krena a rea he oll izili, hag eur c'houezen ien a c'hleppe an dillad vele. — Var dro seiz heur e lavaraz d'ar superiorez : « Va Mamm, n'eo ket c'hoaz an angoni »? « Eo, va merc'h, Doue marteze a astenno anezhi eur pennad c'hoaz ». — Mad, eme Thérèze, ne garfen ket kaout nebeutoc'h a boan ». Neuze e sellaz deuz he c'hrusifi en eur lavaret, gant kalz a boan : « Me a gar anezhan, va Doue... me... ho... kar ».

Setu aze he c'homzou diveza. Eur penna-dig goude, he fenn a gouezaz var ar pluek, laouen ha koant evel an deiz. An dregont oa a viz guengolo da seiz heur abardaëz. Thérèze e doa pevar bloaz var-n-ugent ha nao miz. Marvet eo en eun akt a garantez hag he buez penn-da-benn n'eo bet nemed eun akt a garantez.

O Mari, digemeret oc'h euz gant kalz a joa, var ho kalon a vamm, ar fleuren vian a garantez, renit ac'hanomp-ni ive var an hent bian hag eaz e deuz digoret d'comp pried ho Mab Jesus, evit ma c'hellimp kaout ive eur maro dous goude beza renet eur vuez santel.

★ ★ ★

Eun den hag a zo e penn afferiou braz (industrial), e departamant au Nord, a skriv da Lisieux. « Eur procès poaniuz hag a venne diskar va fortun ha va lakad e renk ar beorien, a zo o paouez achui ha bet am euz ar gounid. Deuz va zu em boa kalz a rezoniou mad, eun dra oa kouls-goude ha ne c'helle beza trec'het nemed gant sikour Doue.

Deut so da zonj d'in er garantez hag an devo-sion dener e deuz va merc'hig iaouank evit sœur Thérèze ar Mabig Jesus, ha pedet em euz anezhi. Selaouet oun bet en tu all d'am esperanz.

Mont a rin da Lisieux; araok mont kouls-goude, e kasan d'eoc'h an testi-man, hag abalamour n'oun ket goal droet gant ar religion, e vezo guelloc'h selaouet.

Lavaret a ran avechou evelhen ennhon va

unan : En env, ar zent a zo oll kement ha kement dirag Doue, Thérèze ar Mabig Jesus, koulskoude, a zo deuz hon amzer, anavezet e deuz sempladurez an dud pa e deuz bevet assamblez ganeomp hag abalamour da ze e kompren guelloc'h ac'hanomp hag he c'halon a zo muioc'h digor d'hor pedennou ha d'honezommou.
 — *Ar zent braz deuz an amzer goz, pa oa krenv ar feiz etouez an dud, a zo pell diouzomp; Thérèze a zo tostoc'h d'eomp, hi eo, a gredan, al liam etre ni hag hon Tad pehini a zo en env ha ne ehan ket da bedi evidomp ha d'hor zikour.*

G. D.

Santez Mari,
 pedit evidomp,
 Santez Thérèze ar Mabig Jesus,
 pedit evidomp.

Tregontved devez

A veac'h e doa Thérèze ar Mabig Jesus tennet he huanad diveza ma oue gullet var he bijaj evel eur skeud deuz eurusted an env. Guiska a rer d'ezhi he dillad leanez ha var he fenn ez euz eur gurunen roz. — E kouenchou ar C'harmel e vez lakeat korf al leanezed maro er c'hœur dirag ar grill, ho fenn hag ho zreid dizolo, epad eun devez araok an enteramant. Pa oa klevet ez oa maro ar zantez, an dud a deuz aleiz da velet, eur vech c'hoaz, ar rouanez vian ken anavezet gant an oll. Pep hini a c'houlenne ma vije touchet deuz ar c'horf, eur chapeled, eur vedalen pe traou all, rak ar brud deuz he zantelez a oa eat dre gear.

Thérèze ne zaleaz ket da zerc'hel d'he ger : « ober vad var an douar ». Er gouent ez oa eur « sœur converse » klanv pell a ioa gant ar zempladurez en he empenn. Hومان, eun devez, a oa bet rust e kenver Thérèze. Breman, o velet pegen kaër oa bet he buez hag he maro, e sonje gant tristidigez ha gant keuz

er pezh e doa lavaret. Dont a ra da gichen ar c'horf maro, lakad a ra he fenn, he zal, epad eur pennad mad var treid al leanez hag en eur zevel en eur gav pare. Setu ar mirakl kenta.

Al leanezed, er gouent, a zante c'houez-vad e pep leac'h, c'houez ar roz hag al lili.

Deut oa ar mare koulskoude da zebelia ar c'horf maro ha da guzat deuz al leanezed dremm ho c'hoar, koant evel eun eal.

Kalz a veleyen a oa deut evit enori an hini a bede kement evit ar veleyen. Nebeut a dud, koulskoude a heulie an enteramant.

En eur c'horn deuz ar vered a vije enteret leanezed ar C'harmel. Eno ez oa great bez Thérèse ha goude ar pedennou, an oll a ieaz kuit. Eur groaz koat a verkaz, epad pell amzer ar bez, ha dindan an hano « Sœur Thérèse ar Mabig Jesus » e c'hellet lenn ar c'homzou-man : « Me a fell d'in tremen va baradoz oc'h ober vad var an douar ».

Heb dale ar c'homzou-ze a oue komprenet gant an oll. — Ar vad kenta a reaz al leanez santel, a oa evit an eneou, er gouent hag e leac'h all, ha miraklou braz a oue gullet heb dale.

Beza oa e Seminer Bayeux eun abad deuz Lisieux hanvet au Aotrou Anne. Bet en doa

iee'hed beteg ar bloaz 1904; neuze e kouezaz varnhan ar c'hlenved a langiz ha daou vloaz goude e rankaz chomm var he vele goude beza krenchet goad. Ar vedisined a velaz buan pegen doun ez oa eat ar c'hlenved en he skiven; n'en doa nemed eun devez benag da veva. Ober a rer eun naved da sœur Thérèse ar Mabig Jesus hag en he gichen e lakear eur relegou benag deuz al leanez santel. — An hini a oa var he dro a lavaraz d'ezhan ober ar sakrifis deuz he vuez. An abad ne falveze ket d'ezhan mervel. Kregi a ra er relegou a oa en he gichen, ho starda a ra var he galon en eur lavaret, a spered hebken : Thérèse vian, c'houi a zo er baradoz, sur oun, me a zo var an douar hag aman ez euz kalz a vad da ober, red eo d'eoc'h parae ac'hanon. — A veac'h m'en doa great he c'houlenn gant eur fizianz, emezhan, ha n'en doa ket santet c'hoaz, ma savaz en he goazez. Na poan, na berr alan, na terzien. Iac'h oa.

Ar vedesined galvet raktal a lavar ez eo eur resurrection. Hirio an Aotrou Anne a zo person hospital vraz Lisieux; soursial a ra deuz eiz kant, a zo en hospital hag he iee'hed ne'zeo bet biskoaz guelloc'h. Ar mirakl se a zo unan deuz an daou pe tri a zo bet studiet araok lakad Thérèse ar Mabig Jesus e renk

au dud eüruz hag an Aotrou Anne he-unan a zo bet test er procès great evit se.

Raktal goude he maro e oue moulet al leor burzuduz-se skrivet ganthi he-unan hag hanvet *Histor eun ene*. Dreizhan eo bet anavezet Thérèze da genta, dre ar bed oll, rak tremen pevar c'hant mil anezhan a zo etre daouarn an dud; ha troet eo bet e meur a iez, var dro pemp var-n-ugent.

O Mari, varc'hoaz e man an devez diveza deuz ho miz karet. Ni on devezo sonj deuz ar miz-man abalamour m'on deuz tremenet anezhan gant Santez Thérèze ar Mabig Jesus. Dre ho taouarn-c'houi eo e deuz Thérèze kement a c'hrasou da skuilla var an douar. Roit d'eomp ive kalz a zevosion hag a garantez evit ho Santez vian, ma c'hello hor zikour da vont d'he heul d'ar baradoz.



EUR SERGENT KONVERTISET GANT SANTEZ
THÉRÈZE A RO D'EZHİ HE GROAZ A VREZEL
HAG HE VEDALEN MILITAIRE.

Goude ar vrezel, an dri a viz kerzu 1918, eur
sergent iaouank daoulinet etal bez Sœur Thé-

rèze, a rea d'ar belerined a ioa vardro, sellet outhan. He zoare da bedi, an daélou a velet en he zaoulagad, a verke pegement en doa a zevosion hag a anaoudegez-vad. Pell amzer e chommaz var bennou he zaoulin hag araok mont kuit e tistagaz divar he beultim he groaz a vrezel hag he vetalen militaire evit ho staga var ar groaz a zo var bez Thérèze, er vered.

O velet an dra-ze, sakrist ar gouent hag a ioa dre eno, a deuaz sioul da lavaret d'ezhan. « Mar e man en ho sonj lezel an « décorationou-ze » gant sœur Thérèze, e vesse guelloc'h « ho c'hass d'ar gouent, rak ac'halen e c'helfent beza kemeret ».

(E chapel Lizieux, kalz deuz ar mogerioù a zo goloet gant ar c'hroazioù a vrezel, kroazioù a enor hag armou ofiserien; meur a gant a zo anezho, kinniget da zantez Thérèze evit he zrugarekad).

Ar sergent kristen a lavaraz (ia). « Kement, emezhan, a rankan d'ezhi! Hi eo e deuz konvertiset ac'hanon. N'em boa nemed pemp bloaz pa 'z eo maro va mamm, hag abaoue va fask kenta em boa dilezet Doue. Eur miz hebken a zo abaoue m'ac'h anavezan anezhi; o lenn he buez, va c'halon a zo bet chenchet. Va zad a vezo euruz, rak kalz a boan a rean d'ezhan ».

Eun nebeut mizioù goude, ar sergent distro

da Zoue a zo eat e kouent an Trapisted, hag eno ez eo eur skuer evit an oll. Var bez sœur Thérèse en doa klevet mouez Doue o c'hervel anezhan.

Santez Mari,
pedit evidomp.
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

Kenta devez ha tregont

An nep en em izela a vezo savet huel.

Ar gouel braz kenta en enor da Thérèse ar Mabig Jesus a oue great en devez ma 'z eo bet digaset he relegou deuz ar vered da chapel ar gouent.

Pa oue digoret ar bez, eun niver braz deuz ar re o doa gallet tostad a zantaz ar c'houezvad a deue diouthan. Eur bugel bian ha ne c'helle ket loc'h, a oue laket var an arched ha rakal e oue paret. Hanter kant mil den hag ouspen a oa diredet da Lisieux deuz a bep bro. N'eo ket enteramant ar re baour a rer hirio, evel trizeg vloaz araok. Meur a hini klanv a gavaz ar pare en devez-se, dreist oll eun ofiser tizet er vrezel ha na c'helle ket bale, eur plac'h iaouank dall a gavaz ar guele. Mes kalz kaëroc'h a vezo guelet diveza-toc'h.

An nao var-n-ugent a viz ebrel 1923 Thérèse ar Mabig Jesus a zo diskleriet « Plac'h

eüruz » en iliz veur Rome, e kreiz eur solanite he ne c'heller ket rei da gompren. Pemp ha daou ugent Arc'heskop pe Eskop hag eur niver braz a dud deuz ar renk huela.

Epad an oferen, an oll veleyen, meur a gant anezho, a lavar assamblez gant eskop Bayeux, a gane an oferen, ar beden great evit ofiz ar Plac'h Eüruz : « Va Doue, lavaret oc'h euz : «Ma nedeuit ket da veza henvel deuz ar vugale vian, n'o pezo ket a berz e rouantelez an env; ni ho ped, grit d'comp heulia ker mad roudou ar Verc'hez Eüruz Thérèze, var hent an humilite hag an izeldet a galon, ma veritimp kaout perz en he eürusted eternal ».

E Lisieux ar gouel a oue ken kaër all. Eur c'hardinal deuz Rome, an hini en doa kement labouret evit gloar ar Plac'h Eüruz, a oa er penn, en hano ar Pap, hag ar relegou zantel a oue douget e procesion er voest kaër alaouret roet gant ar Brézil (Amérique).

An enoriou-ze ker braz, o dpa marvad gounezet kalon Thérèze, rak adalek neuze, ar miraklou a greske bemdez hag a bep tu e c'houlennet ma vije lakeat e renk ar Zent.

An Iliz a blegaz da gement a viraklou hag a bedennou ha daou vloaz hebken goude, ar pezh ne oa ket bet gullet c'hoaz, ar Plac'h Eüruz a zo lakeat e renk ar zent var an aoteriou.

Ar zeiteg a viz mae, 1925, pevar-ha-tregont Kardinal, ouspenn daou c'hant etre Arc'heskibien hag Eskibien, beleyen ha relijiuzed ha villerou, a deu e procesion araok ar Pap Pi XI douget var he gador a Bap ha laouen evel an deiz. Tremen hanter kant mil den a zo en iliz vraz Sant Per, hag an oll a strak ho daouarn gant ar joa.

An hini a zalc'h plas sant Per ha plas Jesus-Christ a ia da ziskleria d'ar bed oll e man Thérèze ar Mabig Jesus e gloar ar baradoz. An ilizad tud a zo sioul breman hag ar Pap a lavar ar c'homzou a ia da lakad an Iliz da gana eun (hosanna) burzuduz :

« Evit enori an Drindet Santel ha pep-hini deuz tri ferson an Drindet, evit sevel hueloc'h ar feiz katholik, evit ma 'z ai-ar Religion var gresk atao, dre c'halloud hag autorité hor Zalver Jesus-Christ hag an Ebestel Sant Per ha Sant Paol; goude beza sonjet mad ha pedet aliez evit goulenn sikour ha sklerijen ar Spered-Santel ha goude beza goulennet kuzul digant hor breudeur Kardinaled an Iliz Santel, Katholik ha Roman, e tiskleriomp ez eo SANTEZ ar Plac'h Eüruz Thérèze ar Mabig Jesus hag e lakeomp anezhi var roll ar Zent; ha bep bloaz, an dregont a viz guengolo, e vezo great he gouel en Iliz dre ar bed oll. En

hano au Tad, ar Mab hag ar Spered Santel ».

Setu komzou ar Pap, an Hini ne c'hell ket fazia; ha kerkent kement kloc'h a zo e tri-c'hant iliz kear Rome a gan meuleudi d'arzantez nevez.

Kear Lisieux e deuz ive he lod da ober. Great e vezo gant eur solanite ha ne oa ket bet guelet c'hoaz. Kear ne oa bet biskoaz guisket ken kaër : Tri Gardinal, ouspenn tregont Eskop deuz ar zao-heol hag ar c'huz-heol, tud a bep bro, a bep iez a zo e procession varlerc'h relegou Santez Thérèse, anavezet gant kement a dud c'hoaz e Lisieux. — Lod a gane, kalz a ouele, hag ar Zantez a dra zur, e deuz plijadur o vont da velet an ilizou e pere e karie mont da bedi, araok mont d'ar gouent.

Siouaz an deveziou kaëra var an douarman a rank tremen, er baradoz hebken e vezo ar gouel kaër ne dremeno ket ».

Santez Mari,
pedit evidomp,
Santez Thérèse ar Mabig Jesus,
pedit evidomp.

TAOLENN

	Pages
Evit digeri Miz Mari	7
Kenta devez	13
Eil devez.	20
Trede devez.	25
Pevare devez.	30
Pemped devez.	36
G'huac'hvet devez	42
Seizved devez.	48
Eizved devez.	54
Naved devez.	60
Dekved devez.	66
Eunnegved devez	72
Daouzegved devez	78
Trizegved devez	84
Pevarzekved devez.	90
Pemzekved devez	97
G'huezekved devez	104
Seitegved devez.	109
Trivac'hved devez	115
Naontekved devez	121
Ugentved devez	127

Kenta devez var-n-ugent.	134
Eil devez var-n-ugent.	139
Trede devez var-n-ugent.	145
Pevare devez var-n-ugent.	151
Pemped devez var-n-ugent.	157
C'huec'hved devez var-n-ugent.	163
Seizved devez var-n-ugent.	169
Eizved devez var-n-ugent.	175
Naved devez var-n-ugent.	181
Tregontved devez.	187
Kenta devez ha tregont	193

MORLAIX, IMPRIMERIE LOUIS BOCLÉ
9 bis, rue Gambetta.

IMPRIMERIE LOUIS BOCLÉ
———— MORLAIX